

Herve Gouedard

Enez-ar-Gerveur

Un damsell istorel

EMBANNADURIOÙ AL LIAMM
2023

Embannet gant skoazell Rannvro Breizh
Ezel eo Embannadurioù Al Liamm eus Kuzul ar Brezhoneg

Golo : CC BY 2.0 - Vincent Desjardins

ISBN : 978-2-7368-0165-6
EAN : 9782736801656

© 2023 Herve Gouedard & Embannadurioù Al Liamm

Tachenn Volta 2 - 1 straed Ampère - 22300 LANNUON
sekretourva@alliamm.bzh
www.alliamm.bzh

TAOLENN

Ur ger a-raok	7
Lec'hiadur, torosennadur, douarouriezh, hin, struzh ha loened	11
Lec'hiadur	11
Torosennadur ha douarouriezh	12
Hinad	14
Struzh	15
Loened	16
Ar pesked, ar c'hrestenneged, ar c'hrogenneged	18
Ragistor	19
An Henamzer : ar Weneded, ar Romaned hag ar Saksoned	23
Donedigezh ar Vretoned	28
Lec'hanvadurezh	30
Anv an enezenn	30
Anvioù ar parrezioù	31
Anvioù ar c'hêriadennoù	33
Anvioù an tachennoù-douar, ar parkeier, an ogelloù hervez an dachennaoueg ...	36
An anvioù-lec'h en aod	44
Breud taer etre div abati galloudus	46

Mistri an enezenn : eus ar venec'h d'an dudjentil, eus an dudjentil d'ar roue. .	49
Freuz-difreuz al laeron-vor ha reuzioù ar brezel.	53
Notennoù diwar-benn al labour-douar. .	60
Doare ar c'hêriadennoù hag an atantoù. .	64
Emdroadur al labour-douar en XX ^{vet} kantved	68
Un atant skouer : Bruté de Rémur ha Jean-Louis Trochu	70
Taolioù-amzer, peñseoù ha saveteerien war vor.	75
1999 : peñse an Erika.....	79
Ar saveteerien war vor en istor	81
Ar saveteiñ war vor bremañ	83
Tourioù-tan Ar Gerveur	85
Ar sardineta hag ar pesketaerezh dre vras	89
Stumm hag akipajoù ar bagoù-sardineta	93
Ar chanterioù sevel listri.	96
Ur ger bennak diwar-benn an touneta .	97
Ar friturioù.	98
Penaos ez ae al labour en-dro ?.....	100
Etre 1789 ha 1814 : darvoudoù an Dispac'h hag an Impalaerded.	102

An Akadianed	114
Orin an Akadianed	114
Heskinerezh a-berzh ar Saozon	115
Ur bobl kantreat	116
An Akadianed o tiazesañ er Gerveur	117
 1886 : Claude Monet er Gerveur	121
 An tiez-kastiz, adal 1804 betek 1977.	124
Galeourien, prizonidi bolitikel, fellerien yaouank	124
 Brezel 14-18	135
 Brezel 39-45	142
Gwengolo 1939- Even 1940	142
Even 1940 betek Mae 1945	146
 An touristerezh	149
 Ur ger c'hoazh evit klozañ	155
 Stagadenn	156
Deiziadoù pennañ istor Enez-ar-Gerveur hag inizi Houad hag Edig	156

*« Ho pet koun eus an darvoudoù
kentañ, en amzer gent. »*

Izaia, 49-6

*Dediet eo al levr-mañ d'am
mignon a-wechall-gozh Gwenn
Guillemot, a zigoras din dorioù ur bed
na ouien ket e oa anezhañ.*

Ur ger a-raok

Bremaik e vo daou vloaz ma teuas er-maez ar studia-dennig istorel am boa savet diwar-benn Enez-Vriad¹. Abaoe ez on en em lakaet war studi un enezenn all, brasoc'h an tamm anezhi : Ar Gerveur. Daoust d'an disheñvel m'eo an div enezenn, ez eo peuzheñvel an daou levr, dre ar spered hag an awen da vihanañ : el levrig-mañ ivez em eus klasket taolenniñ doareoù diavaez an enezenn ha displegañ istor an dud o deus bevet ha poaniet enni, aba ez eus koun, a remziad da remziad, tre betek hor c'hantved. N'eus ket bet fellet din sevel un istor darvoudel hepmuiken avat, ha klasket em eus kentoc'h teurel sklêrijenn war arvezioù a zo eus buhez an dud, en ur zerc'hel kont eus kenefedoù an endro, ar gevredigezh hag an armerzh.

Mar 'm eus klasket sevel kronik an enezenn, n'eo ket evit skuilhañ forzh daeroù war un amzer gozh hag a vije bet gwelloc'h ha plijusoc'h eget an amzer a zegouezh ganimp, nag evit ober luskell d'un hiraezh dizoare. Kement hini en deus bet tro da blediñ tamm pe damm

1 Herve Gouedard, Enez-Vriad, un damsell istorel, Al Liamm 2021

gant an istor a oar n'eo ar c'heuz d'an *oadvezh aour* traken nemet un touell hag ur sorc'henn, ha kentoc'h eget magañ soñjoù didalvez ez eo gwelloc'h ha furoc'h gwelet an traoù evel ma oant... E kement ha ma c'hallomp, eveljust, kaout ur skeudenn wirion eus ar c'hantvedoù bet. Kaer a zo ober avat, ne c'hallomp gwelet an tremened nemet gant hon daoulagad, hag ar sell a daolomp war ar remziadoù kent a vo atav gwariet gant talvoudegezhioù ha rakvarnioù ar bed emamp o vevañ hag o klask ober hon treuz ennañ. Alese ar goulenn meur : daoust ha ne vefe ket kement enklask istorel a zo un embregadenn gouestlet da c'hwitañ ?

Me a garje bezañ taolennet gwelloc'h, klokoc'h ha pishoc'h buhez pemdeziek an enezidi, met, siwazh, re gaezhig den e oa Yann Gouer, ha Yann Besketaer a oa ivez re zister e zellid, moarvat, evit ma vije bet kavet paot a roudoù paper diwar o fenn. Treut eo bet an eostad eta.

Bezeta vezo, kalz a blijadur a hetan d'al lennerien, ha kement a zudi dezho o lenn al levrig-mañ hag am eus bet, me, ouzh e skrivañ.

An darn vuiañ eus an arroudennoù a gavor el levr-mañ e lizherennoù tev ha stouet a zo bet tennet eus tri levr. Da viret na ve pounneraet kalz al lennadenn e vo roet bep tro, e traoñ ar bajenn, ar meneg eus ar vammenn e stumm daveoù berraet :

Theodore Chasle de La Touche, *Petite histoire de Belle-Île-en-Mer*, Editions Régionalismes, 2006 : **dlt**

Charles Floquet, *Belle-Île, Houat et Hoëdic*, Editions Keltia Graphic, 1996 : **flo**

Louis Garans, *Belle-Île-en-Mer, Histoire d'une île*, Editions Palantines, 2012 : **gar**

Pa vo daveoù all e vint roet en o fezh.

Lec'hiadur, torosennadur, douarouriezh, hin, struzh ha loened

Lec'hiadur

Ar brasañ enezenn a Vreizh eo Enez-ar-Gerveur.

He c'havout a reer er su da veg-douar Kiberen. N'eus damdost ac'hano nemet div enezenn all, hini Houad hag hini Edig, bihan, dister ha paour en he c'hichen.

Neb a fell dezhañ mont pelloc'h, er gwalarn, a gavo Enez-Groe, dispartiet diouzh an douar-bras gant un odevor ha n'eo ket gwall ledan.

Eus tu ar reter, a-ledred gant Ar Gerveur, war an douar-bras, setu gourenez Ar Groazig ha Gwennran.

Pell a-walc'h diouzh an douar-bras emañ an enezenn :

- Etre Ar Gerveur ha Kiberen, en norzh, ez eus 12,3km.
- Etre Ar Gerveur ha Porzh-Tudi (Enez-Groe), er gwalarn, ez eus 50km.
- Etre Ar Gerveur ha gourenez ar Groazig, er reter, ez eus 40km.

Torosennadur ha douarouriezh

Ur bladenn, dezhi 17km hirder ha 5 betek 9km ledander eo Enez-ar-Gerveur. Durc'haet eo ar bladenn-se, dezhi ur gorread a 84 km², war un ahel gwalarn-gevred. Tapout a ra an enezenn, en hec'h uhelañ, 73 metr, e Lokmaria, met an tornaodoù en-dro dezhi ne savont morse uheloc'h eget 40 metr a-us da resed ar mor, well-wazh.

Dastroc'het eo an tornaodoù-se gant paot a saonnenoù bet kleuziet gant gouverioù hag a red diwar ar geinenn greiz etrezek ar mor, betek tapout an traezhennoù hag an oufoù. Penn-da-benn gant ar geinenn greiz-se eo ez eo bet terket, a-bell-gozh, brasañ hent an enezenn, a gas eus Beg-ar-Polen, er gwalarn, da Lokmaria, er gevred. Kalz a gemm a zo etre kreiz an enezenn, ma kaver tro-ha-tro lanneier treut ha parkadoù edeier, ha dirabañsoù saonoù an arvor, andoret klok, enno pradeier druz ha tiez gwennrazet souchet e plegoù an douar. E deun ar saonoù ez eus bet e-pad pell pradeier hag a veze gounezet aketus gant ar gouerien. Bremañ avat, gant dilez al labour-douar abaoe un hanter-kant vloaz bennak, e vez lezet ar braz eus ar saonoù-se e fraost, ha kement-mañ a ra gaou ouzh kempouez ekologel an enezenn hag ouzh ar vevliesseurteud.

An oufoù goudoret ez eus bet tennet splot diouto evit diazezañ porzhioù-mor, an daou vrasañ anezho o vezañ Saozon ha Porzh-Lae, durc'haet o-daou d'an douar-bras. En tu-hont d'an daou borzh-mor-se e ranker menegiñ ivez havroù bihanoc'h : Ar C'hozh-Kastell, Kerel, Goulfar ha Pouldon.

Ret eo lakaat diforc'h ivez etre tu kreisteiz an aod, rust, uhel, durc'haet d'ar seizh avel, ha diaes tostaat outañ dre vor, daoust ma kaver eno ivez un nebeud traezhennoù

plijus o dourioù klouar, ha tu an hanternoz, izeloc'h e dornaodoù, hag aes a-walc'h da ziraез. Eno eo e kaver an daou borzh brasañ emaomp o paouez ober anv anezho : Saozon ha Porzh-Lae. Eno eo e weler ivez an traezhennoù brasañ : ar Sableg-Vras ha Bordardoue. Gouverket eo bet gant ar skrivagner Gustave Geffroy ar c'hemm bras-se etre tu hanternoz ha tu kreisteiz an enezenn :

« Ar Gerveur ! Bravat douar ! Parkeier, kêriadennoù, tiez, gwenodennoù, milinoù-avel trolinennet ken fraezh etre an oabl hag ar mor, ken ma kreder a-wechoù gwelet un dresadenn douaroniel bosek un disterañ ; un tamm douar distag diouzh ar c'hevandir, o trivañ war an tonnoù, e-giz ur radell gaer hag a ya ul lodenn anezhi war-zu ar mor war-bouez un dinaouenn skañv ha traezhennek, endra ma sav uhel al lodenn all, gant he reier uhel ha tolzennek, e tu ar mor-bras, evel c'hoant ganti skeiñ d'an donvor !² »

Diwar laez an enezenn e tap pell ar gwel betek aodoù an douar-bras. Sed ar pezh a skrive er bloavezhioù 1840 Chasle de La Touche, bet maer Porzh-Lae ha kenkoulz istorour Ar Gerveur :

« A-nozezh e weler daou dour-tan Enez-Groe, ha tourioù-tan all : hini an Tagnouz, hini Edig, hini ar Forn hag ar Piler. Er Gerveur ez eus daou dour-tan, unan e Porzh-Lae, hag unan all e Kervilaouen, e-tal an aod gouez. En holl ez eo eizh tour-tan eo a weler. War an deiz, pa vez sklaer an amzer, e weler Enez-Groe, gwikadell Porzh-Loeiz, tour bras porzh An Oriant, tourioù-iliz An Alre, Santez-Anna, Gregam, Lokentaz, Bourc'h-Baz hag Ar Groazig ; gwelet a reer ivez holl vunudoù an aod : Porzh-Loeiz hag Etel, Kiberen ha

2 Gustave Geffroy, Monet, sa vie, son oeuvre, éditions Crès, 1922

Karnag, Krac'h, Lokmaria-Kaer, Porzh-Navalo ha Sant-Weltaz. Gwelet e vije ivez genoù ar Wilen, panave ma vez kuzhet gant tolzennad Enez-Houad, evel ma vez kuzhet genoù al Liger gant Enez-Edig. Emañ homañ e-tal porzh Lokmaria, hag Enez-Houad en em gav e-tal Porzh-Lae³. »

An enezenn ez a karregadoù volkanek d'hec'h ober, ha n'eus koulz lavaret greunvaen ebet warni, e kemm diouzh ar vein a gaver e-tal dezhi war an douar-bras pe en inizi Houad hag Edig. Skilt ha kouarz eo ar vein a gaver ar muiañ war an enezenn, ha kement-mañ n'eo ket bet hep kaout ul levezon bennak war an tisaverezh : ar skilt a c'haller sevel mogerioù gantañ, evel-just, met evit ar vein-korn, ar c'horbelloù, ar gourinoù-dor, ha, dre vras, evit an holl savadurioù bras, ez eus bet ranket, a-holl-viskoazh, degas greunvaen eus an douar-bras. A-us d'ar skilt ha d'ar c'houarz ez eus ur gwiskad tev a-walc'h a zouar atil hag a zo mat evit al labour-douar. Amañ-ahont en enezenn e kaver ivez taouarc'hegoù.

Hinad

Un hinad veurvorel, klouar ha gleborek eo a ren war Enez-ar-Gerveur.

Dasparzhet e vez ingal ar glaveier a-hed ar bloavezh, met nebeutoc'h anezho a vez en hañv, a zo un amzervezh sec'hoc'h ha rann dommañ ar bloaz. Kalz nebeutoc'h a c'hlav a vez war an enezenn eget war an douar-bras (150 devezh glav well-wazh).

Klouar e vez ar goañvezhioù hag heoliet mat e vez an enezenn (ouzhpenn 2000 eurvezh er bloaz). Nebeut

a revennoù a vez ha muzuliañ a reer atav 2 pe 3 derez uheloc'h eget war an douar-bras.

Er goañv e sav alies barroù-amzer spontus, ha skubet e vez an enezenn neuze gant fourradoù avel ha ne vez harz ebet dezho.

Struzh

Gant an temz-amzer-se n'eo ket souezh e rafe berzh war an enezenn ar plantennoù kreizteizel, ha kreizdouarel zoken, evel ar gwini krap, ar palmez hag ar gwez-fiez. Kreskiñ a reont puilh-ha-puilh, dreist-holl er saonennoù gwaskedet klok a gaver stank en enezenn.

An henstruzh – lanneier brousgwezek – ne chom ket kalz a dra dioutañ, rak difraostet eo bet lodenn greiz an enezenn adal an X^{vet} kantved gant leaned eus abati Sant Salver, eus Redon, a zo bet an enezenn en o c'herz e-pad pell. Rannet e oa bet an douaroù neuze e lodennoù a 20 hektar, hag abaoe ar mare-se ez eo douar-gounid eo a gaver en takadoù-se.

Er XVII^{vet} kantved ez eus bet lakaet plantañ, diwar intrudu an ijinour labour-douar Gabriel Ruté de Rémur, koadadoù pin ha kistin war an douaroù fraost. Ur c'hoad a zo bet plantet ivez e Porzh-Lae, tro-dro d'ar gouriz kreñvaat bet savet gant Vauban.

Er su hag er mervent e kaver en aod letonennoù touz devet gant ar fru. Al letonennoù-se e kresk warno, puilh ha dieub-kaer, louzoù-an-troc'h ha teod-naer.

An tevennoù e kaver warno aster ha paot a orkide, dreist-holl en takad tro-war-dro da Borzh-Donnant.

War an douaroù treut ez eo lanneier eo a gaver, warno flach, lann, brug, raden, balan hag elestr :

« *War-bouez ar re a gresk war an tornaodoù (evel*

m'emañ e Beg-ar-C'havr, er Gerveur pe war Enez-Groe), eo al lanneier disoc'h an difraostadegoù meur bet kaset adalek an Neolitik, astennet a-galz er Grennamzer ha bet tizhet o emled brasañ gante e-kreiz an ^{XIX^{vet}} kantved⁴. »

Tennañ splot a rae an atantoù gwechall diouzh al lanneier-se, ken evit al labour-douar, ken evit ar sevel chatal. Tamm-ha-tamm ez int bet dilezet avat, adal eil hantervezh an ^{XIX^{vet}} kantved peurgetket, ha cheñch a ra ar struzh a gaver warno – muioc'h-mui e vezont aloubet gant ar spern-du – da vihanañ evit al lanneier a gaver e diabarzh an enezenn, rak lanneier an aodoù, rustoc'h o endro, ne gemmont ket nemeur. Notennomp ivez ez a kalz tachennoù douar atil da strouezheg en-dro abaoe ma nebeuta niver ar gouerien.

Loened

Ar bronneged : e-touesk ar re vrasañ anezho e ranker menegiñ an heureuchined, ar gedon hag ar c'honikled. A-hend-all e kaver bronneged mentet bihan-bihan : morzigelled ar c'hoadeier, minoc'hed boutin, logod ha gozed. Daou spesad a razhed a gaver ivez : ar razhed du hag ar razhed rous.

Ar stlejviled : an enezenn e kaver warni a-bell-gozh a bep seurt stlejviled : naered (*natrix-natrix*), anafed, glazarded ar mogerioù (*podarcis muralis*) ha gurlazed (*lacerta viridis*). Er poullou e kaver raned ha randouseged brizh (*pedolydes punctatus*), a glever o koagal en nevezamzer.

Al laboused : ne vo ket meneget amañ an holl spesadoù laboused a gaver er Gerveur. Koulskoude, evit kaout un

4 War lec'hienn Bécédia: <https://bcd.bzh/becedia/br/lanneier-breizh-etre-dec-h-hag-arc-hoazh>

distrap eus ar re a weler o plavañ en oabl, o neizhiañ er gwez, er girzhier hag er brouskoadoù, pe e faoutoù ar vri tro-war-dro d'an enezenn, sed amañ dindan unanoù anezho, ar re heverkañ marteze :

Al laboused-preizh :

- Ar sparfell, ar barged, ar gaouennez, an toud.

Laboused hag a zo kenkoulz kigdebrerien ha greundebrerien :

- Ar vran, ar gavan, ar big.

Laboused an douar :

- An dube, ar gudon, ar goulm, ar glazaour, an drask, ar vorzevelleg.

- Ar voualc'h, ar goukoug, ar c'habelleg (alc'hweder), ar glujar.

- Ar c'hogenan, ar golvan, ar filip, ar pabaour, ar sidan.

- Ar gannerez-dour, ar beleg, ar glozard, ar fouin, ar rujodenn.

- An eostig, an troc'han, al laouenan, ar pennglaou, ar pennduig.

Laboused an arvor ha laboused-mor :

- Ar waz, ar garellig, an houad gouez, ar c'hrakhouad, ar pennruz.

- An dour-yar, ar gernigell-aod, ar bongorz, ar mouleg, ar chilpion.

- Ar c'hefeleg-aod, ar gioc'h-mor, ar savelleg, ar voualc'h-vor.

- Ar boc'han, ar wennili-vor, ar morvaout, ar gouelan, ar morbig.

E 1962 e voe digoret en takad tro-dro d'ar C'hozh-Kastell ur gwarezva evned hag a vez meret gant an S.E.P.N.B.

Ar pesked, ar c'hrestenneged, ar c'hrogenneged

Peskedus-meurbet eo an dourioù tro-war-dro d'an enezenn, ha n'eo ket souezh eta e vije bet pesketaerien er Gerveur, a-holl-viskoazh (gwelet ar chabistr diwar-benn ar pesketaerezh hag ar sardineta). Amañ kennebeut ne vo ket meneget an holl spesadoù pesked a gaver er mor tro-war-dro d'an enezenn. Ne vo roet nemet anvioù ar re anavezetañ, renket amañ-dindan diouzh ar spesadoù :

- Ar silienn-vor, an talareg.
- Ar veilh-ruz, ar c'horn, an arlikon.
- Ar c'hazh-mor, ar wrac'h, ar veverez.
- Al levneg, ar morlouan, ar merluz, ar vorleanez, ar boutouz.
- Ar brezhell, ar gazeg-vor, an aouredenn, ar beleg.
- Ar rae.
- An tulbod, ar c'harlizenn, ar jelinenn, al leizenn.
- Ar sardinenn, ar genoù-kamm, an harink.
- Al legestr, ar grillh-mor, ar c'hrank, ar c'hrank-bigorn, an teureug-mor.
- Ar vesklenn, ar bistrunkenn, ar vrennigenn, ar bigorn.

E-touesk ar c'hrestenneged, menegomp ivez an tremoc'h, bet e-pad pell ur vagadurezh ouzhpenn, dreist-holl pa veze diouer a voued en enezenn.

Ragistor

A-barzh displegañ dre ar munud kement a ouzomp diwar-benn ar ragistor er Gerveur, ne vefe ket didalvoud, marteze, teurel ur sellad war an daolennig amañ-dindan ha degas da soñj pere eo bet prantadoù bras ar ragistor. Ken pell emaint diouzhimp, ar prantadoù-se, ha ken hir a-wechoù, ken e c'hall bezañ diaes kaout er spered ur skeudenn fraezh anezho :

Prantadoù ar ragistor :

- ar Paleolitik : -700 000 betek -10 000 kent J.-K.
- ar Mezolitik : -10 000 betek -5000 kent J.-K.
- an Neolitik : -5000 betek -2000 kent J.-K.
- Oadvezh an arem : -2000 betek -800 kent J.-K.
- Oadvezh an houarn : -800 betek _50 kent J.-K.

Ar mareoù pellañ

Ar Gerveur n'eo ket bet atav un enezenn, rak live ar mor en deus bet kemmet kalz a-hed mareoù koshañ ar ragistor, o sevel hag o tiskenn tro-ha-tro, hervez ma kemme an hin. Diwezhañ tro ma uhelaas kalz live an dourioù-mor a voe war-dro 10 000 kent J.-K., pa glouaraas an hin ha pa deuzas ar gwiskad skorn a c'holoe an hanterzouar norzh.

A-raok na vije bet savet live ar mor e oa Ar Gerveur, Groe, Houad hag Edig leinoù un aradennad tosennoù peuzuhel, da lavaret eo lec'hioù emsav da ziazezamant ar meuriadoù a veve dre eno da vare ar Paleolitik, anezhañ koshañ hag hirañ marevezh ar ragistor. Hogen, mar gouier ez eus bet tud o vevañ er Gerveur er marevezh-se, ret eo anzav n'eus ket bet kavet paot a roudoù eus o bezañs eno : ur vilienn benet daoudu a zo bet diskoachet e 1991 e *Kergoyet*. Mein benet a zo bet kavet ivez en Enez-Groe. Ar c'havadennoù hendraoù-se hor c'has betek e-tro 30 000 vloaz kent J.-K., da lavaret eo prantad diwezhañ ar Paleolitik.

Etre 10 000 ha 6000 kent J.-K., da lavaret eo e maread ar Mezolitik, e weler an hin o tommaat, ha gant an hin kerreizh a zo o ren diwar neuze e weler tamm-ha-tamm plantennoù ha gwez o kreskiñ, ha loened gouez o paotaat. Ar meuriadoù e oa diazezet o doare-bevañ d'ar mare-se war ar chase, ar pesketa, an dastum plant ha kregin. Nepell diouzh Ar Gerveur, en Enez-Tevieg, a zo er-maez da c'hourenez Kiberen, ez eus bet kavet roudoù dispar hag a ro deomp da c'houzout penaos e veve an dud e dibenn ar Mezolitik. Evit a sell ouzh Ar Gerveur ez eus bet kavet binvioù e parrezioù Saozon ha Bangor. Liesdoare e oa ar binvioù-se, graet ma oant gant kailhastr, eskern, ha stilhonoù hoc'h-gouez.

Gant an Neolitik, ur maread hag a vez anvet ivez Oadvezh ar maen levnet, e weler ur gemmadenn pouezus-kenañ : an dud en em laka da c'hounit plantennoù ha da zoñvaat loened, hag a-nebeudoù e teuont da vezañ divonedus. Sevel a reont lochennoù kelc'hiet a-wechoù gant difennoù. Kavadennoù arkeologel – kailhastr benet ha podoù-pri dreist-holl – a zo bet graet e *Beg Kerdonis*,

er *Skeul*, e *Kerzo* hag e *Porzh-Deubor'h*, o prouiñ ez eus bet eno lec'hioù annezet. Difennoù a zo bet kavet ivez : begoù kaeet er *Pouldon*, er *C'hozh-Kastell* hag e *Bagener*. War lec'hiennoù an tri beg kaeet-se ez eus bet kavet binvioù kailhastr ha traezennoù gouestl. E deroù an XIX^{vet} kantved e oa bet kavet e taouarc'hegoù *ar Stêr Vras*, gant al louzawour Emile Gadeceau, klopenn un den o sevel d'an Neolitik. E welet a c'haller en Naoned, e mirdi Dobrée.

E dibenn an Neolitik eo e voe gwelet sevenadurezh ar meurvein o tiorren : lakaet e voe peulvanoù en o sav, anezho ar savadurioù megalitek stankañ a zo e Breizh. Renablet e oa bet un unnek bennak anezho er Gerveur e 1825 gant ur beleg, ar chaloni Mahe, ha goulakaat a reer ez int bet niverusoc'h c'hoazh, steudet a-hed keinenn greiz an enezenn. Siwazh ne gaver mui bremañ nemet tri feulvan en o sav en enezenn : unan e *Kervarigeon* ha daou e *Kerledan*. Ar re all a zo bet diskaret, didammet ha pilet abaoe, hag adimplijet e-doug an daou gantved tremenet da veinañ an hentoù, pe da sevel mogerioù. E 2001 avat, ez eus bet adlakaet ur peulvan en e blom, hini *Santez-Anna*, etre Lokmaria ha Kergallig. Al labour-se a oa bet kaset da benn dre atiz Servijoù Rannvro an Arkeologiezh, gant kenober ti-kêr Bangor. Muzuliañ a ra ar peulvan-se 3,50 metr, ha 6 tonenn a bouez a zo ennañ.

Betek daou gantved a zo e oa ivez kalz krugelloù-bez, da lavaret eo savennoù-douar bet savet gant an henamzeriz a-uc'h o bezioù. An niverus ma oa ar c'hrugelloù-bez-se a laka anat e tlee bezañ poblet stank Ar Gerveur e-tro dibenn an Neolitik. Ken stank e oant en enezenn, ha ken boazet an dud outo moarvat, ma ne voe ket kemeret a

ziarbennoù evit o mirout hag o gwareziñ, ha c'hoarvezout a reas ganto evel gant ar peulvanoù : distrujet e voent. Ne weler mui bremañ nemet krugell-vez *Borderun*. Krugelloù *Kerdavid*, *Borvran* ha *Keravigeon* a zo bet plaenaet kalz, hag hini *Runello*, e-kreiz an enezenn, hag a oa moarvat an hini vrasañ holl, a zo bet rezet e-tro 1830. Doanuis eo, e gwirionez, gwelet kement a savadurioù kozh o vont da get, dre ziouiziegezh pe dre ziseblanted e-keñver an istor.

Amañ-ahont, el lanneier, ez eus bet renablet ivez krugelloù bihanoc'h ha pikernet krenn. Ar c'hrugelligoù-se a sav da Oadvezh an arem. Traezoù teuzerezh o sevel d'ar marevezh-se a zo bet kavet ivez, e *Kalastren* hag a *Keriero*. Ouzhpenn an traezoù-se ez eus bet kavet ivez jarloù-kañv, tolpet amañ-ahont er parkeier.

Menegiñ a ranker ivez ar begoù kaeet, da lavaret eo begoù-douar bet kreñvaet gant kleuzioù uhel ha douvezioù, a c'halle tud ar ragistor en em repuiñ a-dreñv dezho pa save bec'h warno. O c'havout a reer en aod su, hag an hini brasañ anezho, bet savet moarvat da vare an Neolitik, hag adimplijet goude betek Oadvezh an houarn, a c'haller e welet penn gwalarnañ an enezenn. Goleiñ a ra pemp hektar tachennadoù lanneier, e beg *Kozh-Kastell*. Graet e vez anezhañ ivez *Kamp Kaezar*, daoust ma n'en deus netra da welet gant an impalaer roman. Nemet ha krediñ a rankfer e voe adimplijet gant ar Romaned pa ziazezjont en enezenn goude drouziwezh ar Weneted. Kement-mañ n'eo ket diwirheñvel.

An Henamzer : ar Weneted, ar Romaned hag ar Saksoned

Er c'hentañ kantved kent J.-K. ez eus pemp meuriad galian en Arvorig. An tiriad etre genoù an Ele hag hini ar Gwilen a zo dindan veli ar Weneted. Int eo a gaver ivez war Enez-Groe, inizi Houad, Edig, hag er Gerveur. Ur meuriad galloudus-kenañ eo ar Weneted, ha trec'h d'ar meuriadoù all, en abeg d'o lestraz kenwerzh peurgetket. Ar Weneted o deus bagoù bras, a zo graet o c'houc'h gant prenn derv, hag a ya war-raok gant gouelioù krec'hin tanav ha gwevn. Kenwerzhañ a reont gant ar pobloù tro-war-dro. Arabat ankounac'haat, pa vez anv eus istor Ar Gerveur, al lec'hiet mat ma 'z eo an enezenn e-keñver an hentoù kenwerzh dre vor etre ar bed kreizdouarel ha broioù hanternoz Europa. Gouzout a reer, da skouer, e teue ingal bagoù fenisiat d'ober ur paouez er Gerveur gant o c'hargamant staen. Graet e veze ivez kenwerzh ar maen-jad hag ar goularz. Er Gerveur e kave ar bagoù-kenwerzh-se lec'hioù-ehan gwaskedet mat, e-lec'h ma c'hallent en em bourveziñ.

Sed ar pezh a skriv Kaezar e-unan diwar-benn ar Weneted :

« N'eus ket galloudusoc'h broad, en Arvorig, eget ar Weneted. Ul lestraz bras a vagoù kenwerzh o deus, ha gant se e c'hallont bezañ e darempred tost gant Enez-Vreizh. Trec'h ez int d'an holl bobloù all evit a sell ouzh skiant ha pleustr ar verdeadurezh. O vezañ ma n'eus ket paot a borzhioù war aodoù ar mor bras-se, ken diroll peurvuiañ, e lakaont truaj war al listri a vez o verdeiñ er biojoù⁵. »

Ar Weneted, evito da vezañ galloudus, en em gavas en arvar pa zirollas war ar vro ar Romaned, goubet da astenn o beli war C'hallia. Gwashaat a reas c'hoazh an traoù gant raktres Kaezar da drevadenniñ Enez-Vreizh. Desachañ a reas neuze ar Weneted ar pobloù nes d'o heul ha goulenn sikour digant pobloù Enez-Vreizh evit stourm efedusoc'h ouzh an alouber roman. Gant se e teuas buan ar Weneted da vezañ ur skoilh evit ar Romaned, hag ivez un digarez eus ar re wellañ evit Kaezar da dagañ an Arvorig. Istor ar brezel etre ar Romaned hag ar Weneted a anavez ar munudoù anezhañ dre skridoù Kaezar : gant an drec'herion eo e vez skrivet an istor, peurvuiañ. Sed amañ dindan, berr-ha-berr, ar pezh a c'haller lavaret diwar-benn ar brezel-se :

Evel tud a vor en em ganne ar Weneted, bodet war begoù kaeet difennet mat gant savennoù-douar ha kleuzioù. Pa deue an enebour e kuitaent o ziez hag ec'h en em repuent a-dreñv an difennoù-se, o kas ganto o four-vezañsoù, o loened hag o binvioù. Gwarezet mat, e c'horget ez aje kuit an argaderien, ha pa ne c'hellent ket diarbenn anezho ec'h ambarkent gant o ziegezhioù hag o

5 Kaezar, *De bello Gallico*, levrenn III, chabistr 8

madoù evit tec'hout ha kaout suroc'h repu war an douar-bras. Ar begoù kaeet-se ez eus bet meur a hini anezho er Gerveur : *Kozh-Kastell, Kastell-Kerzo, Poullodon, Ne-Nesqueren, Er Hastellic*.

Kaezar, pa welas e harze mat ar Weneted ouzh e soudarded, ha pa voe anat dezhañ ne c'hellje ket trec'hiñ anezho war zouar, a reas e vennozh da gas ar brezel war vor. E 56 kent J.-K., pa zifourkas listri brezel ar Romaned e-tal ar Mor-Bihan, dindan urzhioù Brutus, e savas ar Weneted an eor, ec'h astennjont al lienoù war ar gwer-nioù, hag o listri pounner a droas penn war-zu al lestraz enebour. Ar galeoù roman, skañv, ha kaset en-dro dre roeñvoù, a argadas listri pounner ar Weneted. Ar re-mañ ne c'hallent ket ken embreger, rak an avel a c'houzizas trumm ha dic'hortoz a-grenn. Un drouziwezh e voe evit ar Weneted, hag ur garv a hini. Mervel a reas ar pep gwellañ eus o brezelourien war o listri, klaviet er galmijenn. Hep lestraz e voe rediet ar Weneted d'en em zaskoriñ. Ar Weneted, faezhet, e voe kriz o flanedenn, rak ar re na voent ket lazhet a voe sklavaet en-garv : « ... *barnet e voe an holl senedourien d'ar marv, ha gwerzhet e voe ar peurrest eus ar bobl dre enkant...* »⁶

Goude drouziwezh ar Weneted e chomas ar Romaned mistri war Ar Gerveur e-pad pevar c'hantved. Rannet e voe Gallia adal emgann Alezia e peder froviñs vras, hag an Arvorig a oa e dalc'h *Proviñs Lugdunum*. Evit doare ne voe ket romanekaet an enezenn da vat. Sed, da vihanañ, ar pezh a zo gwirheñvel pa weler pegen nebeut a roudoù o deus lezet ar vistri nevez : n'eus bet kavet er Gerveur

6 Kaezar, *De bello Gallico*

savadur bras ebet eus ar mare-se : nag azeuldi, na kenkiz, na roud ebet, a-hend-all, en anvioù-lec'h, war-bouez ur beg kaeet anvet *Kamp Kaezar*, e beg Kozh-Kastell, bezañ ma ra dave an anv-se d'ur c'hreñvlec'h kalz koshoc'h, bet implijet hag adimplijet e-doug an Henamzer gant estroc'h evit ar Romaned. Evel ma oa ar c'hiz ganto e roas ar Romaned anvioù nevez d'al lechioù bet sujet ganto : anvet e voe Ar Gerveur *Vindilis*, Enez-Houad a voe graet *Siata* anezhi, hag Edig a voe badezet *Arica*. Met an anvioù-se a voe ankounac'haet ha dilezet pa deuas ar Vretoned da ziazezañ er vro.

Traoùigoù a zo bet kavet amañ-ahont koulskoude, hag a zegas bezañs ar Romaned da goun deomp : e meur a lec'h ez eus bet dizoloet teolennoù (e *Logonned*, *Kerguech*, *Botrion*, *Magorlec*, er *Runello*, e *Bourhig*, e *Trion-Gwenn*, e *Bangor*, e *Bordevech*, e *Jerzo*, e *Borvran*). E Bangor ez eus bet kavet ur puñs-kañv, ennañ teolennoù ha traezoù houarn. E Porzh-Lae, da-geñver al labourioù kreñvaat hag ivez da-geñver al labourioù terkañ war-dro ar skluz, e voe dizoloet pennadoù armoù, bravigoù, dourlistri-arem, podoù-pri, medalennoù ha pezhioù-moneiz, warno patromoù Julius Kaezar, Vespasien ha Trajean. E *Beg-ar-Polen* ez eus bet kavet brikennnoù, teolennoù, darbodoù priaжоù ha pezhioù moneiz.

En trede kantved e treuzas an Impalaerezh roman ur mare a anveli, hag argadet e voe ingal an Arvorig gant laeron-vor deuet dreist-holl eus Enez-Vreizh. Goulakaat a reer e voe laeron-vor sakson o tiazezañ er Gerveur er mare disur-se hag oc'h ober skrap ha riñs war an enezenn. Diazezañ a rejont en ul lec'h anvet abaoe *Aber Saozon*, ul lec'h gwaskedet mat e tu norzh an enezenn, e-lec'h ma voe staliet diwezhatoc'h bourk Saozon. Alese e c'hallent

mont da dagañ dre vor an tiriadoù en em astenn etre ar
Blavezh ha genoù al Liger, rak ne vevent nemet diwar
skrap. War-bouez an anv-lec'h-se, bet anvet diouto, n'o
deus lezet ar Saksoned roud ebet eus o zremen er Gerveur.

Donedigezh ar Vretoned

Gwall dreut eo ar mammennoù istorel gouest da deurel ur sklêrijenn bennak diwar-benn donedigezh ar Vretoned tramor er Gerveur adal ar V^{vet} kantved : n'hon eus nemet ar *Vitae* (Buhezioù ar sent), bet savet kalz diwezhatoc'h gant leaned, hag ivez notennoùigoù ha spisc'herioù strewet amañ-ahont e diellevroù an abatioù : diellevr Redon, hini Kemperle, hag hini Landevenneg peurgetket.

Defot resisaat kalz an traoù evit a sell ouzh Ar Gerveur e c'haller adlakaat prim-ha-prim diazezadur ar Vretoned en enezenn en ur framm hollekoc'h, hini enbroadeg ar Vretoned, ha menegiñ e oant o tec'hout rak Skoted Bro-Iwerzhon hag ivez rak an Angled hag ar Saksoned, hag e treuzjont Mor Breizh evit diazezañ en Arvorig, en ur gas ganto o yezh – ne oa ket disheñvel-tre diouzh hini an Arvorig – hag ar relijion gatolik. Savet e voe ganto teir friñselezh en Arvorig : hini Domnonea, en em astenne a bep tu da Vor Breizh ; hini Bro-Gernev, hag hini Bro-Wened.

Gwir destenioù enbroadeg ar Vretoned eo, er Gerveur evel e lec'h all, an anvioù-lec'h (studiet e vint dre ar munud er pennad da-heul). Diwar studi an anvioù-lec'h er Gerveur e c'haller diogeliñ un toullad fedoù istorel diarvar :

- Ne voe ket savet parrezioù gant an enbroerien : n'eus en enezenn anv parrez ebet o teraouiñ gant *plou*, *tre*, pe *lann*, ha gouzout a reer ne voe savet ar peder farrez a gaver er Gerveur nemet en X^{vet} kantved, gant menec'h abati Redon. Kadarnaet e vez, diwar gement-mañ, ur fed hag a zo anavezet mat gant an istorourien : urzhiet e oa an iliz keltiek gant menec'h, ha gwell e veze ganto alies sevel manatioù, da gentañ, kent diazezañ parrezioù.

- Ar vuhez relijiel hag an aferioù bedel er Gerveur a veze meret ha kaset en-dro gant menec'h, bodet en ul lec'h anvet *Bangor*, diwar anv ur manati kembreat : manati bihan Bangor a voe, e-pad hir vloavezhioù, e deroù tre istor an enezenn er marevezh kristen, kreizenn ar feiz ha kenkoulz “kêrbenn” Ar Gerveur. Deuet eo an anv-se digemm betek ennomp⁷.

- Roudoù a gaver, en anvioù-lec'h – anvioù kêriadennoù – eus tudennoù santel anavezet mat e lec'hioù all e Breizh ha bet brudet bras ez vev : *Gweltaz* e Lokgweltaz, *Tudi* e Loktudi (parrez Bangor), *Kado* e Bortikado, *David* e Kêrdauid, ha *Gwenole* (e henvrezhoneg : *Uingualoe*) e Kêrguinole. Bez' e c'haller goulakaat ez eo hini pe hini eus ar “sent”-se tremenet dre Ar Gerveur.

- A-hend-all, remerkomp ivez ez eo bet iliz-parrez Porzh-Lae, a-holl-viskoazh, dindan baeroniezh sant Jelani, bet unan eus keneiled Sant Padrig, an hini end-eeun a avielas Bro-Iwerzhon.

7 Gwelet pelloc'h ar pennad diwar-benn an anvioù-lec'h.

Lec'hanvadurezh

Anv an enezenn

Enez-ar-Gerveur, pe *Ar Gerveur* end-eeun, he deus bet anvioù disheñvel hervez ar mareoù istorel, hervez ar pobladoù o deus bevet enni, hag hervez an dud o deus bet skrivet diwar he fenn.

Ar skrivagner latin Pline Gozh a rae gant an anv *Insulae Veneticae* evit envel Ar Gerveur, Groe, Houad hag Edig. *Insulae Veneticae* a dalv' kement hag *Inizi ar Weneted*, diwar anv ar meuriad galian a oa diazezet etre genoù an Ele ha genoù ar Gwilen. Diwar anv ar meuriad-se ez eo bet anvet kêr Wened ivez.

Diwezhatoc'hik e kaver, dindan bluenn Ptolémée, un douaroniour gresian a vebas en eil kantved goude J.-K., ar meneg eus an anv, dindan ar stumm *Vindilis*, un anv hag a deufe, gouez d'ar yezhonourien, diwar daou anv galianek : *uind* hag *illis*. *Uin* a dalveze “gwenn”, “kaer, lufzus”, hag *Illis* a dalvezfe “enezenn”.

Ar Vretoned avat o deus roet un anv all d'an enez : *Guedel*, pe *Guezal*. An anv-se eo a gaver en ur spisc'her e diellevr abati Redon en X^{vet} kantved, ha diwezhatoc'h, e 1066, en un akta a zonedigezh a-berzh Hoel II, dug

Breizh : *Cum tota insula quae vocatur Guedel*. Gouez da v/Martial Ménard e talvez e anv-se kement ha “brav, kaer⁸”.

Diwezhatoc’h e kaver, war ar c’hartennoù mor adal ar XVI^{vet} kantved, an anv gresianek *Kalos Nesos*, da lavaret eo “an enezenn gaer”, hag a-wechoù ivez an hevelep anv, bet latinekaet dindan ar stumm *Calonessus*.

N’ouzer ket ent-resis peur e voe savet an anv *Ar Gerveur*, met ar pezh a zo divarteze eo e kaver an anv-se e 1744 e-barzh geriadur gwenedek de l’Armerye, gant ar stumm *Er Gervèr*, ha stummoù all peuzheñvel. An anv *Ar Gerveur* a glotfe gant al latin *Castrum Major*, a gaver a-wechoù ivez, da lavaret eo “ar c’hreñvlec’h bras”.

Anvioù ar parrezioù

Peder farrez a oa er Gerveur : *Porzh-Lae*, *Saozon*, *Lokmaria-ar-Gerveur* ha *Bangor*. N’eus anv parrez ebet eta o teraoùñ gant *tre*, *plou*, pe *lann*, daoust m’eo stank ar rakgerioù-se war an douar-bras. An diouer a anv-parrez o teraoùñ gant *plou* a zo sur-mat ur merk eus an diwezhat ma voe savet parrezioù an enezenn.

Aes a-walc’h eo an anv *Porzh-Lae* da gompren : talvezout a ra kement hag “ar porzh uhel”. Bet eo distummet an anv dindan levezon ar galleg, hag er yezh-se e skriver bremañ *Le Palais*.

Diwar an anv *Saozon* ne sav diaester ebet kennebeut all. Dave a ra moarvat d’ul lec’h bet Saozon o chom ennañ. Div barrez all e Breizh a zoug an anv-se : unan e-kichen Sant-Brieg, hag unan all tost da Roazhon. Bez’

ez eus a-hend-all e Breizh paot a anvioù-lec'h, dezho ar ger *Saozon* da eil elfenn. Evit chom war dachennad Ar Gerveur, bez' ez eus e Bangor ur pennkêr anvet *Borzose*.

Lokmaria-ar-Gerveur. Amañ ivez ez eo aes kompren pe ster a zo d'an anv, pa ouezer ez eo bet savet an anvioù o teraoiñ gant *Lok* adal an X^{vet} kantved. Merkañ a reont ul lec'h – kêr pe barrez – ma peder ha ma azeuler sant-mañ-sant, santez-mañ-santez. Amañ ez eo anv ar Werc'hez eo a zo bet staget ouzh ar rakger *Lok*. An anv-lec'h *Lokmaria* a gaver war-dro hanter-kant skouer anezhañ dre Vreizh a-bezh. Peder farrez o deus an anv-se ivez : Lokmaria-Plouzane, Lokmaria-Berrien, Lokmaria-Gregam, ha Lokmaria-Kaer.

Bangor a zo un anv ha ne gaver e neblec'h all e Breizh, nemet marteze e Rianteg, gant ar stumm *Bangavr*, met ne c'haller ket en diogeliñ. E gavout a reer stank a-walc'h er broioù keltiek all avat : an anv-se a gaver anezhañ e biz Bro-Iwerzhon – skrivet e vez *Beannchar* e gouezeleg Bro-Iwerzhon. Ur manati bras a zo bet eno, e-lec'h ma vevas sant Koulm, al lean bet skrivet gantañ ur reolenn strizh evit ar venec'h keltiek. Met diaes eo diogeliñ ez eo bet anvet manati Ar Gerveur diouzh hini Bro-Iwerzhon, rak an anv *Bangor* a gaver anezhañ ivez e Bro-Gembre, dre ziv wech : *Bangor Fawr*, er gwalarn, ha *Bangor-is-y-Coed*, er biz. Ar pezh a zo diarvar eo e teuas menec'h kelt eus unan eus an tri lec'h-se da avielañ Ar Gerveur, pe, e-giz ma veze lavaret d'ar c'houlz-se, Enez-Guedel, hag e rojont d'al lann bet diazezet ganto anv ar manati tramor ma oant o tont dioutañ. Pe ster avat a zo d'an anv-se ? N'emañ ket an holl arbennigourien a-unan war ar c'hraf-se, ha, da c'hortoz ma vo roet un dalvoudegezh diogel, e rankomp tremen gant martezeadennoù. Ar

vartezeadenn a c'haller reiñ ar muiañ a gred dezhi – hini Léon Fleuriot – eo homañ : an anv Bangor ez a div elfenn d'ober anezhañ : *bann* ha *kor*. *Bann* a dalveze kement hag *uhel* / *lec'h uhel*, ha *kor* a zo heñvelster d'ar gerioù *bagad*, *strollad*, *meuriad*.

Anvioù ar c'hêriadennoù

Bez' ez eus 135 kêriadenn war an enezenn. Kavet e vo ar roll anezho amañ-dindan rummet dre al lizherenneg gallek. O reiñ a ran, an anvioù-se, gant reizhskrivadur an INSEE, er yezh ofisiel nemeti a zo en hor bro, siwazh, da c'hortoz ma vo kinniget, un deiz bennak, gant servijoù Ofis Publik ar Brezhoneg pe gant un den gouiziekok'h egedon, un doare-skrivañ brezhonek hag a glotfe gant o zalvoudegezh kentañ.

A

Andrestol, Anter, An Toureau, Anvort, Arnaud

B

Bedeg, Begaroz, Borcastel, Borchudan, Bordardoue, Bordelan, Bordelouet, Bordenec'h, Bordreneo, Bordenne, Borderhouat, Borederun, Bordery, Bordilla, Bordrouhant, Borduro, Bordustar, Bordfloh, Borgrois, Borgrouager, Borhuédet, Borlagadeg, Borménahic, Bormmné, Bernaliguen, Bornor (unan e Bangor, unan e Lokmaria), Borsarazin, Borstang, Bortremont, Bortentrion, Borthélo, Borthero, Borticado, Bortifaouënn, Borvran, Borzos, Bourdoullic, Bourhic, Brénantec

C

Calastren, Chubiguer, Colety (Le), Cosquet (Le), Cosquet (Grand), Coty (Le), Crawford

D

Domois, Donnat

E

Envag, Er Lannig

F

Feteneguiau

G

Goilan, Gouastin, Goueh, Grand Village (gwechall :
Kerohen)

H

Herlin

K

Kerbellec, Kerdalideg, Kerdavid, Kerdenet, Kerdonis,
Kerel, Kergallic, Kergolay, Kergostio, Kergoyet, Ker-
groez, Kerguerh, Kerguénolé, Kerhuel, Keriero, Kerlan,
Kerlédan, Kerloréal, Kernejon, Kernest, Kerouple,
Kerourdré, Keroyan, Kerprad, Kersablen, Kersantel,
Kerspern, Kervarijon, Kervau, Kervellan, Kervic, Kervi-
lahouen, Kervin, Kerviniec, Kerzo, (unan e Lokmaria,
unan e Saozon)

L

Lancreno, Lanno, Lann-Plad, Linigour, Locqueltas,
Loctudy, Logonet

M

Magorilec, Marta, Merezel

N

Nanskol

P

Parlavan, Penekam, Pen-Vaz, Porzh-Puñs, Port-Coter,
Port-Hallan, Port-Salio, Pouldon, Poulfoen, Prad-Ledan

Q

Quienec

R

Radenec, Ripkuh, Rosbossier, Roserière, Runello

S

Samzun, Skeul (Le), Spernen

T

Tibain, Ti-Neué, Ti-Sévénno, Trion-Guen

V

Vazen

Un nebeud evezhiadennoù diwar-benn anvioù ar c'hêriadennoù :

- Anvioù ar c'hêriadennoù e teraou an darn vuiañ anezho gant ar rakgerioù *KÊR* ha *BORH*. Anavezet mat eo e Breizh ar rakger *KÊR*, pa gaver anezhañ stank-hastank dre holl e Breizh-Izel, hag e Breizh-Uhel ivez gant ar stumm *Car*, d'ar peurvuiañ.

- Ar ger *BORH* hag e adstummoù (*Borc*, *Bord*) avat ne gaver anezhañ nemet er Gerveur hag e neblec'h all ebet e Breizh, din da c'houzout. Hervez Albert Deshayes⁹ e vefe bet amprestet ar ger-se diwar ur ger gallek kozh, *Borde*, un anv kenster d'ar brezhoneg *ti-plouz*, *mereuri*.

- A-hend-all e vez kavet an elfennoù boas e Breizh-Izel : BEG, BRE, LANN, LOK, TI. An eil elfenn a c'hall bezañ pe un anv-den, pe un anv-gwan, pe anv ur blantenn bennak, pe anv ul loen, pe ivez un anv o tegas da soñj eus doare diavaez an takad.

9 A Deshayes, *Dictionnaire des noms de lieux bretons*, Chasse-Marée Glénat, 2003, p.174.

Anvioù an tachennoù-douar, ar parkeier, an ogelloù hervez an dachennaoueg

E-pad pell amzer o deus bet ar parkeier, er Gerveur evel e lec'h all, un anv resis, a veze anavezet mat gant an holl hag a veze treuzkaset, a-rummad-da-rummad, gant ar gouerien : pep roz, pep menez, pep saon, pep torgenn he doa un anv, hag ivez pep park, pep pradenn, pep klocz ha pep lanneg. An ogelloù-douar bihanañ zoken, e oa un anv resis da bep hini anezho. Betek an adlodennañ, bet kaset da benn e 1963, e oa anavezet mat an anvioù-se gant an holl er Gerveur. Studiet pizh eo bet an anvioù-lec'hioù-se gant Pierre Gallen en e levr¹⁰.

Adkavout a reer er Gerveur, dre vras, anvioù peurheñvel ouzh ar re a gaver war an douar-bras, war-bouez unanig bennak anezho. Evit Ar Gerveur e anavezomp mat-tre an anvioù-se rak ar c'hadastr kentañ bet savet en enezenn a zo koshoc'h eget an holl gadastroù all a gaver e Breizh : sevel a ra d'ar bloaz 1766, pa ne voe graet e lec'h all nemet nemet adal 1807 (lezenn ar 15 a viz Gwengolo), dre urzh Napoleon. Hogen an taolennoù-douar-se ne voent ket savet diouzhtu, ha ret e voe gortoz a-wechoù ar bloavezhioù 1830-1840 kent dezho bezañ graet da vat e pep lec'h. Koshoc'h, a-galz eta eo kadastr Ar Gerveur.

Ar braz eus an anvioù-se ez a div elfenn d'ober anezho, an eil elfenn o resisaat an hini gentañ, d'ar peurvuiañ. Sed amañ-dindan ar gerioù a gaver ar muiañ (lakaat a ran etre krommelloù ar stummoù skrivet a gaver pa vezont disheñvel diouzh ar stumm a-vremañ) :

10 Pierre Gallen, *Inventaire et histoire des toponymes de Belle-île-en-Mer*, 1997

- elfenn gentañ :
 - aod (*aud*) / -banal (*bonal*) / -baz / -beg (*bec*) /
- bod / -bord (*borh, bor*)
 - douar (*doar*) / -dour (*deur*)
 - enez (*iniz*)
 - feunteun (*feutan, feteun, feten*)
 - gwazh (*gwah, goueh, gweh*)
 - hent (*henn*)
 - kastell (*castel*) / -kêr (*ker*) / -koad (*koed, coëd, coet*) / -kroaz (*kroez, croisse, croez*)
 - lann / -lanneg (*lannec*) / -lenn / -lok (*loc*)
 - moger (*maguer*) / -maen (*men*) / -maez (*mez*) /
- milin (*melin*)
 - nant (*nann*)
 - palud (*palus*) / -park (*parc*) / -penn (*pen*) / -poull (*poul*) / -porzh (*porh*) / -prad (*prat*)
 - pradenn / -pri / -puñs
 - raden / -roc'h (*roh*) / -roz (*ros*) / -run
 - spenn / -stang (*stank*) / -ster / -stivell
 - tachenn / -tal / -ti (*ty*)
- eil elfenn, o resisaat an hini gentañ :
 - berr (*ber*) / -bras (*braz*) / -brizh
 - don
 - glas (*glaz*) / -gwenn (*gwen*) / -gwer
 - hir
 - izel
 - kalet (*kaled*) / -kamm / -kozh (*koh, coz, cos*) /
- kuzh (*kuh*)
 - laez (*lay*) / -ledan (*laudan*) / -louet
 - melen / -meur / -moan (*moen, moën*)
 - nevez (*neué*)
 - ruz(*ru*)

-sec'h (*seh*) / -start (*stard, sterd*)

-treuz

-uhel (*huel*)

Bez' e c'haller strollañ an anvioù-lec'hioù-se hervez
ma reont meneg :

1. d'an torosennadur
2. d'an dour
3. d'an douaroù ha d'ar gounidegezhioù
4. d'ar struzh
5. d'al loened
6. d'ar pobladur
7. d'ar relijion
8. da bep seurt

Amañ-dindan e vo kavet an anvioù a gaver er c'hadastr :

1. An torosennadur :

-aod : *Douar-Naud*

-beg : *Beg-ar-Roz*

-ben : *Tibain*

-bern : *Berniou, Bernen, Bernaud*

-bre : *Brenantec, Brenn, Brann*

-bronn : *Bronn*

-devalenn : *Devalenn*

-izel/uhel : *Douar Izel, Douar Uhel*

-kombant : *Goubann Mouall, Goubann Nairenn,
Goubann-Radenn-en-Nein, Er Goubanteu, Goubandeu*

-gourin (diwar ar c'hembraeg *Corfryn* : turumel-
lig) : *Gourineu, Gourin Banal, Gourin-er-Baillec, Gourin-
er-Roh-Vraz, Lann-Gourin, Gourin-Stan-e-Zo, Gourin-er-
Vort, Gourin Vihan*

-grae : *Grae, Groa, Groadec*

-grell (mein bihan, tammoù mein) : *Grelleu, Greslau, Grelen, Grelleau-Braz, Grello-Stang*
 -grog : *Groign-Galeu, Grouign-Karek, Prad-koste-er-Grigne, Groign-dilahet, Groo, Grou-Bihan, Groonic*
 -hent : *Henn-e-Poulpri*
 -karreg : *Gareg-Vras, Gourin-er-Garec, Koh-Karek*
 -krec'h : *Kre*
 -lein : *Lein-ar-Roz*
 -menez : *Mené*
 -maen : *Lann-Men-Glaz*
 -nant : *Donnant, Brénantec*
 -nec'h : *Né, Nec'h, Neh*
 -palud : *Palus Beg-er-Lann, Palud-Meinev, Paludenn, ar Baludenn, La Baludenn*
 -penn : *Penn-ar-Run, Penn-Roz-Braz*
 -roc'h : *Roh, Roeh, Rohell, Toull-er-Rouell*
 -roz : *Mez-Roz, Begaroz, Roz-Caillo, Roz-Dilannere, Roz-Goubann-Vraz, Roz-Gourdiec, Roz-Kariour, Roz-Mangouer, Roz-eur-Pont, Roz-Pouillerez, Roz-er-Lai, Roz-Rozenn, Roz-Stergen, Roz-Traezh, Rozelec*
 -run : *Borderun, Runello, Mez-eur-Run, Rundol, Torr-ar-Run*
 -san : *San-Segal*
 -stank (implijet evit : stankenn) : *Stang-en-Deur, Stang-Gavann, Stang-Varh, Stang-Krauéaule, Prad-er-Stang, Stang-Diaoul, Stang-Krenn, Stang-Katriau, Stanégaré, Chting-Voen, Stang-Tchenueden, Stang-er-Nag, Stang-Haligen, Stang-Koedek, Stang-Grahiar, Chtenper, Stang-Pignouenn, Stang-Arour, Stang-re-Gouer, Stang-eur-Gouh-Vilin, Crello-Stang, Stang-Mingwenn, Stang-Goeriew, Stangena-retch, Stang-Brug, Stang-Feteun, Stang-Dondouar, Stang-Kouriat, Stang-er-Gat*

- tor : *Torr, Tor-ar-Run*
- toull : *Toul, Er Doulen*
- treuz : *Treuz-Gwenn*

2. An dour :

- bouilhenn : *Ar Vouilhenn, Mez-Bouilhensau*
- doue (poull-kannañ) : *Doué, Douet, Bordardoué*
- dour : *Deur, Stang-en-Deur, Mez-Doureg, Truon-Doureg*
- feunteun : *Feunteniou, Feunteunigou, Guer-Feten, Trouzo-er-Park-Fetan, Stang-Feteun, Stang-Fetan-Bihan, Feten-Ven*
- gwazh : *Gwerh, Goeh, Gouer, Gwas, Gwah, Kerguerh, Le Gouerh, Les Goahieu, Douar-Gwerh, Lann-Gouerh-Vordrerene, Gwerh-Lohet, Mez-Goahieu, Mez-eur-Gweh, Mez-ur-Guer, Gouer-er-Vugale, Stang-Gouer, Stang-dre-Gouer*
- kibell : *Bortikiabel, Lann-Kiber*
- lenn : *Er-Lenn*
- loc'h : *Er-Loh, Stang-Bourdelouh, Loh-Vihan*
- pont : *Tal-er-Pont, Pont-er-Douar*
- poull : *Poull-Foen, Poul-Doar, Poul-Pri*
- puñs : *Puss, Les Pussew*
- ruzelenn : *Ruzell, Ruzol, Ruzelenn*
- stêr : *Ster-Bras, Ster-Voen, Ster-Vraz,*
- stivell : *Prad-Stivell*
- toull : *Toul-Deurven, Toull-er-Ru*

3. An douaroù hag al labour-douar :

- ant : *Ant, Nant*
- boutin : *Douar-Boutin, Boutinec*
- brein : *Douar-Brein*

-douar : *Douar Du, Douar Fresk, Douar Gwenn, Douar Melen, Douar Pri, Douar Yen, Douar Sec'h, Douar Don, Douar Kaled, Douar Boutin, Coushe Douar, Co Douar, Douaride, Douar ar Horn, Douar Kergueroz ; Douar Koz, Douar é Poez, Douar ar Segal, Douar kamm, Douar Valanec*

-ed : *Ide, Douaride*

-erv : *Ero, Erueo*

-eost : *Est*

-gwrimenn : *Grien*

-kailhastr : *Calastren*

-korn : *Korn vraz, Korn Uhelenn*

-maez : *Maez Bannec, Mez Braz re, Mez Braz dos-het Kerveau, Mez Bouillanseu, Mez Coulastrenn, Mez dister, Mez Dilannech'h, Mez Doureg, Mez Drezec, Mez Galarn, Mez-er-Feten, Mez Hennti, Mez Kamm, Mez Kreiz, Mez Krenn, Mez-Poul-Douar, Mez-Poul-Merin, Mez-er-Merc'hed*

-park : *Park-Dianen, Park-Goz-Leur, Park-Lann, Park-Laudan, Park-Mad, Park-Moën,*

-prad, pradenn : *Kerprad, Prad-Cost-er-Grigne, Prad-er-Gwerh, Prad-Halvé, Prad-Kloz, Prad-Moën, Prad-Puñs, Prad-Stang, Prad-Stivell, Pradenn Braz*

-roz : *Roz Dilannerh*

-talar : *an Dalar, Dalar-Vraz,*

-tirien : *Bortentrion, Trion Gwen, Truon- Doureg*

4. Ar struzh :

-aozilh : *aozill*

-askol : *Nanskol*

-balan : *Roz-Balan, Banaleg, Baneg, Ar Van-Aleg, Mez-ar-Banneg, Roz-er-Vanalec, Rouiad-Vanaleg*

-bod, bodad : *Bod-er-Lann*

-broen : *Broennew, Berrenaou*

- derv : *Bordery, Borduro*
- draen : *Dreneg*
- fanouilh : *Fanouilleu, Fanouillen*
- faou : *Bortifaouen*
- glazenn : *Glazenn, treuz-Glazenn*
- gwrizienn : *Grouien, Gouriad, Grouillen-Vraz,*

Roz-Kouriat

- gwiniég : *Kervigniec*
- haleg : *Bornaliguen*
- iliav : *Bordilla*
- kelenn : *Kerguelen*
- kerez : *Borguirezenn, Goh-Borguerezennine*
- koad : *Koed*
- krann : *Lancreno*
- lann : *Lanno, Borderlann, Kerlan, Lann-Bleunv, Lann-Bordiel, Lann-Bossenec-Uhel, Lann-Du-Berr, Lann-Gourin, Lann-Grignous, Lann-Guibers, Kosté-Lann-Vraz, Lann-Naud, Lann-Nerec, Lann-ar-Pan, Lannegoù-Vraz, Lann-Plad, Lann-Poulew, Lann-Rumenn, Lann-Stang-Venu, Lann-Vrec*
- polos : *Polostrenn*
- pour : *Park-er-Pour*
- raden : *Radenec*
- segal : *Stang-Segal*

5. Al loened :

- dourgi : *Maez-Dourgi*
- ejen : *Kervarijon, Kernejon*
- gwiz : *Stang-er-Huiz*
- hoc'h : *Nouh*
- kavan : *Stang-Gavann*
- kole : *Park-Golai*

- kudon : *Borchudan*
- marc'h : *Stang-Varh, Douar-Gourin-Marh*
- morvran : *Lann-Morvranec*
- oan : *Goubann-an-Nein*
- paun : *Douar-ar-Pan*
- roñse : *Douar-ar-Ronsed*
- vi : *Vioudec*
- yar : *Roz-er-Yer*

6. Ar pobladur :

- anvioù-tud : *Cado, David, Gallic, Guénole, Gweltas, Lagadec, Martha, Samzun, Tudy*

7. Ar relijion :

- abad : *Mez-an-Abad*
- beleg : *Kerbellec, Port-Bellec*
- diaoul : *Stang-Diaoul, Mez-an-Diaul*
- iliz : *Henn-an-Iliz*
- kroaz : *Kergroez, Borgrois, Borgroès, Douar-Stang-Groes, Mez-Kroisse, Mezer-Groez, Kroaz-Ru, Mez-Groaz-Gwenn, Mez-Groaz-Hir*
- lok : *Loctudy, Locqueltas, Locmaria*
- person : *Park-er-Person*
- priolaj : *Mez-Briolaj*
- taol, taol-vaen : *Rundol, Mez-an-Dolvan*

8. A bep seurt :

- boser : *Rosbossere*
- floc'h : *Borfloh*
- kastell : *Koh-Castel, Kastel-Braz, Kastel-Kerzo, Kastel-Brand, Er-Hastellic*
- kêr : *Cosquet*

-milin : *Mez-Vilin, Douar-Velin, Prad-Ervilin, Roz-Vilin, Parc-Er-Vilin-Gwiniec*
 -moger : *Magorlec, Magoueric, Magoerellek*
 -porzh : *Porhsalio, Porhkoter*
 -saoz : *Borsauz*
 -ti : *Ty-Neue, Tiseveno, Park-en-Ti*

An anvioù-lec'h en aod

Evit an anvioù bet implijet a-bell-gozh da envel ar reier, ar c'herreg, an tornaodoù, an tevennoù, an oufoù, an traezhennoù pe ar bazennoù, ez eo gerioù liv ar gwenedeg warno eo e kaver dreist-holl. Amañ-ahont avat e santer levezon brezhoneg Kerne rak an enezenn a zo bet melestret etre an ^{XI}^{vet} hag ar ^{XVI}^{vet} kantved gant leaned eus abati ar Groaz-Santel, e Kemperle, ha pleustret kalz eo bet dourioù Ar Gerveur gant pesketaerien eus Konk-Kerne pe eus ar Vro-Vigoudenn hag a deue da deurel o rouedoù e biojoù an enezenn. Lezet o deus, e lec'hioù zo, roudoù eus o zremen e trowardroioù an enezenn.

Ar c'hartennoù koshañ a sav d'ar ^{XVII}^{vet} kantved, met dister eo ar splot a c'haller tennañ diouto gant an diresis ma 'z int. Lod eus an anvioù a gaver bremañ war ar c'hartennoù a zo aes a-walc'h da gompren. Lod all avat a zo bet ken distummet ken ez eo diaes intent pe ster o deus. N'eo ket souezh rak savet eo bet ar c'hartennoù-se gant implijidi ar servijoù hidrografek na ouient ket a vrezhoneg (Cassini en ^{XVIII}^{vet} kantved, hag an ijinourien Beautemps ha Baupré en ^{XIX}^{vet} kantved). An anvioù-lec'h-se a zo bet studiet ivez gant Pierre Gallen en e levr us-veneget. Sed amañ-dindan an anvioù stankañ a gaver (amañ ivez e kavor skouerioù eus o implij gant an doare-skrivañ a-vremañ

hag, e lizherennoù stouet, ar stummoù evel ma c'haller o
lenn war ar c'hartennoù, seul wech ma vezont disheñvel) :

-aber / -ant : *Ant, Donnant* / -aod : *Aud, Douar-Naud*

-baz : *Basse* / -beg : *Begeg, Beger, Begeul*

-enez / -evn : *eon*

-feunteun : *Feteun, Feuntenvén, feunteun-Er-Huiz*

-garv : *Garó* / -goubann / -gourenez

-grae : *Greau, Gree, Gre* / -groa : *Gro, Groa, Grou,*
Groue, Grae / -groc'h : *Kroah, Kouar, Groh, Kroh* /

-grouign (moj, diwar ar galleg : grouin) / -gwazh : *gwaz*

-kanol / -kanez : *Kanez-Er-Ster* / -karreg : *Er Garregenn*
/ -kastell : *Koh-Kastel, Kastel-Pouldon, Kastel-Bornor* /

-korn / -korneg : *Korneg-Braz, Korneg-Bihan* / -krec'h

-lenn : *Herlin* / -loc'h : *Loh, Louh* / -lost : *Porh-Lost-Kah*

-maen : an anv a gaver ar stankañ an hini eo. Kalz
muioc'h a anvioù a zo, enno ar ger *maen* eget ar gerioù
karreg pe *roc'h*

-penn : *Pen-Marh, Pen-Vaz* / -piler : *Le Pilor, Piler-*
Beger / -pladenn : *Platenew* / -porzh : *Porh* / -poull : *Poul,*
Poull

-roc'h : *Roh, Roh-Toul* / -roz : *Ros*

-stank : *Stang* / -stêr : *Ster-Voen, ster-Vraz*

-tachenn / -tarzh : *Tarh, Beg-an-Tarh* / -toull : *Toul-*
Bihan / -treuzenn / -traezh : *Trez, Trezenn*

Menegiñ a ranker ivez daou c'her all, ne 'm eus ket
gallet kavout o zalvoudegezh :

-*Gourgadenn*

-*Uerh, N'uerh*

Breud taer etre daou abati galloudus

En XI^{vet} kantved e oa Ar Gerveur un dalc'h eus kontelezh Kernev. Ne oa ket poblet stank, met un abati vihan a oa war an enezenn, ha kêriadennoù amañ-ahont. Drastet e oa bet Ar Gerveur meur a wech gant an Normaned en X^{vet} kantved. Sailhañ a rejont war an enezenn, da ober ar riñs war ar manati hag an hu war ar venec'h. Ret e voe d'al lodenn vrasañ eus ar boblañs tec'hel rak an alouberien ha mont d'en em repuiñ war an douar-bras. Hervez ar gont a reer, e kavjont bod ha gwarez e Gwidel, a oa d'ar c'houlz-se en ur bastell-vro piaouet gant konted Kernev.

Pa voe deuet ar peoc'h en-dro, ur wech faezhet an Normaned ha distrobet Ar Gerveur diouzh o c'hrabanoù, e voe poent soñjal adsevel an enezenn diwar he dismantrou. Hag e gwirionez, ken bras freuz ha ken bras reuz a oa bet graet e-pad ur c'hantved ma rankjed adreiñ d'an enezenn un urzhiadur nevez ha start, gouest da frammañ buhez an dud en-dro. Konted Kernev avat n'o devoa nag an arc'hant nag ar velestradurezh e-tailh da verañ an enezenn, da zastum an tailhoù, da lezenniñ,

da gas en-dro al labour-douar, ar pesketaerezh, ar vuhez ekonomikel ha da adframmañ ar vuhez relijiel war diazezoù nevez. Ret eo derc'hel soñj ne oa ket disrannet ar galloudoù d'ar c'houlz-se hag e veze meret pep tra gant an Iliz, a oa an aozadur galloudus nemetañ gouest da seveniñ ken bras labour. Se a zo kaoz m'en em droas Geoffroy I^{añ}, kont Kernev ha dug Breizh, war-zu an Iliz. En ur garta eus ar bloaz 1006 e lenner e ra an dug an donezon eus an enezenn da abati Redon, un abati kozh-mat, pa oa bet diazezet e 832 : diwar neuze ez eo menec'h an abati-se eo hag a vo e karg eus melestradurezh an enezenn, ken war dachenn ar relijion, ken war dachenn an traoù bedel.

An aozadur diazezet gant ar venec'h beneadat en deus treuzet divrall kantvedoù niverus : da gentañ e tiazejont ar parrezioù : Lokmaria a voe diazezet e 1070, Saozon eizh vloaz diwezhatoc'h, e 1078 ; parrez Porzh-Lae a voe diazezet e-tro ar mareoù-se ivez, ha Bangor a deuas en-dro da vezañ kêrbenn an enez, sez ar brovostiezh, da lavaret eo sez ar galloud relijiel, ar galloud barn hag ar galloud politikel. War ar memes tro e rannas ar venec'h douaroù pep parrez e atantoù kement-ha-kement, da lavaret eo un ugent hektar bennak evit pep lodenn. Pep atant a voe fiziet d'un tiegezhiaed kouerien. Hag amañ ivez e pado pell an aozadur-se, pa ne vo adlodennet douaroù an enezenn nemet e-kreiz an XVIII^{vet} kantved da-geñver adreizh an douaroù¹¹. Ouzhpenn-se, al lodenn vrasañ eus ar c'hêriadennoù a gaver bremañ c'hoazh er Gerveur a voe diazezet e-tro ar bloavezhioù-se ivez.

Hogen da-heul un tabut liammet gant un hêrezh bet dael diwar he fenn, e fellas d'ar c'hont Alan Canhiart,

11 Gwelet ar chabistr diwar-benn an Akadianed.

nevez deuet en-dro e piaou an enezenn, reiñ anezhi da venec'h abati Kemperle, edo o paouez diazezañ. Kement-mañ a oa evitañ un doare da leveañ an abati bet nevez krouet. Edomp neuze e 1029.

Menec'h Redon en em savas a-enep an diviz-se, ha breud taer a savas neuze etre an div abati. Ouzhpenn ur c'hantved e padas an diemglev etre menec'h Kemperle ha re Redon. A-benn ar fin, goude nouspet prosez ha goude meur a emelladenn a-berzh an eskibien ha zoken a-berzh ar Pab e-unan, e voe sinet un emglev ha skaret an arguz etre an div abati : abati Kemperle a deuas da vezañ gwir verourez an enezenn, diwar-goust abati Redon. Kement-mañ a c'hoarvezas e 1172, ha meret e vo Ar Gerveur gant Beneadiz Kemperle tre betek 1572, da lavaret eo e-pad pevar c'hantved.

Ar venec'h a zastume an deog, da lavaret eo an tailh dleet gant ar gouerien d'an Iliz Katolik, a c'hoarveze eus ul lodenn eus an eost pe eus al loened desavet. Gwir peñse o devoa ar venec'h ivez, ha tailhoù a zastument war ar sec'herezhioù pesked. En eskemm e tiservijent ilizoù an enez, ha gwir aotrou an enezenn a oa tad abad Kemperle. Bez' e oa en emell eus ar vuhez relijiel, met ivez eus an aferioù bedel.

Mistri an enezenn : eus ar venec'h d'an dudjantil, eus an dudjantil d'ar roue

Er XVI^{vet} kantved emañ ar bed o cheñch, ha darvoudoù bras a zo a-wel : ur bed nevez a zo war lusk, er Gerveur evel e lec'h all : n'eo mui an Iliz ken galloudus ha ma oa bet er Grennamzer, hag an urzhioù relijiel bras o devoa astennet o beli war ar gevredigezh a-bezh, ha frammet anezhi en ur mod, ez a o fouez war zisteraat. Setu pemp kant vloaz bremañ m'emañ ar galloud er Gerveur gant ar venec'h beneadat, re abati Redon da gentañ, ha re abati Kemperle da c'houde. Hogen ar venec'h n'eo mui na kreñv na pinvidik a-walc'h o urzh evit bastañ d'an ezhommoù nevez, dreist-holl a-fet surentez ha difenn, rak dispignoù divuzul a ranker ober a-benn bremañ : ret eo sevel ur c'hreñvlec'h ha n'haller ket kemer, derc'hel e-ratre an difennoù kozh ha paeañ ivez an dud a vrezel a yelo d'ober gwarnizon an enezenn. Youl ar roue an hini eo. Enez-ar-Gerveur, bet kantvedoù-pad ur vammenn gorvoder evit ar venec'h, gant al leveoù hag an tailhoù a oa stag outi, a zo bremañ ur garg re bounner evito.

Ret eo kavout un diskoulm bennak. Roue Bro-C'hall Henri II an hini eo a zirouestlo ar gudenn : e 1572 e redio ar venec'h da leuskel an enezenn gant un denjentil a renk uhel ha pinvidik-meurbet, ar marichal Albert de Gondi. Mab ur bankour pinvidik eus Lyon eo an dense. Bet eo kannader ar roue e Bro-Saoz, ha deuet mat eo gant Catherine de Médicis, ur vaouez galloudus ma 'z eus unan. Hervez an emglev bet sinet gant ar roue, ar venec'h hag ar marichal, e vez roet d'an enezenn ar statud lezennel a varkizelezh, hag ar venec'h e vez roet dezho en eskemm douaroù e Kallag hag e Gwireal, gant al leveoù a zo stag outo. De Gondi, diouzh e du, a ranko lakaat melestrañ an enezenn evit brasañ mat an holl. Bez' e ranko, e-touez traoù all, diogeliñ surentez Ar Gerveur dre lakaat sevel ur c'hreñvlec'h ha dre zerc'hel er c'hreñvlec'h-se ur gwarnizon a-hed-pad. Eñ an hini eo a vo e karg eus ar galloud barn. Evit ar roue, bez' e c'hello addont e piaou an enezenn hag adstagañ anezhi ouzh domani ar gurunenn pa fello dezhañ, ha pa gavo dezhañ pe d'e ziskennidi e vo ret en ober. Un dra vat evit an enezourien en emglev-se : kuit e vint a delloù roueel.

Re de Gondi a chomo mistri war Ar Gerveur betek 1658, da lavaret eo e-pad tost da 80 vloaz. Er bloavezh-se avat e ranko Henri de Gondi, rivinet gant ar foranerezh ha sammet a zle, gwerzhañ markizelezh Ar Gerveur d'un denjentil all, Nicolas Fouquet, pennverour kellidoù foran ar rouantelezh. Fouquet avat ne chomo ket gwall bell e penn Ar Gerveur, rak tri bloaz goude hepken, kouezhet er wallc'hras, e vo harzet ha toullbac'het er Bastille dre urzh ar roue (bez' e oa, abaoe pell a oa, e gouloù ar roue Loeiz XIV, a rebeche outañ bezañ re c'halloudus hag ober lorc'hajoù gant e vadoù). Fouquet, koulskoude, e

oa intrudu ennañ ; gouzout a rae peseurt splot a c'hallje tennañ eus Ar Gerveur, hag e savas c'hoant dezhañ ober eus an enezenn ur greizenn ma vije bev ar c'henwerzh enni. E-korf an tri bloaz ma voe merour an enezenn e tegasas enni nevezentioù hag e roas ul lusk nevez d'an armerzh : dre e atiz e voe degaset ar gwinierezh er Gerveur ; a bep seurt a reas evit diorren ar pesketaerezh : savet e voe ur chaoser vras ha terket ur borzhlenn e Porzh-Lae, ha lakaet e voe sevel ivez bagoù-pesketa ha pevar c'has-mare. Dedennet da vat e oa ivez gant ar sardineta hag an teknikoù mirout ar sardin, dre sec'herezh pe dre waskerezh. Ar 4000 barilhad sardin gwasket bep bloaz a roe 250 barilhad eoul, ha Fouquet a glaskas talvoudekaat an eoul-se hag e lakaat war ar marc'had dre gas anezhañ dre vor da Vro-Spagn pe betek an Antilhez zoken. Strivañ a reas ivez da ziorren al labour-douar, ha daougementet e voe niver ar milinoù-avel er Gerveur. Tud Ar Gerveur e voe donedigezh Fouquet en enezenn ur misi evito, rak ouzhpenn m'en doa lakaet embreger labourioù bras, deuet e oa a-benn, ivez, da gaout asant ar roue evit ma vije bet miret ar splotoù kemedel a oa bet roet d'an enezourien 80 vloaz kent.

Keit ha ma padas ar Renadur Kozh e voe hêrezhel ar c'hargoù hag an titloù, ha re Fouquet a viras an titl a varkiz Ar Gerveur betek 1718. Er bloavezh-se e fellas d'ar roue Loeiz XV adperc'hennañ an enezenn. En akta a zilez e lenner e kav d'ar roue ez eo ret adperc'hennañ Ar Gerveur « *evit mad servij E Veurdez, ken a-fet difenn Ar Gerveur, ken en abeg d'an diazezadurioù nevez e fell d'E Veurdez staliañ eno evit splot e rouantelezh ha talvoudusted e sujidi, evel, da skouer, michererezhioù, silinoù hag oberoù*

*all*¹². » Betek an Dispac'h e chomas Ar Gerveur e kerz ar gurunenn, hep tamm hanterouriezh ebet war-bouez ar feurmerien veur, o devoa an emell eus ar mererezh, hag ivez Kompagnunezh an Indez, a oa he sez en Oriant.

Freuz-difreuz al laeron- vor ha reuzioù ar brezel

E 1483 e teuas er-maez ur pezh levr bet savet gant un den gouiziek hag a oa bet o redek ar morioù e vuhezpad : loman-rouder e oa bet, ha kabiten a vor ivez. An den-se a veze graet Pierre Garcie Ferrande¹³ anezhañ. Al levr e oa ennañ kartennoù hentoù-mor Europa hag un deskrivadur pizh ha pervezh eus an holl ditouroù talvoudus a oa ezhomm anezho – hag eus an dañjerioù a bep seurt a ranked talañ outo ivez – pa vezed o verdeiñ d’ar mare-se etre Jibraltar ha Mor-Iwerzhon : ar c’herrigi, ar bazennoù, ar c’hasennoù, an douarajoù, ar merkoù, hag ar roudoù-avel...

Al levr-se e oa meneg ennañ eus Enez-ar-Gerveur, evel-just, ha kavet e veze ennañ anvioù porzhioù-mor Saozon ha Porzh-Lae. Daoust ma skrive Ferrande en e levr e oa gwaskedet mat ha diogel porzhioù-mor an enezenn, ne oa ket diriskl merdeiñ e biojoù Ar Gerveur evit an dra-se, dreist-holl abalamour da argadennoù al

13 Pierre Garcie Ferrande : 1441-1502

laeron-vor¹⁴. Taget hag ac’hubet e oa bet an enezenn en X^{vet} hag en XI^{vet} kantved gant an Normaned, a denne splet eus he lec’hiadur evit sevel gant ar Gwilen pe al Liger hag argadiñ alese ar bourkoù, ar manatioù hag ar c’hêrioù a gavent war o hent. Etre ar XIV^{vet} hag ar XVI^{vet} kantved ez eus bet diehan morlaeron oc’h hentañ biojoù an enezenn : Saozon, Hollandiz, met ivez Spagnoled, pe c’hoazh laeron-vor o tont eus Bro-Charente pe eus ar Saintonge. Gwech e tagent al listri-kenwerzh a dremene e-tal Ar Gerveur ; gwech e sailhent war an inizi – Ar Gerveur, Houad, Edig, Groe – hag e wastent anezho, ha gwechoù all, pa save bec’h warno, e kavent repu en ur porzh-mor pe en un ouf dizarempred ha gwaskedet mat, ha neuze n’o devoe tud Ar Gerveur peoc’h ebet ganto. E dielloù a zo e lenner zoken e oa bet roet da Enez-ar-Gerveur, koulz zo bet, al lesanv a *Enez al laeron*.

N’eus ket bet dalc’het soñj, anat eo, eus an holl zrougoberioù a zo bet gant al laeron-vor, rak, evit komz heñvel ouzh ar wirionez ez eus bet, e-pad meur a kantved, paot a grogadoù, ken war vor, ken war an enezenn. Koulskoude, darn eus o mestaolioù a zo bet ken kriz ken ez eo chomet bev-mat ar c’houn anezho, ha lezet o deus evel-se ur roud bennak en istor. Sed amañ dindan un toulladig skouerioù eus ar freuz-difreuz hag an drailh a voe ganto :

E 1313 e tiskennas laeron-vor saoz er Gerveur, e Houad hag e Edig. Preizhañ a rejont an ilizoù ha laerezh

14 Laer-mor / morlaer : den a vor a oar preizhañ madoù diwar-goust al listri all. Ur c’hourser avat a oa ul laer hag a breizhe war vor gant aotre ar gouarnamant, ar roue.

an traezhoù prizius a oa enno : ar c'halirioù, ar c'husto-
doù, al levrioù-oferenñ, ar c'hrusifioù, an arrebeuri, ha
zoken an holl bourvezañsoù a gavjont enno. Freuzañ tiez
ha tangwallañ anezho a rejont ivez, ha skrapañ a rejont
leaned hag un nebeud gwazed all eus an enezenn a-benn
goulenn daspren. Roue Bro-C'hall Philippe Le Bel ne oa
ket diseblant ouzh tonkad Ar Gerveur (klasket en doa
c'hoazh e 1295 astenn e grabanoù war dugelezh Breizh
ha stagañ anezhi ouzh e rouantelezh), ha skrivañ a reas
da roue Bro-Saoz evit taolenniñ krizder al laeron-vor
ha goulenn ma vijent kaset en-dro da Vreizh dindan
gwardoni evit bout barnet ha kondaonet.

Er-tro ar bloavezhioù 1390, setu adarre laeron-vor, oc'h
argadenniñ ouzh Enez-Houad ar wech-mañ. Tangwallañ
a rejont ar gouent hag ar chapel a oa stag outi. Darn eus
ar venec'h a deuas a-benn da guitaat an enezenn evit
mont da glask repu e gourenez Rewiz. Ar re na c'halljont
ket tec'hout a voe lazhet didruez. Kalz diwezhatoc'h, da-
geñver furchadegoù arkeologel, e voe adkavet o relegoù
damdost d'an iliz.

Er bloavezh 1454 e voe gwelet laeron-vor oc'h argadiñ
amheuliadegoù listri-kenwerzh hag oc'h abourzhiñ ane-
zho e-tal Ar Gerveur evit o freizhata.

Astenn ar roll-se a c'hallfer ober hep gouzout morse ar
gont resis eus reuzioù fall al laeron-vor-se.

E gwirionez n'eo ket souezh, pa studier a-dost
lec'hiadur an enezenn, e ve bet taget Ar Gerveur kel lies
a wech en istor. Da gentañ emañ lec'hiet war hent-mor
an aocherezh etre ar Meurvor Atlantel ha Mor Breizh, ha,
ma ledanaomp hor sell, etre kreisteiz ha norzh Europa.
Diwezhatoc'h, adal ma voe savet porzh An Oriant, he
deus gwarezet Ar Gerveur hentoù pourveziñ arsanailhoù

Brest hag An Oriant, ha bet eo ivez ur morailh e-tal genoù al Liger, war hent porzhioù Sant-Nazer ha Naoned.

Peurvuiañ ec'h en em gave diharp ha dizifenn tud Ar Gerveur. Dre ziv wech e taolas ar Pab an eskumunugenn war ar vorlaeron o devoa taget an enezenn (ar wech kentañ e voe a-berzh Benead XIII, e 1408, hag an eil gwech a-berzh Nikolas V, e 1454). Ya, bezet souezhet neb a garo, ar bibien o-unan a oa e chal gant tonkad Ar Gerveur, marteze a-walc'h abalamour ma oa an enezenn e piaou an Iliz Katolik hag e oa bet gourdrouzet ha drouklazhet al leaned a veve enni zoken ! Evelkent e kredan gellout lavaret ne voe ket spontet ar vorlaeron gant gourdrouzoù speredel hon Tad Santel ar Pab.

Ur c'hantved goude – edod neuze e 1536 – e c'hour-c'hemennas Frañsez I^{añ}, roue Bro-C'hall, ma vije skarzhet eus Ar Gerveur an holl enezourien, abalamour ma oa an enezenn en toull tostañ da vezañ taget gant goprsoudarded spagnol. An urzh-se avat ne voe ket sevenet : ne vije ket bet tu, n'eus forzh penaos, da gas prim-ha-prim d'an douar-bras un 2500 bennak a dud, gant o arrebeuri hag o chatal !

Bep a nebeut e voe tremen anat ne oa nemet un dra da ober evit suraat buhez an enezourien : ret e oa reiñ d'an dud peadra d'en em zifenn. Setu perak e voe savet adal 1549 ur c'hastell-kreñv e Porzh-Lae, el lec'h end-eeun ma oa bet diazezet ur c'hreñvlec'h dister gant ar venec'h en XII^{vet} kantved. Evit arc'hantaouiñ al labourioù war-dro ar c'hastell-kreñv-se e voe diskaret ha gwerzhet 200 devezh-arat a goadeier e Lanvaaz. Hag o vezañ ma ne oa ket a c'hreunvaen war an enezenn e voe lakaet diskar kastell kozh An Alre ha treuzkas ar vein betek Porzh-Lae.

Kement-mañ a c'hoarvezas dre urzh Henri II, roue Bro-C'hall :

« Er bloavezh a c'hras 1549, da-heul an danevell bet graet d'ar roue Henri II eus ar reuzioù a veze bemdez er Gerveur, e c'hourc'hemennas E Veurdez ma vije savet ur c'hreñvlec'h evit bountañ kuit an dagerien. Kefridiet e voe Frañsez a Roc'han, Aotrou eus Gié, ha letanant-meur e Breizh... Hemañ an hini eo a lakaas dougen d'Ar Gerveur an dafar rekis evit sevel ul lec'h kreñv, hag a zibabas ivez e pe lec'h e ranke bezañ savet¹⁵. »

Diwezhatoc'h, er XVII^{vet} kantved e fizias Loeiz XIV d'e ijinour-brezel meur, Vauban, ar gefridi da greskiñ ar c'hreñvlec'h-se, ha Napoleon, etre 1804 ha 1814, a lakaas embreger labourioù bras war-dro ar wikadell a oa bet savet gant Vauban, hag a weler bremañ c'hoazh a-us da b/Porzh-Lae.

Estroc'h evit al laeron-vor avat a c'hourdrouze buhez an enezenn, rak bep tro ma save brezel etre roue Bro-C'hall hag ur vro estren e troe ar mor da dachenn emgann, hag an enezenn en em gave e kreiz ar freuz hag ar reuz, ha kement-mañ ken abred hag ar XVI^{vet} kantved, da-geñver brezelioù Fransez I^{añ}, roue ar C'hallaoued, a-enep an impalaer Charlez V. Kemeret e voe Ar Gerveur gant ar Saozon e 1575 hag e 1761, gant an Hollandiz e 1674. Taget, kelc'hiet, gourdrouzet e voe meur a wech gant ar Saozon, ar Spagnoled, an Hollandiz, unan-hag-unan pe a-stroll, e 1676, 1703, 1746 ha 1795. Ar Gerveur, daoust m'edo re bell diouzh an douar-bras evit bezañ un elfenn a bouez e sistem difenn an aod, a vije bet, ma vije bet

15 Gar

enebourien o tiazesañ enni, ur bon a-raok o dije gallet, diwarni, prientiñ un dilestradeg ha tagañ porzhioù-mor an douar-bras.

Kement ha kaout ur sell a-vras war an darvoudoù a c'hoarvezas er XVI^{vet} kantved, sed amañ dindan un nebeud deiziadoù :

- 1536 : urzh skarzhañ a-berzh François I^{añ}.

- 1545 : tud Ar Gerveur a c'houlenn ma vo digresket an tailhoù. Ne c'hellont ket paeañ, rak ar Saozon a sav daspren warno.

- 1548 : soudarded saoz a sailh war Ar Gerveur.

- 1549 : Henri II ar roue a ordren ma vo savet ur c'hreñvlec'h e Porzh-Lae.

- 1553 : ur strollad listri brezel saoz en em gav e-tal Porzh-Lae.

- 1557 : gwarnizon an enezenn a vez kresket : diwar ar bloaz-se e vo 200 den ennañ.

- Argadet e vez Ar Gerveur gant listri spagnol.

- 1558 : 7500 soudard saoz a sailh war ar vro. Drastet e vez Plougonvelen, Lokmaze, Konk-Leon. Tostaat a ra al listri saoz d'Ar Gerveur.

- 1567 : gwastet e vez Ar Gerveur gant soudarded spagnol.

Pe heuliadoù o devoa war boblañs an enezenn argadegoù al laeron-vor hag ar brezelioù diehan a lakaas broioù Europa krog-ha-krog kantvedoù-pad diwar-goust ar beorien ?

E-giz kustum en istor ez eo dibaot an testenioù dre skrid diwar-benn buhez pemdeziek an dud vunut : kronikerien an amzerioù-se a oa troet da gontañ taolioù-kaer ar vrezelourien ha da dresañ ton dezho, ha ne oant ket

nemeur e chal gant trubuilh ha strafuilh Yann Gouer pe Yann Besketaer. An enezourien e tlee bezañ ankenius o doare avat gant ar gourdrouzoù a veze dalc'hmat a-zioc'h o fenn. Engortoz e vezent mui pe vui, da welet o eostoù devet, o ziez drastet ha tangwallet, ha da vezañ skrapet pe lazhet gant un enebour bennak deuet dre vor da dagañ an enezenn. Bezañ atav war an difenn n'eo ket un ebad, ha na zisoñjomp ket ar c'hrennlavar kozh : *an teir gwalenn a gastiz : ar gernez, ar vosenn hag ar brezel*. N'o deveze an dud ken rekour en o dienez nemet en em erbediñ da Zoue, d'ar Sent ha d'ar Werc'hez, hag en em lakaat dindan gwarez un aotrou galloudus bennak, kreñv a-walc'h ha gouest d'o difenn.

Notennoù diwar-benn al labour-douar

Diwar ar pezh a ouzomp pa lenner ar mammennoù istorel a gaver meneg enno eus Ar Gerveur (levr dielloù abati Kemperle peurgetket pe an teulioù kozh graet da-geñver kevratoù dilez, da skouer), e stader ez eo bet pouezusoc'h a-galz, hag a-holl-viskoazh, gounidoù al labour-douar eget re ar pesketaerezh. Kentañ a reas menec'h abati Redon, en XI^{vet} kantved a voe lodenniñ an douaroù ha klask tud da diekaat atantoù an enezenn. Ar Gerveur, a-raok bezañ troet war-zu ar mor, ez eo bet diazezet hec'h ekonomiezh war al labour-douar da gentañ penn eta, ha kantvedoù-pad ne voe aotreet ar pesketaerezh gant an aotrouien nemet e kement ha ma ne rae ket gaou d'al labour er parkeier ha war-dro an atantoù : un dra ouzhpenn ne oa ken ar pesketaerezh. Ne gemmas an traoù nemet en XIX^{vet} kantved, gant berzh bras ar sardineta.

Petra a c'haller lavaret diwar-benn al labour-douar er Gerveur ?

An enezenn n'eo ket an darn vuiañ eus he douaroù eus ar re strujusañ, ha dibaot a barkeier trevadus-kenañ a

zo enni. Kent d'an douaroù bezañ bet temzet gant ludu, e chomas difonn an eostoù, daoust ma veze graet ingal gant bezhin da drempañ an douaroù. Alies ivez e c'halle an trevadoù bezañ freuzet gant ur barr-amzer savet war ar mor hag a rivine trumm ha diremed ur bloavezhriad trevell tenn. N'eo ket souezh eta e ve bet paour kouerien Ar Gerveur. Alies e tegoueze kernez ha dienez.

Diazezet e oa al labour-douar war ur rouedad atantoù, bihan o ment, hag o pleustriñ ul liesgounezerezh astennidik. Betek adreizh an douaroù zoken, bet kaset da benn e 1766, e oa frammet an tiekaat war un urzh kumuniel : boutin e oa alies an ardivinkoù, ar greun, an had hag ar chatal, hag an arrebeuri zoken, ha ne oa ket ur ral ivez kavout daou diegezh o vevañ dindan an hevelep toenn hag o fardañ boued er memes podhouarn bras war an oaled.

Marcelle Bresson, un dudoniourez bet o studiañ an enezenn e 1924, a voe souezhet bras o kavout enni tachennoù ec'hon dindan lann. Ha diaes e oa dezhi kompren, gant he sell a-ziavaez – a oa ivez savboent ur gêriadez – perak e veze lezet kemend-all a zouaroù fraost, pa vije bet ret, hervezi, digrakañ al lanneier evit talvoudekaat an douaroù :

« Iskisat tra eo, e gwirionez – met an dra-se a adkaver e Breizh a-bezh – gwelet, e kreiz an enezenn, lanneier ec'hon, a zalc'h an enezidi start dezho, pa rankfe koulskoude kement logell douar a zo bezañ gounezet aketus¹⁶... »

Koulskoude e oa talvoudus-tre al lanneier da vuhez an atantoù, er Gerveur evel e lec'h all :

« N'emañ ket al lanneier er-maez eus al labour-douar,

16 Marcelle Bresson, « Belle-Île-en-Mer », in *Annales de Géographie*, 1924, t.33, niv. 184, pp.336-351.

*evel ma vez termenet ent-strizh gant tud Breizh-Izel : diazez al labour-douar an hini eo kentoc'h*¹⁷. »

E-pad pell o deus soñjet ar gouerien zoken ne oa ket a venaj mat nemet ha lanneier a vije warnañ. Tennañ splot a rae an atantoù diouzh al lanneier : gouzilh a veze tennet diwarno, d'o ledañ er c'hrevier ha d'ober teil goude-se evit temzañ an douar-labour. Ledet e veze ivez ar gouzilh-se en hentoù don hag e porzhioù an atantoù, kuit d'al loened ha d'an dud da sankañ er fank. Goude-se e veze ledet er parkoù ar meskaj-se, fank ha gouzilh mesk-ha-mesk, d'o zemzañ. Troc'het ha pilet e veze strujoù nevez al lann evit magañ ar c'hezeg. Louzeier all a greske el lanneier ha tro d'o zro (raden, flach, balan, brug, elor hag all) ha tennet e veze splot diouto ivez (toñ, kantennat...). A bep seurt jiboez a veze klask warne gant ar chaseourien hag ar vigrierien el lanneier, ha leun a vel-brug e veze ar ruskennoù.

Temzet eo bet ar parkeier e-pad pell gant bezhin, ha da varn diouzh ar statistikoù istorel hon eus, ez eo gwinizh dreist-holl a veze gounezet e parkeier Ar Gerveur. Kement-mañ a vez kadarnaet gant an niver bras a vilinoù a gaved gwechall : gouzout a ouzer ez eus bet savet 23 milin etre ar XVII^{vet} hag an XIX^{vet} kantved. Betek an Dispac'h Bras e oa ar milinoù-se milinoù-dalc'h, da lavaret eo e ranke ar gouerien paeañ taosoù evit lakaat malañ o greun. Ar fornioù da boazhañ ar bara – a oa d'ar c'houlz-se diazez ar vagadurezh – a oa ivez fornioù-dalc'h. Alese ar pezh a c'halled lenn en un almanak e 1791 : « *Delivrit ac'hanomp eus ar feodalc'h, eus ar fornioù – hag ar milinoù-dalc'h*¹⁸. » Kement-mañ, ma talvez e evit kouerien Breizh-Izel dre

17 Camille Vallaux, douaroniourer (1870-1945)

18 Almanach du Père Gérard, 1791

vras, a dlee bezañ gwir ivez evit labourerien-douar Ar Gerveur, strobet evel ma oant en un urzhiadur sonnet hag a yae en-dro, alies-mat, diwar o c'houst, evito da vezañ, koulskoude, diazez ha sichenn an urzhiadur-se.

Edeier all a veze gounezet ivez, met a gementadoù disteroù : parkadoù kerc'h hag heiz a veze ivez. Ar c'herc'h a yae da vagañ an dud (yod-kerc'h) hag ar c'hezeg. Miret e veze an heiz evit en ebeulien, ar moc'h hag an ejon lard. E kemm diouzh atantoù an douar-bras, ne veze ket gounezet a winizh-du er Gerveur, abalamour ma ne deu ket brav ar gwinizh-du en douaroù ma c'hwezh warno an avel-vor. Displeget eo bet kement-mañ gant an istorour de La Touche :

« Klasket ez eus bet gounit ed-du, met ur c'hwitadenn eo bet. Ouzhpenn ma ya an ed-du gant ar bodadoù rev diwezhat a vez en nevezamzer, gweñvet ha devet e vez e vleuñv gant an avelioù bras, a ziskar ivez e c'hreun¹⁹. »

Gwiniegi a zo bet ivez, met diaes eo lavaret da sur, abalamour d'an diouer a destenioù, pet gorread a oa ha pegoulz e voe paouezet d'o gounit. Ne oa nemet dibaot a wez-avaloù, ha gant se ne oa ket tud Ar Gerveur gwall everien chistr.

Nevezentioù a voe degaset en XIX^{vet} kantved : ar maiz, diouzh un tu, hag an avaloù-douar, diouzh an tu all :

« Stankañ gounidegezh a weler pa valeer e diabarzh an enezenn eo ar maiz, bet degaset war-dro 1830 hepken, hag ur souezh eo gwelet, en diskaramzer, an tiez kaeraet gant melloù krapadoù maiz melen bet istribilhet ouzh an talbennoù d'o lakaat da sec'hañ²⁰. »

19 dlet

20 Marcelle Bresson

War ur renabl graet a 1763 e veneger evit ar wech kentañ un eostad avaloù-douar. Kalz abretoc'h eget e lec'h all e Breizh eta, ha dleus eo tud Ar Gerveur d'ar Saozon evit kement-se : ac'hubet e voe an enezenn ganto etre 1761 ha 1763, hag int eo a zegasas ganto an torzhelloù debradus-se, ne voent gounezet a-vras e lec'h all e Breizh nemet hanter-kant vloaz goude. Peuzgoude, an Akadianed d'o zro a blantas avaloù-douar ivez hag a aesaas kalz ar c'hounidegezh-se²¹.

Mard eo gwir ez eo krin a-walc'h an douaroù a gaver war ar bladenn uhel, e-kreiz an enezenn – anezho douaroù hag a vez skubet alies gant avel sall – e ranker menegiñ e kaver, er saonennoù gwaskedet mat a ziskenn betek ar mor, pradennoù pad gleborek ha douret gant gwazhennoùigoù red. Eno e kresk geot druz hag a zo mat evit ar chatal. N'eo ket ur souezh eta e ve bet bev-mat ar sevel-chatal er Gerveur : kalz deñved a zo bet, a-holl-viskoazh, met ivez ejened ha saout-laezh. Un amzer a zo bet zoken ma veze savet kezeg : prenet e veze an ebeulien digant kouerien an douar-bras, ha maget e vezent war an enezenn, e-pad ur bloaz kent bezañ kaset en-dro d'an douar-bras da vezañ gwerzhet e foarioù An Alre hag en trowardroioù.

Doare ar c'hêriadennoù hag an atantoù

Pa deuas Vauban, ijinour brezel ar roue, d'ober e droidad enklask war an enezenn e 1683 e-sigur prientiñ al labourioù difenn e Porzh-Lae, e voe souezhet o welet pegen paour ha dister e oa tiez ar gouerien, « *muioù* »

21 Gwelet ar pennad diwar-benn an Akadianed.

*heñvel ouzh krevier-moc'h eget ouzh tiez-annez*²² » (n'on ket evit mirout a soñjal ez ae Vauban re bell ganti, boazet ma oa, moarvat, da chom e demeurañsoù a lorc'hañs, ha tuet da ober fae war Yann Gouer). En un danevell-skrid eus ar bloaz 1705 e lenner a-hend-all « *n'eus e bourk Saozon koulz lavaret nemet tiez-plouz, liv ar brasañ paourentez warno*²³. »

Kêriadennoù bras a-walc'h a oa er Gerveur, hag e lod anezho ez eus bet renablet betek ur pemzek bennak a atantoù. Tiez a-steudad eo a yae d'ober ar c'hêriadennoù-se. Izel e oant, evit m'en dije an avel nebeutoc'h a beg warno, ha durc'haet war un ahel reter-kornôg, gant un talbenn digor war ar su eta. Gouverket eo bet kement-mañ gant Charles de La Touche :

« *Tud Ar Gerveur a zo bet speredek hag evezhiek, a-holl-viskoazh, ha taolet o deus evezh bras ouzh durc'hadur an tiez a savent war ar maez : an holl anezho a zo troet o mogerioù-pignon d'ar biz hag d'ar mervent, ha gant se en em gav an talbenn, durc'haet d'ar reter ha d'ar c'hreisteiz, gwarezet mat diouzh avelioù fall ar c'hornôg. Durc'haet heñvel eo ar grañjoù, ar marchosioù, ar c'hrevier-saout hag ar c'hrevier-deñved, hag an durc'hadur-se, ouzhpenn ma 'z eo yac'husoc'h, en deus ivez ar splot da wareziñ an toennoù dre ginnig nebeutoc'h a beg d'ar barroù-avel. An estrañjourien o deus savet ti hep derc'hel kont eus skiant-prenet ar re gozh o deus bet keuz ruz eus o diboellerezh. Ret eo en em wareziñ diouzh an avelioù da gentañ penn ha dreist pep tra. O vezañ m'eo bet savet an tiez war ar bladenn, ha n'eo ket er saonennoù, n'eus tra bouezusoc'h eget bezañ gwarezet diouzh avelioù*

22 flo

23 flo

ar mervent, a vez karget atav gant aezhennoù sall ; pa vez analet ingal an aezhennoù-se ez int kiriek da danijennoù ar skevent hag ar bronkez, hag a bad keit ha ma talc'her da analat an aezhennoù peurgarket a holen²⁴. »

Tro-war-dro d'ar c'hêriadennoù e oa peurvuañ liorzhoù bihan klozet gant morgleuzioù, ma veze gounezet enno a bep seurt legumaj evit bastañ da ezhommoù an tiegezh. E kement kêriadenn a oa e veze ivez ur puñs boutin pe ur feunteun hag ur poull-kannañ hag a oa boutin ivez.

Diwar-benn al legumaj a veze gounezet el liorzhoù en XIX^{vet} kantved e skriv Chasle de La Touche kement-mañ :

« Saourusoc'h eo legumaj Ar Gerveur eget ar re a gaver war an douar-bras. Prizet kalz e vez dreist-holl an irvin bihan, an avaloù-douar, ar c'haol, an asperjez hag an artichaod. Daoust ma ne c'holoer ket an artichaod er goañv, ne skornont morse, nemet ha kriz-meurbet e vefe ar goañv. Mard eo blazet ken mat ha ken frondus an irvin bihan, a-drugarez da zouar an enezenn eo, rak pa vezont hadet war an douar-bras ne deuont ket ken brav, hag e kollont o ferzhioù mat. E kemm, an irvin deuet a lec'h all hag hadet er Gerveur a ya buan war wellaat²⁵. »

E pep atant e veze un ti-annez toennet izel ha toullet e dalbenn gant un nor hag ur prenestr hepken. Peurvuañ e veze al lojeiz e rez-an-douar : ur pezh hepken gant ul leur-zi douar palumet, ha nebeut a arrebeuri ennañ. En ur penn eus ar pezh, an oaled m'en em starde an dud en-

24 dlt

25 dlt

dro dezhi en nozvezhioù teñval ha yen. Pa voed deraouet da doenniñ an tiez gant sklent e voe gallet lakaat ar greun er solieroù. E-kichen an ti, ur c'hrañj gant un nor-borzh, ha krevier. E-tal ar c'hraou-saout, ar bern teil, hag e-tal an ti, ul leur-dornañ.

Roet en deus deomp an istorour Chasles de La Touche un diskriv eus doare atantoù Ar Gerveur e-tro ar bloa-vezhioù 1830 :

« Abaoe ar peoc'h (1815) ez eo bet goloet gant sklent tiez-anneez an atantoù, hogozik holl. Amañ-abont, er c'hêria-dennoù bras, ne chom mui nemet daou pe dri zi dindan soul, d'ar muiañ. Uheloc'h eo an tiez bremañ, razet an diabarzh anezho, induet pe chiket an diavaez, hag enno ez eus peurvuiañ daou bezh, unan o talvezout da gegin ha da sal-debriñ, gant ur gwele pe zaou ouzhpenn, hag unan all o servijout da gambr, enni pevar gwele. E kambroù a zo e kaver ur plancheris. Ret e vefe, d'o yaç'husaat da vat ha d'o mirout diouzh ar glebor, ma vefe difuet gwelloc'h al leur-zi, rak hogos holl gleñvedoù an dud a-ziwar ar maez a deu diwar glebor o ziez hag an diouer a ichoù enno. Bez' e vez peurvuiañ div zor warno hag ur prenestr gwerennet ; met diouzh an noz e vez serret pep tra, ha n'eus ket trawalc'h a aer evit ma c'hallfe kement a dud analat frank. Kavet e vez e pep ti etre pevar hag eizh den, muioc'h a-wechoù, o kousket bern-war-vern e daou bezh bihan, ha kalz re izel. Pell emeur da gaout an ugent metrad diñs a aer fresk a vez aotreet hervez ar reoliadur d'ar soudard en e gazarn pe d'ar prizoniad zoken en e gell. Un diaez e vefe uhelaat an estaj en tu-hont da seizh troatad abalamour d'an avel, met ar c'hambroù a c'hallfe bezañ brasaet ha ledanaet. Koulskoude ez eus bet degaset gwellaennoù bras abaoe tregont vloaz. Gwechall ne veze alies nemet ur pezh, annezet gant daou

diegezh, o fardañ boued tro-ha-tro en hevelep oaled, ha diemglev etrezo ouzhpenn. An tiez ne veze peurvuiañ digor all ebet warno nemet ul lomber hag a veze klozet gant ur stalaf prenn, a oa en e greiz ur werenn vihan-tre. Soñj am eus bezañ gwelet e kêriadenn Koti, war barrez Lokmaria, un ti na veze sklêrijennet nemet gant an nor ha gant un oaled vras, enni daou vank a goazeze ar maouezed warno da labourat ouzh ar sklêrijenn a deue eus an nec'h²⁶. »

Emdroadur al labour-douar en XX^{vet} kantved

Adal ar bloavezhioù 1930 e krogas evit al labour-douar ur marevezh a ziskar, a voe anatoc'h c'hoazh goude an eil Brezel-bed. Nebeutaet eo kalz niver ar gouerien : er bloavezhioù 1970 e nivered c'hoazh 64 atant. E 2020 ne oa mui nemet 36 anezho. War un dro gant niver ar gouerien ez eo diskennet kalz ivez ar gorread labour-douar talvoudus (GLDT) : e 2003 da skouer ne oa mui nemet 35% eus gorread an enezenn a gement hag a oa gouestlet d'al labour-douar. Abeg pennañ an digresk-se a ranker klask e lammgresk an douristelezh, hag en un niver bras a dachennoù douar labour bet gwerzhet da sevel eil tiez. Ha c'hoazh, pa vez anv eus ar gorread labour-douar e ranker menegiñ e konter ennañ well-wazh un 1200 hektar bennak a zouaroù fraost.

Dezverk pennañ al labour-douar war an enezenn bremañ eo pouez ar sevel chatal astennidik : dañvadezed ha givri eo a gaver, hag ivez saout-laezh ha saout-bronnañ. Brudet eo Ar Gerveur evit an oaned-laezh. Moc'h a vez

savet ivez, met kalz nebeutoc'h, ha pennoù-yez ivez. War un dro gant ar sevel chatal e c'hounez ivez ar gouerien maiz hag edeier (heiz ha gwinizh dreist-holl).

Legumajerien a zo ivez, ha gwenanerien, o sevel gwenan du hag o produiñ mel diwar o ruskennoù.

Er Gerveur evel e lec'h all e weler bremañ kouerien o vont muioc'h-mui war ar bio hag o klask gwerzhañ o froduioù an tostañ ma c'hallont : e 2020 e oa aet 20% eus ar gouerien war ar bio, da lavaret eo an hanter muioc'h eget war an douar-bras. Lod eus ar produioù-se a vez treuzfeurmet er Gerveur end-eeun : keuzioù gavr ; produioù diwar vel : chouchen, koar ; bier ; whisky ; kouignoù ha krampouezh.

Nevez zo ez eus bet anv da blantañ gwiniegi en enezenn. War a lavarer e vefe aesaet kalz ar gwini gant tomma-dur an hin. Ar raktres-se en deus lakaet grozmol da sevel, a-hervez. Padal e ouzer ez eus bet gwiniegi gwechall er Gerveur.

Chom a ra bresk al labour-douar er Gerveur. Padal ez eo hollret mirout war an enezenn ur gounezerezh kreñv a-walc'h. Paneve-se e vo diaes difenn ha mirout kempouez ekologel an enezenn, a weler enni kalz douaroù o fraostaat ha kalz tachennoù o vont da strouezheg endro. Ouzhpenn-se ez eus abaoe un nebeud bloavezhioù ur preder all oc'h en em silañ e spered an enezourien : klask a reer adlec'helaat produadurioù zo, evel al laezh, da skouer : kentoc'h eget kas anezhañ d'an douar-bras emeur o soñjal e dreuzfeurmiñ er Gerveur end-eeun. Ur c'hammed bihan ne vefe ken war hent an emvasterezh, pa soñjer ne vez produet war an enezenn nemet 6% eus ar boued bevezet gant an dud : ar peurrest a rank bezañ degaset eus an douar-bras.

Un atant skouer : Bruté de Rémur ha Jean-Louis Trochu

Diwar eil hantervezh an XVIII^{vet} kantved e voe graet strivoù bras, er Gerveur evel e lec'h all, evit talvoudekaat an douaroù ha kas al labour-douar war-raok. Klasket e voe askorusaat an atantoù, da viret ne 'z aje kuit ar gouerien, a oa meitourien an darn vuiañ anezho, da lavaret eo e talc'hent o atantoù dindan feurm hag e oant endalc'het da rannañ ul lodenn vras pe vrasoc'h eus o eost gant ar perc'henn.

Ar gouerien vihan, ar re end-eeun a c'hwezas an dour hag ar gwad e parkeier Ar Gerveur n'eo ket deuet o anvioù betek ennomp, met bez' ez eus bet daou zen hag a skedas o anv e-keñver araokadennoù al labour-douar en enezenn;

An hini kentañ a oa Bruté de Rémur e anv. An dense, bet barner e Roazhon ha merer bras Koadeier ha Domanioù Breizh, en doa graet e venoz da ziazezañ un atant skouer er Gerveur. E 1769, harpet gant Kevredigezh Labour-Douar Breizh, bet krouet e 1757, e prenas

douaroù eno. Dindan nebeutoc’h eget daou vloaz e lakaas digrakañ 150 hektar a lanneier, e lakaas sevel un atant bras hag ur c’henkiz, e prenas loened, binvioù gounit-douar, a bep seurt bouetaj ha pourvezañs. Fiziet e voe an atant nevez-flamm-se d’ul labourer-douar deuet eus korn-bro Roazhon, ha kontet ampart hag akuit war ar vicher. Hemañ ne reas ket berzh koulskoude, daoust d’e strivoù ha d’e skiant-prenet, hag an dispignoù bras graet gant an aotrou Bruté a voe graet en aner : re galet e oa an aozioù labour, re drenk an douaroù, re rust an hinad, ha re dreut an eostoù. Ar meitour eus Roazhon a rankas dilezel al labour boulc’het ken brav ha gant ken bras entan, ha nebeut amzer goude e kreske en-dro ar brug, ar balan hag ar bodennoù lann war an douaroù distroet buan-ha-buan da fraost ha da strouezh.

Bruté ne deuas ket a-benn eus e grog eta. Koulskoude ne oa ket bet e embregadenn veur ur vrokadenn hepmui-ken. Un den all, Jean-Louis Trochu, en prouas fraezh ha brav daou-ugent vloaz war-lerc’h : e 1807 e prenas Trochu an douaroù a oa bet dilezet gant Bruté. Kontet en deus diwezhatoc’h e embregadenn dre ar munud en ul levr²⁷ :

« E 1807 eo ec’h en em lakais da zigrakañ al lanneier kentañ ... Ne felle ket din plegañ da stad reuzeudik al labour-douar war an enezenn, gant dilez an douaroù, hag ar gwel eus an tachennadoù ec’hon a lanneier fraost ha difrouezh am lakae da goll kalon. Ne greden ket er c’hrenn-lavar kozh : “Lann out bet, lann out, lann e vi”, hag e stagis da ziazezañ un atant e kreiz an enezenn, war douaroù anvet gant tud ar vro Douerh-diaul : Douar an diaoul. »

27 Jean-Louis Trochu : Création de la ferme de Bruté. 1848

Savadurioù an atant bet diazezet daou-ugent vloaz kent gant Bruté ne chome mui kalz a dra diouto pa voent prenet gant Trochu, hag an douaroù a oa aet pell a oa da lann ha da strouezh en-dro. Bruté ne oa ket bet ankounac'haet e c'hwitadenn kennebeut, ha buan e voe lesanvet Trochu, diwar c'hoap, *an eil Bruté*.

Trochu a oa un den poellek avat :

« Klasket em boa plantañ a bep seurt gwez ha gwezigoù gouest da herzel ouzh an avel, met hini ebet eus ar spesadoù bet plantet ganin ne jaoje, ha mennout a raen fallgaloniñ da vat pa verzis, e 1810, e Kiberen, ur strobard gwez-pin hag a greske brav, na bout e oant hejet-dihejet gant fourradoù rust an avel-vor... An evezhiadenn-se am bountas da blantañ gwez-pin war ul lanneg vihan, e tu kornokañ va douaroù. Ne oa nemet un taol-arnod, met dont a reas da vat ganin : ar c'hoadig a greskas a-dro-skañv hag a harzas eus ar gwellañ ouzh an avel-vor. »

Ar parkeier gwaskedet mat diouzh an avel vor a roas trevadoù fonnus, hag ar pradeier a roas bouetaj evit al loened-tenn hag ar chatal bras. Al loened d'o zro a bourvezas an douaroù gant teil, mat da gardellat ar parkeier, ha setu lañset da vat kelc'h frank an talvoudekaat, an araokaat hag ar berzh-mat. E 1820 e oa dek hektar ha tri-ugent a zouaroù stuziet mat en domani, ha Trochu, kalaonekaet gant berzh-mat e strivoù, a brenas 400 hektar ouzhpenn a lanneier distuz.

Kouerien Ar Gerveur, ma oa bet Trochu un danvez a c'hoap evito er penn-kentañ, a gemeras skouer diwarnañ hepdale, rak gwelet o doa penaos e zouaroù a oa bet daougementet o zalvoudegezh dindan nebeutoc'h eget pemzek vloaz. Trochu ez eas pell e vrud, hag e hentenn

labour a deuas da vezañ ur skouer war an douar-bras ivez evit an holl gouerien mennet da vodernaat o doareoù labour. Trochu, n'eus ket da nac'h, en doa ijin da gas an traoù en-dro, ha n'eo ket souezh eta ma reas e dreuz, betek mont da gemer kargoù uhel : dont a reas da vezañ ezel eus Kuzul Roueel al Labour-douar ; e 1811 edo e-touesk pennoù-bras frañmasoned Ar Gerveur, ha kuzulier-meur an departamant e voe e-pad pemp bloaz warn-ugent.

Un den a dalvoudegezh e oa, ha gouzout a rae penaos lakat e varregezh hag e levezon e servij Ar Gerveur : e 1825 e voe degemeret gant ar roue Charlez X, hag e tapas digantañ ar bromesa ma vije savet un tour-tan e Goulfar. Al labourioù war-dro an tour-tan-se, anvet ivez Tour-tan Bras, e voe ret diskregiñ diouto e 1830 abalamour d'an devezhioù dispac'hel, ha ne voe peurechuet ar savadur nemet e 1836. Trochu e kaver e anv stag ouzh labourioù all er Gerveur : sav-maen Saozon ha kaeoù Porzh-Lae e 1840 ; ar pont-tro hag al lennborzh war flod e Porzh-Lae ivez ; goulenn a reas ivez e 1845 ma vije savet ur rakporzh don e-tal Porzh-Lae. Nac'het e voe ar c'hinnig-se da gentañ gant servijoù an Akipamant, abalamour ma vije bet, e feur o meno, re goustus. E vab, ar jeneral Louis Trochu, bet war e lerc'h er C'huzul-meur, a ginnigas ar raktres-se d'e dro e 1869, ur raktres hag a voe ampellaet c'hoazh abalamour d'ar brezel e 1870.

Ur mab all en deus bet, anvet Armand. Hemañ a oa bet e Skol-uhel al Labour-douar, bet diazezet e Grignon e 1826. Sikour a reas e dad war-dro an atant, ha dont a reas en e lec'h pa varvas d'an oad a 71 bloaz. Hogen Jean-Louis Trochu a chomas oberiant-dreist betek e varv, ha ne sellas ket berr ouzh e boan keit ha ma c'hellas labourat : evezhiañ a rae al labour war-dro an atant, degas a rae

gwellaennoù er binvioù hag ijinañ reoù nevez zoken.

Goude marv Jean-Louis Trochu e teuas mareoù diaesoc'h evit e vab : evit ma yaje mat en-dro an domani e ranked kaout ur bern tud labour. Hogen gwazed Ar Gerveur a veze techet muioc'h-mui da zilezel al labour-douar evit mont war ar sardineta pe war ar chanterioù sevel-bigi, micherioù gant ur gopr uheloc'h. Friturioù a voe diazezet ivez gant pennoù-embregerezh eus an Naoned, e Saozon hag e Porzh-Lae, hag enno e kavas an dud uheloc'h gopr eget e atant skouer an aotrou Trochu. Ouzhpenn-se e voe dilezet ivez ar c'hiz da c'houlen digant melestradur an tiez-kastiz sikour ar brizonidi evit an eostoù²⁸. Bep a nebeut ez eas an atant war e gemend-all, abalamour d'an diouer a labourerien : e 1880 e rankas Armand reiñ an atant e feurm, hag e 1901 e voe ret dezhañ gwerzhañ an domani – savadurioù ha douaroù – d'ar Stad.

Savadurioù kozh an atant a c'haller o gwelet bremañ c'hoazh : ur greizenn vakañsiñ evit ar vugale int deuet da vezañ.

28 Gwelet ar pennad diwar-benn an ti-kastiz.

Taolioù-amzer, peñseoù ha saveteerien war vor

Petra eo un enezenn ma n'eo ket ur roc'h troet trema an donvor, skoet didruez gant ar seizh avel ha digor-bras da froudennoù ar mor ? Sellit ouzh an oabl : abaoe ur pennadig amzer e weler anezhañ o koumouliñ, hag en un taol-kont setu ma klever an avel o sourral hag o c'hwezhañ kreñvoc'h ivez. Ma c'hortozit un tammig bihan c'hoazh e viot paket gant krabanadoù ar glav. Ha setu krog ivez ar gazeg c'hlas da winkal : war ar mor dirollet – hag eñ ken plaen hag ur melezour n'eus ket gwall bell zo – an tonnoù a sav hag a ziskenn, a c'hoari tro ar c'herreg, a goeñv hag a darzh en un dispac'h spoum gwenn ha gant un trouz braouac'hus. War an enezenn, an avel o yudal a gas gantañ gwez, girzhier, toennoù, eostoù. Oberoù Mab-den, ken skañv, ken bresk ha ken berrbad, a vez drastet ivez, ha gwa d'ar vag a zo aet er-maez ! Gant kement a herr e sko an tarzchioù outi, ha kement a zour e taolont enni m'emañ e taras bras da vont d'ar strad !

Taolioù-amzer a vez alies er Gerveur, ha paot a beñseoù a zo bet ivez e-tal aodoù Porzh-Lae, Saozon pe Lokmaria.

Sed, da skouer, ar pezh a skrivas e 1705 person Lokmaria just-a-walc'h, an aotrou Le Glas :

« D'an 29 a viz Kerzu 1705, e-tro hanternoz, ez eus savet war an enezenn ur gwall barr-amzer hag en deus padet war-dro c'hwec'h eurvezh. An taol-amzer-se en deus drailhet an enezenn, drastet an ilizoù hag ar chapelioù, ha didoennet an tiez hag ar c'hrevier... Aet eo bag Lokmaria d'ar strad. E stêr Gwened ez eus bet beuzet pemp den eus Saozon. Dre beder gwech en deus krenet douar an enezenn, ha bernioù douar ha reier a zo disac'het er mor... Kredet o deus an dud, e meur a lec'h, e oa deuet finvez ar bed²⁹. »

Skrivet e oa bet kement-mañ e marz kaierad marilh ar barrez. Daou-ugent vloaz war-lerc'h e kaver, bepred en hevelep kaier ar bev, an notenn-mañ :

« D'an 3 a viz Kerzu 1746, war-dro 4 eur diouzh ar mintin, ez eas d'ar strad e-tal Ar Gerveur ar Prince de Conty, ul lestr bras eus Kompagnunezh an Indez. 140 den a voe beuzet, ha 60 a voe saveteet. »

Al lestr-se, bet savet en Oriant e 1743 hag o jaojañ 600 tonell, a oa o tont en-dro eus Bro-Sina gant ur c'har-gamant a dalvoudegezh vras : liñselioù sidan, balodoù te, kafe ha kakao, koad prizius, ha tolzennoù aour. E-barzh un danevell-skrid bet savet goude ar peñse gant ar gom-pagnunezh e lennner kement-mañ :

« Ma vije bet lakaet an aour e-barzh kefoù e vije bet aesoc'h adkavout anezhañ, met evit en em ziwall ouzh riskloù ar brezel en doa gourc'hemennet ar c'habiten ma vije douget an tolzennoù gant an ofisourien, stag ouzh o

29 gar (hag an arroudennoù da-heul ivez).

gouriz, rak, hervez ar c'hiz, ne vez ket furchet an ofisourien pa vezont paket, ha kavout a rae dezhañ e vije bet an aour muioc'h e surentez evel-se... »

An ofisourien, lastret ha strobet gant o gourizadoù aour, a veuzas, ha ne chomas bev nemet ar re a oa deuet a-benn d'en em zistrobañ diouzh an aour milliget-se.

Kompagnunezh an Indez, en esper kaout da vihanañ ul lodenn eus ar c'hargamant en-dro, a gasas d'an enezenn ur skipailh tud, ha klasket e voe war-lerc'h ar marc'hadourezhioù a oa bet taolet d'an aod. Savet e voe prim fernier evit sec'hañ ar boedoù kollidik : ar spisoù, an te, ar c'hafe hag ar c'hakao. Al liñselioù sidan liesliv a voe disgwalc'het ha lakaet da sec'hañ war ar graeoù ha war geot ar pradeier. Met an aour, an danvez a oa ar muiañ a glask warnañ, ne voe ket adkavet. E-keit-se, pennoù-bras ar Gompagnunezh, en Oriant, a ginnige koll pasianted. Divizet e voe kas d'Ar Gerveur un ijinadenn nevez : ur c'hloc'h splujer, liammet ouzh ur vag war-bouez funioù, evit furchal relegenn dismantret al lestr. Gouarnour Porzh-Loeiz a skrivas diwar vousgoap :

« Emañ an dud en Oriant a-zevri war-dro un iskis a ijinadenn evit splujañ er mor war glask aour ar Prince de Conty. Met diwar gement am eus klevet a-zivout an ijinadenn-se ez eus tro da grediñ e vo beuzet muioc'h a dud ganti eget na vo adkavet a dolzennoù aour. »

Degaset e voe d'ar gorre pezhioù-kanol, boledoù ha tolzennoù potin, met bremañ c'hoazh, 250 bloaz goude, e klasker c'hoazh aour ar *Prince de Conty* : ent-ofisiel n'eo ket bet adkavet.

Tostoc’h ouzhimp ez eus bet ur peñse all hag en deus lakaet meur a glasker teñzorior da sorc’henniñ ha da bennfolliñ : e 1917 e voe kaset d’ar strad gant ul lestr-spluj alaman ul lestr belgiat an *Elisabethville*. Edo al lestr-se o tont en-dro eus ar C’hongo, a oa d’ar c’houlz-se un drevadenn velgiat. E strad al lestr, kraoñ kokoz, lateks, dek tonennad olifant, ha, dreist-holl, diamantoù diven d’un dalvoudegezh a 100 000 lur sterling, da lavaret eo kement ha produadur bloaziek ar C’hongo.

Adal 1926, gant araokadennoù an teknikoù splujañ, e voe gallet diskenn betek ar peñse, a oa don a-walc’h e strad ar mor, ha gant danvez-tarzha e voe toullet tor al lestr. Gouzout a raed e pelec’h en em gave ar c’houfroù-houarnet a dlee bezañ an diamantoù enno. Hogen pa voent degaset d’ar gorre ha digoret, ne voe kavet roud ebet eus diamantoù ken prizius ar C’hongo. Lakaet e oant bet e surentez e lec’h all moarvat, kent d’ar vag bezañ bet kaset d’an deun, ha strewet e oant bet e strad ar mor pa voe lakaet tor al lestr da darzhañ. Ha bremañ, chañs vat d’ar re a glasko anezho er gwiskad tev a lec’hid a zo e strad ar mor ! An traoù nemeto a gasas ar splujerien ganto d’ar gorre a voe ar stilhonoù olifant, goloet gant fetisaturioù razek pe gailhastrek, heñvel a-walc’h ouzh brankoù o stummoù divoas !

Bez’ ez eus, tro-war-dro d’an enezenn, kantadoù a beñseoù evel hemañ. E-pad brezel 1914-1918 ez eus bet mazaouet pe goueledet tost da 2000 bag e biojoù Ar Gerveur³⁰. Ar braz eus ar peñseoù-se a zo bet renablet, ha lod anezho a zo bet adsavet gant embregerezhioù arbennikaet war al labourioù danvor. Ar re a chom avat a

30 Gwelet ar pennad diwar-benn Brezel 14-18.

c'hall bezañ dañjerus-meurbet pa strob enno rouedoù ar bagoù-pesketa. Met n'eus droug ebet a gement na servijfe d'ur vad bennak : ar peñseoù-se a ra bremañ dudi ar splujerien hag ar besketaerien donvor.

1999 : peñse an Erika

Ne c'haller ket komz eus ar peñseoù a voe e-tal Ar Gerveur anez menegiñ an hini diwezhañ bet, a voe ivez an hini gwashañ-holl dre an heuliadoù drastus en devoe war an endro : peñse an *Erika* an hini eo.

Emaomp e 1999. D'an 11 a viz Kerzu e vez paket fall war vor a-vaez da b/Penmarc'h un eoullestr hag a zo o verdeiñ dindan banniel ur gompagnunezh eus Malta (ur banniel-lezoher eo). Emañ o tont eus Dunkerque, ha leun-brok eo e veolioù gant 31 000 tonennad fioul pounner a rank bezañ kaset da Livorno, e Bro-Italia. Savet ez eus ur barr-amzer spontus war ar mor a-greiz ma oa ar vatimant o tremen a-vaez da Veg-ar-Raz : an avel a c'hwezh gant nerzh 8 betek 9, hag al lestr a rank talañ ouzh bernioù kleuz betek 6 metr. Gwintañ-diwintañ a ra ar vatimant, ha taolioù-mor a freg war ar pont. Gwashoc'h a zo c'hoazh avat : kosteziñ a ra an eoullestr war dribourzh, met goude bezañ kaset ur gemennadenn diwall gentañ diouzh an abardaez e kas ar c'habiten ur c'heloù all, peuzgoude, evit lavaret ez eo ar vatimant er-maez a bep droug hag emañ o vont d'an tizh izel war-gaout porzh Donez, el Liger-Atlantel. Eno emañ e sell da ober un ehan evit gwelet ent-resis peseurt gwastoù a zo bet war al lestr. D'an 12 avat, da 6e05 diouzh ar mintin, e kas ar c'habiten un S.O.S. : emañ ar vatimant e taras da derriñ e daou damm. Diouzhtu e vez kaset biñsakelloù ar Morlu betek al lestr,

ha batimantoù ar Royal Navy, a zo o verdeiñ er biojoù, a ya ivez da sikour lakaat an akipaj e savete.

Da 8e15 e torr ar vatimant e daou damm en dourioù etrebroadel, ur 65 km bennak er su da b/Penmarc'h. Istimañ a reer neuze ez eus bet etre 7000 ha 10 000 tonennad fioul bet skuilhet er mor pa oa ar vag o terriñ. En noz war-lerc'h ez a diaroag ar vag d'ar strad, nepell diouzh al lec'h ma torras ar vatimant. Diadreñv an *Erika* avat a oa bet ramoket adal 2e15 goude merenn gant an *Abeille-Flandre*, da viret ne 'z aje ar peñse da zrivañ war-gaout Ar Gerveur. Poan gollet avat, rak d'ar strad ez aio ivez diadreñv an *Erika* an deiz-war-lerc'h da 3eur nemet kard, un dek kilometr bennak diouzh an diaraog, hag ur 75 km bennak diouzh aodoù Enez-ar-Gerveur.

Lañset e vez ar steuñv Polmar d'an 12 a viz Kerzu da 6e diouzh an abardaez gant ar prefed a vor. N'eus ket kalz a dra da ober avat, rak an arselladennoù diwar-nij a ziskouez lennadoù tireoul ledan ha pounner o trivañ en donvor. An hini vrasañ a zo dezhi un hirder a 15 km. Ken rust eo ar mor ken ne c'haller ober netra, hag al lennadoù tireoul a ya gant red an dour, war-zu ar reter, o tostaat muioc'h-mui d'an aodoù, a zeiz da zeiz.

D'an 23 a viz Kerzu, da lavaret eo unnek devezh goude ar gwallzarvoud, e weler al lanv-du o lipat an aodoù e Penn-ar-Bed. Peuzgoude, d'ar 25, emañ an tireoul war aodoù Groe hag Ar Gerveur. Ken fall eo an amzer, ken kreñv e c'hwezh an avel ken e vez strinket al loustoniajoù uhel er vann, betek tizhout a-wechoù lein an tornaodoù. Ha p'en em denn ar mor, gant an tre, ez eo ur gwiskad tev a eoul gludek ha flaerius eo a weler, o c'holoiñ an traezhennoù, ar c'herreg, ar reier, an oufoù andoret ar c'hlokañ, hag oc'h en em silañ, treitour, e kement frailh

hag e kement skoasell a zo. Tizhet e vo an aodoù evel-se, eus su Penn-ar-Bed tre betek ar Charentes. Istimañ a reer ez eus bet etre 150 000 ha 300 000 labous-mor lazhet gant al lanv-du, ha bec'h a vo, er Gerveur evel e lec'h all, o naetaat hag o tisaotrañ an aod.

Ouzhpenn ugent vloaz a zo tremenet abaoe, met an dud er Gerveur n'o deus ket ankounac'haet an deizioù kañvus-se. Seul argarzhuc'h eo ar gwallreuz ekologel-se ma ouzer bremañ ez eo ar paramantour eo hag a zo da damall : ma 'z eo aet an eoullestr d'ar strad ez eo abalamour ma ne oa ket bet dalc'het e ratre vat, ha kement-mañ, anat eo, gant ar mennad da arboellañ arc'hant.

Ar saveteerien war vor en istor

D'ar 7 a viz C'hwevrer 1870, e-tro 9 eur diouzh ar mintin, e vez gwintet, a-us d'ar semafor a zo e beg an Arzig, ar banniel ruz, evit reiñ da c'houzout ez eus ul lestr en argoll e-tal Lokmaria. Ur oueletenn an hini eo, *Le Neptune* hec'h anv, o tont eus An Alre. An holl voraerien a zo er bourk d'an ampoent – lomaned ha pesketaerien – a sav diouzhtu e-barzh ur vag vorvileta vihan hag a zo amaret e Porzh-Gwenn. Gwall-vor a zo, avel vras, lavagnon ha fru, hag ar skaf, kaset endro dre roeñvoù, a ya war-raok bec'h-bec'h war-zu ar oueletenn, a weler a-bell o stourm ouzh ar c'hoummoù. Horelliñ a ra ar vag saveteiñ diwar un tu war egile avat, ha brañsellat en ur feson skrijus. Hag a-daol-trumm e troc'hoilh, tumpet gant ur tarz-h-mor kreñvoc'h eget ar re all ha ken uhel hag ur menez. An nav den a oa er bourzh a gouezh en dour yen. C'hwec'h anezho a deu a-benn da grat e korf ar vag eilpennet, met skoet

diehan gant ar c'hoummoù e rankont diskregiñ unan-hag-unan.

Tud ar bourk a zo en em vodet e-tal ar mor. Gwelet a reont diwar an aod ar saveteerien en o stourm dizingal. Ar person, e zorn gantañ er vann, a ra sin ar groaz evit reiñ a-bell an absolvenn d'ar wazed a zo o veuziñ hag o vervel dirak daoulagad spontet ar maouezed hag ar vugale. Div eurvezh-pad e weler an hini diwezhañ eus ar reuzeudien-se, a-grap ouzh kein ar vag, o klask herzel ouzh ar mor dirollet kent diskregiñ d'e dro ha mont diwar wel, kaset d'ar strad evel ar re all.

Oadet e oa an nav den beuzet – an holl anezho mui pe vui eus an hevelep kerentiezh – etre 27 ha 38 vloaz. Ne oa nemet unan anezho a gement hag a oa dizimez. Lezel a raent war o lerc'h eizh intañvez ha 23 emzivad.

Fromet don e voe an holl gant an darvoud mantrusse, ha strafuilh ar speredoù a voe kaoz ma voe kaset da vaodiern ar verdeadurezh ur skrid-goulenn evit ma vije diazezet en enezenn ur savlec'h saveteiñ. Asantet e voe ar raktres, met ampellaet e voe abalamour d'ar brezel, ha ret e voe gortoz ar bloaz 1874 kent gwelet digoradur ofisiel ar savlec'h kentañ, e Lokmaria ha moridigezh ar c'hanod-saveteiñ kentañ.

Dibabet e oa bet diazezañ ar savlec'h e Lokmaria e koun ar peñse a oa bet e miz C'hwevrer 1870, met kent e voe pell e voe merzet n'edo ket Lokmaria lec'hiet dreist hag e vije bet gwelloc'h, moarvat, diazezañ ar savlec'h-saveteiñ e Porzh-Lae, a zo keit-ha-keit diouzh Saozon ha diouzh Lokmaria. Ouzhpenn-se, poblet stankoc'h e oa Porzh-Lae, ha muioc'h a wazed gouest da embreger ar vag-saveteiñ a oa eno. Arabat ankounac'haat e veze kaset ar bagoù-saveteiñ a-daolioù roeñvoù d'ar c'houlz-se, hag

e veze ret kaout etre eizh ha dek den evit embreger ar c'hanod. E 1891 hepken avat e voe diazezet ur savlec'h-saveteiñ e Porzh-Lae. E 1920 e voe aveet ar savlec'h-saveteiñ gant ar c'hanod-dre-dan kentañ.

Akipajoù ar c'hanodoù-saveteiñ-se ne oa ket dizañjer o labour, daoust d'ar c'hanodoù bezañ gouest da dalañ ouzh ur mor rust. Ur skouer all : an darvoud skrijus a c'hoarvezas d'ar 17 a viz Du 1917 : an deiz-se ez eas ar c'hanod er-maez evit sikour ar *Jeanne-d'Arc*, ur oueletenn diframmet diwar hec'h evrioù hag a oa o vont gant red an dour e-tal Porzh-Lae. Edo ar c'hanod o tostaat d'ar oueletenn pa fregas warnañ un taol-mor uhel-spontus. Eilpennet e voe ar vag-saveteiñ, hag e reas un dro leun warni hec'h-unan, betek en em gavout war-neuñv en-dro. Gwazed an akipaj a dapas adsevel enni, met siwazh, ar c'habiten hag an eil mestr, stropet ha ruilhet gant an taolioù-mor, a voe kaset etrezek an donvor ha ne c'helljont ket distreiñ d'ar c'hanod. Adkavet e voe o c'horfoù en aod gant al lanv, hag evit derc'hel soñj eus an daou zen-se e voe roet d'ar c'hanod nevez an anv *Patrons Dubarre et Cornic*.

Etre 1913 ha 1948 ez eus bet ur savlec'h-saveteiñ e Saozon ivez.

Ar saveteiñ war vor bremañ

Abaoe 1967 ez eo ar saveteiñ war vor en emell *Kevredad Broadel ar Saveteiñ war Vor* (KBSV), anvet e galleg SNSM. Ur gevredigezh a dalvoudusted foran an hini eo, dezhi da gefridioù saveteiñ buhez an dud war vor hag en aod, stummañ ar savetaerien, ha kemer perzh e oberiantizoù kelaouiñ ha diarbenn.

Er Gerveur ez a en-dro savlec'h Porzh-Lae gant ur skipailh a dregont den a youl-vat hag a ra war-dro ur c'hanod barrek da dalañ d'ar barradoù amzer. Ur c'hant gwech bennak er bloaz ez a ar c'hanod er-maez, well-wazh. Estreget sikour ha saveteiñ an dud war vor eo a ra ar c'hanod-se avat : kas a ra alies tud klañv d'an douar bras pa vez ezhomm, dre n'eus forzh pe amzer, ha strewiñ a ra ivez ludu ar re varv er mor pa vez aozet al lid-se gant ar gerentiezh.

Budjed bloaziek ar savlec'h a sav da 50 000€ (trezalc'h ar c'hanod, frejoù trelosk, dalc'h e ratre an holl aveadoù surentez : radio, jilettennoù saveteiñ, radelloù dreistbevañ, mougerioù-tan...).

Digoust eo kement a sell ouzh sikour an dud. Evit sikour ar madoù avat – da lavaret eo ar bagoù – e ranker paeañ. Arc'hantaouet e vez mont en-dro ar gevredigezh gant ar gounidoù tennet eus saveteiñ ar bagoù hag eus ar strewiñ ludu er mor, hag ivez gant roadennoù hag a c'hall bezañ graet gant an holl re a fell dezho skoazellañ labour hag oberiantizhoù ar gevredigezh.

Tourioù-tan Ar Gerveur

Kentañ gouloù padus a sklêrijennas biskoazh aodoù Breizh a voe, war a lavarer, hini abati Lokmazhe Penn-ar-Bed. Ar venec'h eus an abati beneadat-se, diazezet e-tal ar mor, e penn pellañ an douar-bras, a rae aketus war e dro, da viret n'ez aje ar bagoù da goll er biojoù rust-se. Betek ar XVII^{vet} kantved e oa dibaot a c'houleier da heñchañ ar bagoù a-hed an aodoù, hag ar gouleier-se, gwazh o stad peurvuiañ, a oa etre daouarn dileuridi marc'hadourien ar broviñs. Diaes-tre ha dañjerus-kenañ e oe merdeñ a-nozezh a-hed an aodoù. E 1792 e voe krouet ur velestradurezh a-ratozh evit klask lakaat an traoù en o reizh, ha gouleier an aod en em gavas diwar neuze dindan veli ar Stad : « *En ur mod zo eus an tourioù-tan, e Breizh evel war aodoù all ar rouantelezh, un arouez eus galloud brasoc'h-brasañ ar Stad bet ganet gant an Dispac'h e 1789*³¹. » E 1806 e tivizas Napoleon kas mererezh an tourioù-tan da vat da velestradurezh ar Pontoù hag an Hentoù. Evit afer-se ne voe ket staget gant chanter bras ar savadurioù publik ac'hann da fin brezelioù Napoleon. Bez' ez eus tri zour-tan er Geveur, bet savet etre 1825

31 Jean-Christophe Fichou, « Istor an tourioù-tan e Breizh », Becedia, 2020

ha 1879 : hini Goulfar, e Bangor, a vez graet peurvuiañ *an tour-tan bras* anezhañ, hini Beg-ar-Polen, e penn gwalarnañ an enezenn, ha tour-tan Kerdonis, er gevred.

Kentañ hini bet savet a voe *tour-tan Goulfar*. Boulc’het e voe ar chanter e 1826, ha padout a reas al labourioù betek 1835. An tour-tan-se, 52,25 metr a uhelder dezhañ, e voe toullet an diazezoù anezhañ gant ar c’haleourien a oa bac’het d’ar c’houlz-se e ti-kastiz Porzh-Lae³², ha savet e voe diwar steuñvoù Augustin Fresnel, en doa ijinet ardivinkoù evit kreñvaat nerzh al lampoù hag ar gwerinier. Daou fust e greunvaen gwenn eus Pont-Aven a ya d’ober anezhañ : ur fust diabarzh, o tougen ar viñs-tro, hag ur fust diavaez en-dro dezhañ, gouest da herzel ouzh bountadennoù rustañ an avel. Balirañ a ra al letern-tro 87 metr a-us da live ar mor. Tredanet eo bet an tour-tan e 1992, hag emgfreekaet e voe e 2000. Sko outañ e weler ar savadurioù teknikel ha ti-annez an diwallerien. Salioù ar rez-an-douar e c’haller gwelet enno un diskouezadeg pad o tisplegañ mont en-dro an tourioù-tan hag ar balizennoù. E-kichenik an tour-tan e voe savet ivez, e 1882, ur batis bihan, ennañ ur c’hornboud, a vez lakaet da seniñ pa vez latar war ar mor.

Kalz bihanoc’h eo tour-tan *Beg-ar-Polen*, bet savet e 1867 e penn gwalarnañ Ar Gerveur, war ur beg-douar roc’hellek hag a ya da enezenn d’ar gourlanvioù reverzhi. Ar beg-douar-se e oa bet savet difennoù warnañ da vare an neolitik. Un tour karrezek a ya d’ober an tour-tan-se, gwenn-razet ha mañsonet levn, stag ouzh moger-bignon un ti hirgarrezek a weler a-bell pa ’z eo gwenn-razet ivez. Tredanet e voe e 1950, hag emgfreekaet e 1987. Produet e vez an tredan gant pannelloù fotovoltaike, ha gant-se ez eo emren an tour-

32 Gwelet ar chabistr diwar-benn an ti-kastiz.

tan. Pa ne vez ket heol a-walc'h war brantadoù hir ez eo un dredanerez-sikour eo hag a vez lakaet da vont en-dro.

Diwezhañ tour-tan bet savet er Gerveur a voe hini *Kerdonis*, e gevred an enezenn, war gumun Lokmaria. Evel hini Beg-ar-Polen ez eo un tour-tan bihan a-walc'h e vent, stok ouzh an ti a loje ennañ an diwaller hag e diegezh. Evitañ da vezañ bihan a-walc'h ez eo un tour-tan pouezus-kenañ koulskoude, rak heñchañ a ra ar bagoù a vez o verdeiñ etre genoù al Liger hag Ar Gerveur. N'eus pelloc'h war an tu-se nemet tour-tan ar C'hardenn-Veur, bet savet er su da Edig, war ur roc'hell vras e-kreiz ar mor. Savet e voe tour-tan Kerdonis e 1879.

E 1911 e c'hoarvezas en tour-tan-se un darvoud hag a zo chomet bev-mat ar c'houn anezhañ er Gerveur. An darvoud-se a lakaas kazetennerien ar vro ha pelloc'h, betek re Bariz zoken, da zuiñ paper : d'an 18 a viz Ebrel, diouzh an endervezh, e varvas trumm Alexandre Matelot, an diwaller, skoet gant un taol-gwad a-greiz ma oa o naetaat al letern. E wreg eo a rankas enaouiñ ar gouloù. Met an diwaller n'en doa ket bet amzer a-walc'h da adsevel ar wikefre a lakae al letern da dreiñ, ha den estregetañ – nag e wreg nag e zaou vugel – ne ouie an doare d'en em gemer ganti. Hag ul letern na dro ket ne servij koulz lavaret da netra en un tour-tan a-sklaeriadoù. Diazezet e oa letern Kerdonis war ur bladenn arem pounner-meurbet, ha ne oa ken doare d'he lakaat da dreiñ nemet dre adlañsañ ar bladenn-se, ha reiñ lusk dezhi war-bouez an divrec'h bep tro ma chome a sav. Homañ a voe trevell lazhus an daou vugel, adal ar serr-noz betek kentañ skleurioù an deiz, hag a-drugarez dezho o daou e c'hellas an tour-tan teurel e vann-sklêrijenn war ar mor penn-da-benn gant an noz.

Pennoù-bras melestradurezh an Tourioù-tan hag ar

Balizennoù a gasas buan un erlec'hier d'an diwaller marv, met e intañvez hag e zaou vugel en em gavas trumm hep ti nag aoz. Gwashoc'h c'hoazh : chomet e vefe didra ar wreg paour hag he bugale panevet ma skrivas tailhanter Porzh-Lae, fromet o welet e pe stad truezus en em gave an tiegezh, d'ar gazetenn *Le Figaro*, evit kontañ an doare. Dezrevellet e voe an abadenn, gant forzh munudoù, e-barzh ar gazetenn-se, hag en devezhioù war-lerc'h e voe embannet en holl gelaouennoù gall. Skodeget e voe al lennerien, bamet an dud gant kalonegezh an daou vugel, hag a seizh korn ar vro e voe kaset arc'hant d'an tri ezhommeg. Un tammig pañsion a voe graet d'an intañvez, a guitaas an enezenn evit mont da ziazezañ e Keroman, e-lec'h ma c'hellas desevel he bugale. Medalennet e voe zoken, ha Théodore Botrel, a oa d'ar c'houlz-se e-kreiz e vrud, a savas (siwazh ?) ur ganaouenn evit kanañ meuleudi an tri gouron en desped dezho.

En XIX^{vet} kantved e voe staliet ivez penn-da-benn gant aodoù an enezenn balizennoù da suraat ar verdeadurezh hag aesaat an diraez d'ar porzhioù-mor. Staliadur an tourioù-tan hag ar balizennoù a voe un araokadenn vras evit ar verdeerien hag an enezourien. Bremañ n'eo ket ar gwikefreoù-se ken pouezus ken, abaoe ma reer gant teknikoù all, ar GPS da skouer, harp ouzh al loarelloù. Koulskoude « *ur perzh bras o deus c'hoazh ha talvoudus e chom kefridioù Servij an Tourioù-tan hag ar Balizennoù : kempenn hag astenn rouedad ar bonnañ war an aodoù, ha teurel evezh dibaouez ouzh mont-en-dro reizhadoù modern skoazell ar merdeñ*³³. »

33 Jean-Christophe Fichou, « Istor an tourioù-tan e Breizh », Becedia, 2020

Ar sardineta hag ar pesketaerezh dre vras

Ar sardin a zo « pesked-mor bihan eus ar c'herentiad *Clupeidae*, o anv spesad *sardina pilchardus*, a vev a strolladoù bras-kenañ tost d'an aod en hañv hag en donvor er goañv. O c'havout a reer stank er Meurvor Atlantel³⁴. » Amprestet eo bet ar ger, war a seblant, diwar al latin *sardina*, deveret eus *Sarda*, a dalveze da gentañ kement ha *pesk eus Bro-Sardigna*. Dleout a ra ar pesked-se o anv d'ar Romaned eta, rak int eo moarvat a zekas d'an Arvorigiz o mirout en holen.

Ar sardin a vez pesketaet a-vaez d'Ar Gerveur a zo pesked yaouank hag a ya da glask o boued a-vankadoù. Lontek-meurbet ez int, ha gant se ez eo aes a-walc'h o fakañ gant rouedoù stank, ur wech ma vez bet taolet stronk pe gleur a-walc'h dezho : *boueta ha sevel ar sardin* eo a vez graet eus an doare pesketa-se.

Dister dra a ouzomp, e gwirionez, diwar-benn istor ar pesketaerezh er Gerveur a-raok ar XVII^{vet} kantved. Gwech ha gwech all koulskoude e kaver menegoù strewet

34 *Geriadur brezhoneg*, An Here, 2001, p.1142.

amañ-ahont er skridoù kozh, ha tro zo da grediñ ez eus bet pesketaerien en enezenn a-holl-viskoazh.

- E-barzh un diell eus an XIII^{vet} kantved e vez meneget ar gwirioù a vez dastumet war sec'herezhioù pesked Ar Gerveur gant abati Kemperle. Met ne vez ket resisaet eus peseurt pesked ez eus anv.

- En e eñvorennoù e kont ar c'hardinal de Retz ez ambarkas d'ar 26 a viz Gwengolo 1654 e bourzh ur vag evit Bro-Spagn. Edo d'ar mare-se o tec'hout dre guzh ouzh gouarnour an enezenn. Skrivañ a ra : « *Leun-barr e oa ar vag gant sardin, ha kement-mañ a oa diouzh hon doare gant an diarc'hantet ma oant*³⁵. »

- Gouzout a reer e voe lakaet sevel bagoù-pesketa gant ar markiz de Gondi, ha diwezhatoc'h gant Fouquet³⁶. Dedennet da vat e oa hemañ ivez gant ar sardineta hag an teknikoù mirout ar sardin, dre sec'herezh pe dre waske-rezh. Ar 4000 barilhad sardin gwasket bep bloaz e-kreiz ar XVII^{vet} kantved er Gerveur a roe 250 barilhad eoul, ha Fouquet a glaskas talvoudekaat an eoul-se hag e lakaat war ar marc'had dre gas anezhañ dre vor da Vro-Spagn pe betek an Antilhez zoken.

- E-barzh ar renabl eus madoù an enezenn bet savet da-geñver dilez an enez d'ar roue Loeiz XV e 1718³⁷ ez eus anv eus ar poullou-holen a gaver e penn *straed ar Baludenn*. Eno eo moarvat e veze produet an holen a dalveze da virout ar sardin. N'anavezer ket ent-resis lec'hiadur ha ment ar paludoù all, daoust d'ar menegoù a gaver amañ-ahont dre an anvioù-lec'h.

35 gar

36 Gwelet ar chabistr diwar-benn mistri an enez.

37 Gwelet ar chabistr diwar-benn mistri an enez.

Titouret omp gwelloc'h diwar-benn ar pesketaerezh er Gerveur adal an XVIII^{vet} kantved. Sed kement a c'haller lavaret : en diasur e veze alies ar besketaerien a rae ar vicher sardin : bloavezhiennoù a veze e veze stank ar bankadoù sardin, ha bloavezhiennoù all e vezent skort. Ar c'houni-degezh a veze ivez diouzh priz ar stronk, a c'halle cheñch kalz hervez ar bloavezhioù, ha diouzh an telloù war an hollen, a veze alies distabil ivez. Ouzhpenn-se e ranker derc'hel stad eus ar prantadoù brezel, ma ne c'halled ket mont er-maez da deurel ar roudeoù.

Sed amañ-dindan un toulladig skouerioù eus kement emeur o paouez displegañ :

- E 1751 e voe ken puilh ar pesketaerezh ma torras war ar sardin ha m'en em gavas ar besketaerien er baourentez e-kreiz ar builhentez. Bloaz war-lerc'h er c'hontrol avat, hag e 1753 c'hoazh, e voe berregezh war ar sardin, ha tiegezhioù ar besketaerien a rankas bout sikouret gant ar vourc'hizien en o aes.

- An Tad Le Gallen, kronikour hag istorour Ar Gerveur, a skrive : « *Alies e vez rivinus ar sardineta ; atav e vez arvarus ; dibaot a wech e vez eürus*³⁸. »

- Ha sed amañ ar pezh ar skrive Charles de La Touche, bet ofiser war vor : « *Keit ha ma oa bet c'hoazh ar C'hanada ur perc'hennaj gall, e veze bep bloaz 300 lestr o vorueta, hag al listri-se a bourveze well-wazh ar sardinetaerien gant 2000 barilhad stronk moru. Abaoe feur-emglev 1763 avat n'hor bez mui nemet 25 lestr-morueta, na roont mui nemet 300 barilh. Abalamour da se e rank paramantourien Breizh mont d'an Norvej da brenañ ar stronk*³⁹. »

38 flo

39 flo

- Ur marevezh fall evit ar sardineta e voe an Impalaerded Kentañ, abalamour, etre traoù all, ma voe kemeret d'ar 16 a viz Meurzh 1806 un dekred hag a ziazeze un tell uhel-meurbet war an hollen : « *Ne voe adstaget da vat gant ar pesketaerezh nemet adal dekred ar 17 a viz Kerzu 1814, a ziskarge eus an tell an hollen implijet evit ar pesketaerezh war vor hag evit ar salladurezh*⁴⁰. »

Meur a abeg a c'halle bezañ d'an diouer a besked : an avelioù enep, an dour re yen evit ar plankton, ur gouennañ re zister abalamour d'an diouer a orinerien da heul an dreistpesketa... Ar mareoù gwashañ avat a oa ar prantadoù brezel :

« *A-raok ar brezel Seizh Vloaz*⁴¹ *e oa 234 bag sardineta er Gerveur : 200 e Porzh-Lae ha 34 e Saozon. E 1787 ne chome mui nemet 100 bag e Porzh-Lae hag 20 e Saozon... E-doug an Dispac'h hag an Impalaerded e voe paouezet gant ar pesketaerezh. Rollet e oa bet ar wazed war al listri-brezel. Ha dre ma oa bet paouezet gant ar morueta ha troc'het an hentoù dre vor betek Bro-Norvej, ne veze mui kavet stronk*⁴². »

Gant diskar an Impalaerded ha distro ar peoc'h e voe gallet adstagañ gant ar sardineta : echu e oa ar c'haleadur armerzhel ha digresket e voe an tailhoù war ar memes tro. Digarc'hariet e voe ar wazed a oa bet toullbac'het e Bro-Saoz, ha distreiñ a rejont d'Ar Gerveur, evel an holl re a oa bet disoudardet. E 1817 e niverer 400 pesketaer o kemer roll war 105 bag-sardineta. Ar bloaz 1829 a voe

40 flo

41 Brezel Seizh Vloaz : 1756-1763.

42 gar

ur bloavezh dispar, ken a-fet kementad, ken a-fet kalite. E 1842 avat, setu adare ur bloavezh fall : nebeutoc’h a c’houlenñ a voe a-berzh ar broioù estren a veze kustum da brenañ kementadoù bras a sardin sall.

Ne vo ur c’hemm war vat evit ar sardineta er Gerveur nemet pa vo bet greantelaet doare ober Nicolas Appert⁴³, a voe an hini kentañ oc’h implijout teknik mirout ar bouedoù dre ar wrez e-barzh endalc’herien peurgloz ha dishadenn. Adal ma voe diazezet ar friturioù, e-lec’h ar sec’herezhioù, e voe gallet ivez reoliata gwelloc’h priz ar sardin ha stabilaat ar marc’had, rak brasoc’h sav a veze d’ar pesked. Diazezet e voe ar fritur kentañ e 1845. Koulskoude e chomo diasur e-pad pell c’hoazh gounidoù ar sardineta evit ar besketaerien. E 1924 c’hoazh, da skouer, e c’haller lenn kement-mañ :

« *Dizingal-meurbet eo priz ar sardin, ha cheñch a ra kalz alies, e-doug un devezh hepken : ur mil anezho, gwerzhet 60 lur da unnek eur diouzh ar beure, a c’hall diskenn betek 40 pe 35 lur war-dro diwezh an enderv pa vez bet fonnus ar pesketaerezh. Mard eo lusk-dilusk ar prizioù, ez eo abalamour ma ne zegemer ar friturioù nemet sardin dizomaj. Hogen pesked tener eo ar sardin, ha ret eo o zreuzfeurmiñ buan-buan goude ma vezont bet pesketaet*⁴⁴. »

Stumm hag akipajoù ar bagoù-sardineta

Ar pezh a vez displeget amañ-dindan a dalvezas dre vras betek diwezh an XIX^{vet} kantved. Kemmoù bras a voe peuzgoude, pa voe kefluskeret ar bagoù.

43 Nicolas Appert (1759-1841)

44 gar

Bihan ha skañv e oa ar bagoù-sardineta : etre 6,50 metr ha 7,10 a hirder. Beget lemm e oant, ken er penn a-raok, ken er penn a-dreñv. Izel e oant war an dour ivez, ha dibont, evit bezañ kaset en-dro dre roeñvoù. Peurvuañ e veze warno div wern lem-laka : an hini vihanañ a oa ur wern-vizan, en diaraog, hag an hini vrasañ un tailhavant, er c'hreiz. Ur wech erruet war ar bankadoù sardin e veze diskennet ar gouelioù ha diwerniet ar bagoù. Ar bankaadoù sardin e veze neuze taolet stronk dezho, ha bec'h d'ar rouedoù neuze !

Kaset e veze ar bagoù en-dro gant akipajoù a bemp den : ar mestr-bag, ar mous, an *novis*, ha daou vartolod all, a veze graet *dalc'herien* anezho. Bep sizhun e veze lodennet gounidoù ar pesketaerezh : div lodenn a yae da berc'henn ar vag, an hini a bourchase an akipaj gant ar stronk, ar rouedoù hag an ardivinkoù pesketa. An drederenn a chome diwar ar sammad hollek a veze lodennet c'hoazh etre gwazed an akipaj hag ar mestr-bag.

Sed a skrive diwar-benn ar sardineta un dudoniourez bet o studiañ a-dost ar vuhez en enez e 1924 :

« *Peurvuañ ne c'haller ket magañ un tiegezh diwar ar sardineta hepen. Gwall verr eo ar c'houlzad, ha pa vez bet dister pe fall ar pesketaerezh e teu an dienez war an dud e-pad mizioù hir ar goañv pa vezer dilabour. Se a zo kaoz ma ya ar wazed da ravanelliñ war ar pladurioù traezhek pe da c'hrilheta war ar bazennoù roc'hellek. Ret eo d'an akipajoù pleustriñ war a bep seurt pesketaerezh, war var da goll o buhez alies, evit degas boued d'ar gêr. Ne baouezont gant o micher nemet er mizioù du, hag adstagañ a reont ganti kerkent ha miz C'hwevrer gant an harinketa ; e-tro miz Mae, setu deuet koulzad ar marlanked hag ar brizhilli. Ur mare a zo bet ez eus bet gounezet kalzig a arc'hant gant*

*ar grillhed hag al ligistri, a veze ezporzhiet zoken adal ar bloavezhioù 1840. Met gant an dreistpesketa e weler ar spesadoù-se o rouesaat er Gerveur, evel e meur a lec'h all e-tal aodoù Breizh*⁴⁵. »

E 1840 e skrive de La Touche kement-mañ diwar-benn an doareoù pesketa all :

« *Pesketaet e vez an aguilhed gant pilevoù*⁴⁶, *goude bezañ enaouet un tantad plouz e penn a-raok ar vag. Ar pesked plad, raeed, leizenned, tulboded, a vez paket gant ravanellou, ha gant al linenn eo e vez paket ar brizhilli, an tulboded, ar braoged, ar weilhi hag ar morleaned. Ar pesketaerezh brasañ avat, hini ar silioù-bras, a vez graet war-bouez bac'hoù*⁴⁷. »

Kouerien an enez a zo bet e-pad pell kenkoulz pesketaerien anezho : peurvuiañ ne chome nemet ur mab e pep tiegezh da diekaat an atant. Ar vibien all, pa deue ar c'houlz da gemer ur vicher, a yae da besketaerien pe a gemere roll war bagoù ar c'henwerzh, pe c'hoazh er morlu. Alies ivez e leze ar gouerien an atant gant ar maouezed hag ar vugale da-geñver koulzad ar sardineta – etre miz Even ha miz Here – hag ez ambarkent war ar bagoù-sardin e Porzh-Lae. Betek ar bloavezhioù 1880, pa dreuzas ar sardineta un enkadenn don, e voe e Porzh-Lae da-geñver pep koulzad un 200 bennak a vagoù-sardin

45 Marcelle Bresson, « Belle-Île-en-Mer », in *Annales de Géographie*, 1924, t.33, niv. 184, pp.336-351.

46 Pilev : benveg, anezhañ un doare bir bras a implijer da besketa pesked dre e vannañ outo. Heñvelster : treant. Galleg : *fouine*.

47 dlt

marilhet e Porzh-Lae, ha kantadoù all a vagoù hag a oa marilhet e porzhioù-mor an douar-bras. Kêr ar sardined e oa neuze Porzh-Lae, gant e vagazennoù stronk hag e atalieroù salladurezh – a-raok na vije deuet mare ar friturioù.

Ar chanterioù sevel listri

Brudet eo bet e-pad pell chanterioù-bagoù Ar Ger-veur evit o chemet. Gouest e oant da ginnig d'ar baramantourien bagoù marc'had-mat hag a glote dreist gant redioù ar besketaerien, anezho tud hag a ouie mat-tre, ha gwelloc'h eget n'eus forzh piv, diwar skiant-prenañ, eus petra o deveze ezhomm. Estroc'h evit bagoù-sardineta bihan a veze savet ganto avat : gouest e oant ivez da sevel kanoded ha bagoù brasoc'h, pontet, evel an dundeed pe ar goeletinier. Bagoù-touneta a savent ivez. E 1901 ez eus bet savet 154 bag e chanterioù Porzh-Lae ha Saozon, ha dreset ez eus bet ur 78 bag bennak. Bep pevar bloaz e ranke ivez bagoù-touneta Enez-Groe bezañ lakaet er poull-sec'h evit bezañ dalc'het e-ratre ha soavet. Dre ziouer a galoù-kalafetaj e Groe ez eo e Porzh-Lae eo e veze graet al labour hollret-se : skipailhoù kalafaterion a vounte an tan e-barzh fagodoù lann dindan kof al lestr, evit lakaat ar c'holtar kozh da deuziñ, kent kalafetiñ ar vag a-nevez.

Ar chanterioù-se a roe labour da galz micherourien : kerdinourion, gouelierion, barazherion, govion, heskennerion war stern, kalafaterion, poleerion, hag all... Al labour war-dro ar rouedoù a veze graet gant ar maouezed avat, dreist-holl gant re Saozon. Amañ da-heul un arroud eus un enklask bet kaset da benn e 1835 :

« — *Gant piv e vez fardet ar rouedoù ?*
 — *Graet e vezont gant ar maouezed hag ar vugale. Evit ar wazed, ne reont nemet war-dro an neud hepken.*
 — *Pegait e pad an devezhiad labour, dre vras ?*
 — *Diouzh marc'had eo e labour ar micherourezed, ha n'eo ket ur ral o gwelet o labourat adal pemp eur diouzh ar mintin betek hanternoz, pa vez herr labour warno*⁴⁸. »

An daou chanter brasañ, bet bleunius betek 1914, a oa chanterioù Guillaume ha chanterioù Gallo-Conan. Trec'h e oa chanterioù Guillaume war ar chanterioù all, war a lavarer. Ganto eo e veze savet ar braz eus ar bagoù pontet a verdee e pleg-mor Gwaskogn. Bagoù-touneta a werzhent ivez da besketaerien Enez-Groe.

Ur ger bennak diwar-benn an touneta

Gant pesketaerien Enez-Groe, muioc'h eget gant re Ar Gerveur eo e veze graet ar vicher doun : diwar ar 500 bag-touneta breizhek a nivered e 1893 ne oa nemet 131 hag a oa marilhet er Gerveur. Touneta a rae ar bagoù breizhek, dre vras, etre Inizi-Glenan, en norzh ha Donostia⁴⁹, e Bro-Euskadi, er su.

Chanterioù Ar Gerveur a welas buan a-walc'h peseurt splet a c'hellent tennañ eus ar pesketaerezh-se, dreist-holl adal 1893, pa voe dilezet tamm-ha-tamm ar chaloupoù pontet, a oa pounner ha diaes da embreger, ha pa voe

48 Marcelle Bresson, « Belle-Île-en-Mer », in *Annales de Géographie*, 1924, t.33, niv. 184, pp.336-351.

49 Donostia a zo anv euskarek ur gêr hag a zo anvet San-Sebastian e spagnoleg.

staget gant ar sevel dundeed. Petra e oa un dunde ? Hag eus pelec'h e teu an anv-se ? N'eo ket an holl a-unan diwar-benn orin ar ger, met da grediñ eo e teufe diwar anv ar porzh-mor skos Dun-Dèagh. An dundeed a oa bagoù skañv, aes da vaneal, hag herrek, div wern dezho. Etre 1900 ha 1914 e voe savet ar braz eus an dundeed gant ar chanterioù Guillaume, eus Porzh-Lae. Prizet e veze muioc'h ar chanterioù-se eget re ar Sables-d'Olonne pe re Gonkerne.

Adal ma voe bet digoret ar friturioù kentañ e c'hellas pennoù-embregerezh Ar Gerveur emvataat eus an touneta, rak an toun ivez a veze lakaet e boestoù-mir. Muioc'h a labour evit ar micherourezed, ha muioc'h a sav d'ar produioù...

Ar friturioù

Ur fritur a zo ul labouradeg e-lec'h ma keginer ar pesked evit o mirout er boestoù. Kentañ fritur an enezenn a voe diazezet e 1845. Bez' ez eus bet, e 1881, d'ur mare ma oa an industriezh-se en he barr, betek 13 fritur er Gerveur.

Lennomp c'hoazh, ma fell deoc'h, ar pezh a skrive Marcelle Bresson e 1924 :

« Evel dre-holl war aodoù Breizh ez eo ar friturioù an industriezh pennañ liammet gant ar pesketaerezh. Koulskoude ez a an industriezh-se war nebeutaat abaoe un toullad bloavezhioù. War zibenn ar c'hantved all e oa dek fritur e Porzh-Lae ha teir e Saozon. E 1906 ne oa mui nemet pemp e Porzh-Lae ha div e Saozon. Bremañ ma skrivan kement-mañ ne gonter mui nemet peder e Porzh-Lae hag unan e Saozon. En holl friturioù-se e labourer war

ar memes tro gant sardin, touned ha brizhilli bihan. Hini ebet eus ar friturioù-se avat ne ra legumaj-mir, rak re nebeud a legumaj a c'hounezher er Gerveur. Abegoù an diskar-se a zo an hevelep re er Gerveur hag e lec'h all : gwirioù war an hollen ha war an eoul, kevezerezh ar broioù estren evel da skouer Bro-Bortugal. Er Gerveur avat e ranker derc'hel stad ivez eus ar pell ma 'z eo an enezenn diouzh an douar-bras : dre ziouer a dud-labour war an enezenn e ranker lakaat micherourezed da zont eus an douar-bras, ha kement-mañ a laka ar fredoù da greskiñ. Dre ma 'z eo dizingal-meurbet ar sardineta e chom bresk kempouez ar friturioù, ha pa vez bloavezhioù fall e rank lod anezho serriñ. Setu ar pezh a c'hoarvez pa ne vez ket kempouezet ha klokaet produadur ar pesked-mir gant al legumaj. »

Al labour er friturioù a oa dreist pep tra afer ar merc'hed. Daoust d'ar pae bezañ dister e teuent a-bell da labourat er Gerveur. Sed ar pezh a skrive e 1906 an aotrou Le Gallen, person Porzh-Lae, diwar o fenn :

« Dont a ra merc'hed a-vagadoù da labourat er Gerveur war-dro ar sardin. Kuitaat a reont maezioù Pleuwigner, Pluniav, Kamorzh, Remengol, ha tro-war-dro. Ar merc'hed-se n'eus ket anezho skouerioù a vertuz, ha diouzh an abar-daez e vez abadennoù a bep seurt ha korolloù dizonest hag a laka buhezegezh ar yaouankizoù en arvar⁵⁰. »

Micherourezed ar friturioù ne oa ket gwall ebat o doare : tenn e oa al labour, ha paeet fall. Ret e oa dezho labourat keit ha ma veze pesked fresk, da lavaret eo alies-mat ouzhpenn pevarzek eurvezh bemdez, hep sav-

50 Meneget e : flo

kein nag ehan. Met gwelloc'h e oa, moarvat, an nebeud gwenneien gounezet e-giz-se gant c'hwezenn o dremm er friturioù, gant doareoù labourat poanuis, eget an dienez e-barzh an atantoù bihan e maezioù an douar-bras. Ken kalet al labour, a-hend-all, m'en em savas ar *pennoù-sardin* e friturioù Douarnenez ha Konkerne e 1905 hag e 1924 : harzoù-labour tenn a voe neuze evit gwellaat ar goprou ha digreskiñ an eurvezhioù labour. N'ouzer ket hag ul luskad sokial heñvel a voe ivez er Gerveur. Ma 'z eus bet unan, n'eus ket bet dalc'het soñj anezhañ.

Penaos ez ae al labour en-dro ?

Kerkent hag erruet ar pesked, e vezent dibennet ha divouzellet gant ur gontell vihan. Goude e vezent sallet – ken un tammig bihan avat – ha gwalc'het en dour fresk evit o naetaat hag o dilastezañ da vat. Kentañ tra a veze graet goude a oa splujañ anezho e melloù podezadoù eoul tomm-berv. Goude ur vunutenn pe ziv e oa poazhet ar pesked, hag ur wech tennet a-vaez an eoul e vezent lakaet da ziverat ha da sec'hañ war glouedoù ledan en ul lec'h heoliet pe e-barzh stoufailhoù bras. War-lerc'h kement-mañ e ranked c'hoazh o dilostañ hag o lakaat e-barzh boestoù houarn-gwenn kent fennañ eoul warno. Neuze e veze echu labour ar maouezed, rak ar pezh a deue goude a oa domani miret ar wazed : soudañ ar boestadoù sardined, o serriñ kloz hag o sterilizañ e kaoterioù kloz – anvet ivez aotoklaverien – evit kempouezañ ar gwaskoù.

Ar mare bleuniusañ evit ar sardineta a zo bet, er Gerveur evel e lec'h all, eil hantervezh an XIX^{vet} kantved. Kreskiñ a reas kalz ar boblañs ivez e-tro ar mare-se, betek tizhout 10 804 annezad e 1872. Ugent vloaz war-lerc'h

avat e weler ar boblañs o koazhañ da-heul un enkadenn ekonomikel don. Abegoù an enkadenn-se ? Heskidigezh ar barregezhioù abalamour d'an dreistpesketa, diouzh un tu, ha diouzh an tu all, kevezerezh ar broioù estren ha kemmoù don e doareoù ober hag er rouedadoù lakaat war ar marc'had ar pesked mir.

Etre 1789 ha 1814 : darvoudoù an Dispac'h hag an Impalaerded

E 1763 e voe sinet feuremglev Pariz. Dre an emglev a beoc'h-se e voe klozet ar brezel Seizh Vloaz, en devoa lakaet krog-ouzh-krog Bro-C'hall, Bro-Spagn ha Bro-Saoz, ha plantet freuz ha reuz er Gerveur, ken e oa deuet an enezenn hag an dourioù tro-war-dro da vezañ un dachenn emgann. Ac'hubet e oa bet Ar Gerveur zoken gant ar Saozon daou vloaz-pad. En tregont vloaz goude e vo ul lañs nevez gant al labour-douar hag ar pesketaerezh, hag ur pennad a vleuñvidigezh e vo ar prantad-se evit an enezenn. Kreskiñ a raio ivez ar boblañs : ur mil den bennak ouzhpenn etre 1763 ha 1789. Gant ar peoc'h nevez deuet en-dro ez eus muioc'h a aezamant e-touesk an dud. Koulskoude, pa darzh an Dispac'h, an enezidi o deus abegoù puilh da vezañ drouklaouen : sammet int gant an telloù, ken a-berzh o aotrou, ken a-berzh ar roue, ken a-berzh an Iliz, dre hantererezh ar c'huzulioù-parrez. Gwasket int en o frankiz pemdeziek gant aozadur sonnet ar Renadur Kozh. Aet int og ivez gant an anerioù a dleont d'o aotrou. C'hoantaat a

ra ar gouerien, ar besketaerien hag ar genwerzhourien ma vo ingalet gwelloc’h an tailhoù ha kemmet don ar gevredigezh. Penaos avat, ha betek pe boent ? Den n’en goar ervat.

Daoust d’Ar Gerveur da vezañ pell diouzh Pariz, e taol pled an dud d’an darvoudoù dispac’hel kentañ : kaset he deus Ar Gerveur dilennidi d’ar Breujoù-Meur, un aozadur na oa ket bet galvet gant roue ebet abaoe 1614. Digoret e vez ar Breujoù-se e miz Mae 1789 e Versailhez. Dambrest goude, d’an 20 a viz Gouere e klever er Gerveur ar c’heloù eus kemeridigezh ar Bastille. Diarbennoù a vez bet kemeret diouzhtu gant ar gouarnour, an aotrou Briand, dreist-holl evit mirout ouzh an dizurzhioù d’en em skignañ hag ivez evit suraat ar pourveziñ : taosiñ ar bara a vez graet, renabliñ an eost gwenn ivez, ha divizet e vez mirout hiviziken ar pesked evit ezhommoù an enezidi kentoc’h eget gwerzhañ anezho da dud an douar-bras. Kement-mañ da virout na zegouezhfe ar gernez, unan eus “an teir gwalenn a gastiz”, hag a zo atav un dañjer bras evit un enezenn er prantadoù ma vez trubuilh ha reuz.

E penn-kentañ ar bloaz 1790 e vez kaset un dileuriad d’ar Vodadenn Bonreizhañ, bet nevez galvet e Versailhez.

Dre un dekred eus ar 14 a viz Kerzu 1789 e vez krouet kumunioù dre holl e Bro-C’hall : diwar neuze n’eo mui war ar parrezioù – anezho aozadurioù relijiel – e vo diazezet melestradur an aferioù foran. Er Gerveur e vo miret ar framm kozh, hag ar peder farrez eo a deuio da vezañ kumunioù : Porzh-Lae (a vo ivez pennlec’h-kanton Ar Gerveur, e dalc’h distrikt An Alre), Saozon, Lokmaria, ha Bangor. Ret eo dilenn ur maer hag e guzulierien, ha diwar ar beder gumun-se n’eus nemet unan hag a zilenno un den lik da vaer : Porzh-Lae an hini eo. En teir farrez all ez eo ar person pe unan eus e gureed eo a vo dilennet : ar reveulzi

n'eo ket bev-mat he spered c'hoazh e-touesk an dud. D'ar 16 a viz Genver 1790 en em vod ar c'huzul-kêr evit ar wech kentañ e Porzh-Lae. Ar maer kentañ a zo Jean-Louis Le Grand e anv. Un dispac'her touet eo Le Grand, ha buan e sav bec'h etrezañ ha gouarnour an enezenn. Hemañ a rank reiñ e zilez ha mont kuit. Ne vo ket aesoc'h an darempredoù gant e erlec'hier ar jeneral Bigarré.

E-touesk an diarbennoù kentañ kemeret gant ar c'huzul-kêr-se, notennomp kement-mañ : touiñ a ra ar maer hag e guzulierien al le a fealded da Loeiz XVI, n'eo ket bet dirouet c'hoazh. Goulenn a ra ivez ar maer hag e guzul ma vo argaset al leanezed eus urzh Sant-Visant-a-Baol, a ra war-dro klañvdi Porzh-Lae.

Rak n'eo ket un avel a-du eo a zo o c'hwezhañ evit an Iliz : D'an 11 a viz C'hwevrer 1791 e c'houlenn groñs distrikt An Alre ma touo beleien an teir enezenn – Ar Gerveur, Houad, Edig – fealded da lezenn diazez ar gloer, ul lezenn hag a lakae urzhiadur Iliz Bro-C'hall da genglotañ gant ar renadur politikel nevez. Daou zevezh war-lerc'h ec'h embann person Bangor – e galleg hag e brezhoneg – diwar e gador-brezeg e nac'ho krenn touiñ al le-se. D'an 21 en em vod beleien all an enezenn en e brespital hag holl e nac'hont touiñ. Heñvel dra a c'hoarvez ivez e Houad hag e Edig. Ha peogwir emañ ar gaoz ganeomp war an div enezenn vihan-se, notennomp diouzhtu ne vo ket kemmet kalz ar vuhez enno gant an Dispac'h : gwech ha gwech all e teuo reveulzerien d'ober un diskenn warno, met difrouezh e chomo ar strivoù graet ganto evit cheñch doareoù ar vuhez hag adreizhañ an aozadur politikel. Dre vras e vo harpet ar veleien didou gant ar boblañs, ken er Gerveur, ken e Houad hag Edig.

D'ar 6 a viz Ebrel 1792 e teu er-maez un dekred

a-enep ar c'hongregasionoù, a rank bezañ divodet. Ret eo d'ar seurezed a ra war-dro klañvdi Porzh-Lae mont kuit diouzhtu. Chomet e oant en enezenn betek neuze, daoust da enebiezh ar c'huzul-kêr.

D'an 22 a viz Gwengolo 1792 e krog Bloavezh Kentañ ar Republik, hag an deiziadur nevez a vez lakaet da dalvezout. Dilennadeg-kêr a vez dalc'het adarre.

Adal miz Du 1793 e vez berzet al liderezh katolik, ha diazezet e vez, ent ofisiel, azeulerezh Doueez ar Poell. E Bangor e vez pilet d'an traoñ chapelioù Sant-Gwenole, Sant-Mark ha Sant-Laorañs. Chapelioù all e vez dizalbadet an diabarzh anezho, hag alies e vez lakaet ar savadurioù azeuliñ da etrepaouezioù evit ar boued-chatal, an dafar brezel, pe e vezont lakaet da gazarnioù, evel da skouer e-barzh ilizoù-parrez Porzh-Lae ha Bangor pe e chapel Sant-Sebastian.

Ken garv ha ken garv eo an heskinerezh relijiel : e miz Gwengolo 1794 e vez argaset pe harzet ar veleien didou o doa gallet chom er Gerveur daoust da bep tra, skoazellet hag harpet ma oant bet gant ar boblañs : Jean-Baptiste Mugny, person Porzh-Lae abaoe ugent vloaz, a rank kuitaat an enezenn. E Bangor n'eus mui person ebet abaoe m'eo marvet Jean-Philippe Le Sergent, a oa war un dro person ar barrez ha maer ar gumun. Jacques-Jean Guilloux, person Lokmaria abaoe 1767 a vez harzet ha kaset d'an douar-bras da vezañ toullbac'het, da gentañ e Gwened, ha da c'houde e kastell Josilin. Heñvel dra a c'hoarvez gant Christophe Erdeven, person Saozon abaoe 1768.

Ne habaskaio ar speredoù nemet e miz Ebrel 1802 pa vo bet sinet ar c'honkordat etre Bro-C'hall hag ar Vatikan. Adkavet e vez neuze ar frankiz azeuliñ, ha bep a

nebeut e weler ar vuhez relijiel o vleuniañ en-dro : e miz Gwengolo 1802 e teu en-dro Jean-Baptiste Mugny, bet person Porzh-Lae, ha bet harluet e-pad eizh vloaz. Prezeg a raio an habaskadur goude reñverioù an Dispac'h. Parrez Bangor ez eus er penn anezhi ur person nevez, an aotrou Pener, hag e Lokmaria ez eo an aotrou Marchand eo hag a vez lakaet da berson. Tremenet en doa dek vloaz en harlu e Bro-Spagn. E Saozon avat e ranker gortoz daou vloaz c'hoazh kent gwelet ur person e penn ar barrez.

Darvoudoù an Dispac'h a oa e gor abaoe pell a oa, e gwirionez, ha prientet e oa bet ar c'hemmoù don-se gant araokadennoù ar spered buruteller. Arouez an amzerioù nevez-se a voe lañs ar frañmasonerezh ha krouidigezh al logoù masonek dre holl e Breizh : e 1744 en Oriant, bloaz war-lerc'h e Brest, e 1746 e Montroulez, hag e 1748 e Roazhon. Ne voe diazezet ul log vasonek er Gerveur nemet e 1801, met diaraogerien a oa bet : a bep seurt *kluboù* a oa bet savet, evel, da skouer, *Klub Difennerien ar Frankiz*, e 1791. Ar c'hlub-se en em vode e izili e-barzh chapel Sant Sebastian, ha skignañ a rae mennozhioù dispac'hus hag enepkloer dre bevar c'horn an enezenn. Ar c'hluboù-se e oa enno a bep seurt tud, en o mesk dreist-holl bourc'hizien (kenwerzhourien, tud e karg), kabitened a vor, hag ofiserien deuet a-vaez-bro, ha bet lakaet e gwarnizon er Gerveur.

Hag e gwirionez e vo er Gerveur ur gwarnizon bras keit ha ma pado trubuilhoù an Dispac'h ha brezelioù an Impalaeriezh Kentañ, da lavaret eo etre 1792 ha 1814 : morse ne vo nebeutoc'h eget 4000 soudard kantonet dre holl en enezenn. An darn vuiañ, gwir eo, ne reont nemet un tremen berr kent bezañ kaset da lec'h all. Koulskoude e vez atav soudarded hag a chom a-bad ar bloaz e gwikadell

Porzh-Lae, prest atav d'en em gannañ raktal ma klaskfe ar Saozon tagañ an enezenn. Dre ul lezenn bet votet d'an 10 a viz Gouere 1791 e oa bet renket Ar Gerveur e « rummad ar c'hreñvlec'hioù brezel a gentañ klas » – par da Sant-Maloù ha Brest.

Padal n'eo ket doareet kaer porzh ha gwikadell Porzh-Lae, da varn diouzh an depegn anezho roet gant ur beajour e 1794 :

« Douaret omp er Gerveur dre ur porzh bihan anvet “Le Palais” daoust d'e nebeut a neuz – ur skouer ouzhpenn o tiskouez ez eo techet Mab-den, alies-mat, gant an dister ma 'z eo, da reiñ anvioù bras da draoù gwall vihan. Ar “Palais”-se n'eus anezhañ e gwirionez nemet un tolpad toulloù-tiez, lojeizioù pesketaerien anezho, ha tiez marc'hadourien pesked, da lavaret eo tud hag a rank talañ peuzholl ouzh dañjerioù a bep seurt ha poanial da falc'hat ur park hep tennañ nemeur a c'hounid dioutañ. Ar porzh-se ne gaver ennañ nemet bagoù-pesketa. Mont a reer anezhañ dre un tremen etre div roc'hell, ha gwarezet eo gant ur c'hozh gwikadell. Diwar lein ar wikadell-se ez eo buket ar c'hanolioù war ar vorlenn, a c'hall eoriañ enni listri-brezel a bep ment, nemet pell a-walc'h memes tra, rak an aod a zo plaen [...] N'eo ket al listri en diogel eno koulskoude. Ne vezer goudoret nemet ouzh an avelioù kornôg, ha c'hoazh, goudoret fall a-walc'h, rak peurvuiañ e tremen an avelioù-se dreist an enezenn hag e reont gaou ouzh al listri. Abalamour da se ne chomont morse gwall bell eoriet eno. Koulskoude, an holl listri a deu en-dro eus an Amerik, hag eus an Antilhez peurgetket, a ra un ehan er Gerveur, hag a dremen etre an enezenn hag an douar-bras evit mont da dapout Naoned pe Bourdel⁵¹. »

Keit ha ma pado brezelioù ar prantad dispac'hel ha re an Impalaeriezh Kentañ e vo Ar Gerveur ur post a-raok e sistem difenn an aodoù : neb a zo diazezet mat en enezenn a c'hall mestroniañ war ar memes tro an hentoù-mor en trepas merdein hir a zo etre Sant-Nazer hag An Oriant, ha, pelloc'h, etre Naoned ha Beg-ar-Raz. Etre 1793 ha 1815 ne vo nemet brezel etre Bro-C'hall ha Bro-Saoz, panevet un ehan berr etre 1802 ha 1804, ha bez' e vo dalbezhe er prantad-se strolladoù listri-brezel saoz o verdein a-vaez d'Ar Gerveur, etre porzhioù An Oriant hag An Naoned, hag o c'hourdrouz anezhi a-bell. Gwech ebet avat ne vo argadet an enezenn. C'honvat abalamour ma kav d'ar Saozon ez eo gwarezet mat, gant ar wikadell, ar gwarnizon, hag al lestraz brezel gall.

Padal e vo gwazh ar vuhez ekonomikel eus ar brezel : nebeutaat a ra kalz ar c'henwerzh, dizeiañ a ra ar pesketaerezh, mont a ra al labour-douar war he c'hemend-all, ha ne c'haller mui en em bourveziñ war an douar-bras. Ret eo bevañ e klozarmerzh ha pleustriñ an emvasterezh, hag an traoù retañ zoken e vez strishadurioù war o gwerzh. Ar re baourañ a rank gouzañv dioueroù kriz. Sed, kement ha rein ur skouer, ar pezh a veze skrivet d'an 22 a viz Gwengolo 1794 en un notenn tennet eus Dielloù ar Morlu :

« *Abaoe daou vloaz ne vez mui poazet tamm bara ebet e boloñjerezhioù Ar Gerveur, ha ne gaver mui en enezenn na kantolioù-gouloù, na ankr, na paper kennebeut-all. [...]* Difennerien ar vammvro a zo, an darn vuiañ anezho, en o sach diwezhañ, hep bara, hep plouz, hep dilhad⁵². »

Evit reiñ un alberz eus ar vuhez er Gerveur etre 1792 ha 1814 e vo kavet amañ-dindan, en urzh kronologel, ur roll darvoudoù a bep seurt, bet pennaouet amañ-ahont, pep hini anezho o vezañ evel kement a vaen-bonn e istor ar prantad-se, dre ma tremen ar bloavezhioù :

- 1793 :

- Brezel etre Bro-Saoz ha Bro-C'hall.

- Dibennadur ar roue Loeiz XVI.

- Emsavadeg ar Chouanted e departamant ar Morbihan.

- Gwazed an enezenn a vez enrollet er Gward Broadel hag er Verdeadurezh vrezel.

- 150 prizoniad eus toull-bac'h gwall vrudet ar Bouffay, e Naoned, a erru er Gerveur evit labourat war chanter ar wikadell.

- Savet e vez fernier da dommañ ar boledoù-kanol.

- 1794 :

- Da-geñver ul lid milourel e Porzh-Lae e vez sonet ha kanet ar *Marseillaise* evit ar wech kentañ.

- Diskuliañ a ra izili *Klub Difennerien ar Frankiz*, anezho reveulzerien douet, un nebeud kuzulierien-kêr d'ar pennadurezhioù dispac'hel. Bezañ re glouar e servij an Dispac'h eo ar rebech a vez graet outo. Ne chomont ket pell toullbac'het avat, ha peuzgoude e vezont dinasket.

- 1795 :

- E Kiberen, dilestradeg un tolpad divroerien, anezho dalc'hidi ar rouantelezh, harpet gant ar Saozon. Faezhet e vezont ha treiñ a ra buan ar raktres da wallreuz. Ar c'hloazidi hag ar glañvourien – ur 1500 bennak a dud – a vez kaset da Enez-Houad.

- Emañ al lestraz brezel saoz e-tal Ar Gerveur.

Ar c'hommodor⁵³ saoz, Ellison e anv, a c'hourc'hemenn da c'houarnour an enez en em zaskoriñ ha touiñ al le a fealded da Loeiz XVII. Sed pehini e voe ar respont : « *Aotrou ! N'hon eus ezhomm nag eus gwarez nag eus pourvezioù ar Roue, ho mestr. Dalc'h a-walc'h a zo ennomp d'en diskouez deoc'h pa garoc'h. Ne 'm eus-me ken c'hoant all nemet bevañ dieub pe mervel en ur zifenn ar Republik unan ha dirannapl. Ar Republikaned ez on me o mestr amañ n'o deus ken c'hoant all ebet kennebeut*⁵⁴. » Ar Saozon, pa lennjont ar respont-se, ne zalc'hjont ket pelloc'h hag a yeas kuit, war a lavarar.

- 1796 :

- Distardet e vez blokus ar Saozon ha digoret e vez en-dro al liamm dre vor gant an douar-bras. Ar beske-taerien a c'hall mont war vor en-dro, ha tud an enezenn, marnaoniet abaoe pell, a gav gras o kaout pesked da zebriñ.

- 1800 :

- En un danevell bet savet e miz Du e skriv ispre-fed ar Morbihan kement-mañ : « *Ret eo evezhiañ pizh Enez-ar-Gerveur, rak ar Chouanted bet kaset di goude ar beoc'hidigezh a vez lezet en o madober, ha kement-mañ a c'hallfe bezañ dañjerus*⁵⁵. »

- Kanton Porzh-Lae-Ar Gerveur a vez staget ouzh arondisamant An Alre.

- 1801 :

- Un den yaouank eus Ar Gerveur, Diffon e anv, a vez fuzuilhet e douvezioù ar wikadell. Diskred a

53 Kommodor : anv an amiral el lestraz brezel saoz

54 gar

55 flo

oa warnañ da vezañ bet o chouanat dindan urzhioù Jorj Kadoudal ha da vezañ prientet un diskenn eus ar Chouanted en enezenn.

- Da-heul irienn Jorj Kadoudal a-enep Bonaparte e vez lakaet departamant ar Morbihan “er-maez ar vonreizh” betek 1804, da lavaret eo e vo lezennoù dreistordinal o talvezout ennañ.

- 1802 :

- Adstaget e vez gant al labourioù kreñvaat e Porzh-Lae : da gentañ ez eo soudarded an ijin eo a labour war ar chanter. Da c’houde avat galeourien⁵⁶.

- Kreñvaet e vez an aod, ha savet e vez stelladoù kanolioù e kement lec’h strategel a zo.

- 1803 :

- Brezel ouzh ar Saozon, goude ur prantad berrberr a beoc’h.

- 1804 :

- Sakradur Napoleon I^{añ}. Tri dileuriad eus Ar Gerveur a gemer perzh el lid.

- E niveradeg ar boblañs e konter 5736 annezad en enezenn. Kalz gwazed a zo dilabour.

- 1806 :

- Dilezet e vez deiziataer an Dispac’h : an deiziataer gregorian eo a vo o ren en-dro hiviziken, goude un troc’h a bevarzek vloaz.

- En ilizoù, bet renevezet, e vez lidoù forzh pegement gant ar veleien nevez-deuet en-dro e penn ar parrezioù : Gouel ar Sakramant d’ar 24 a viz Even, Sant Napoleon, d’ar 15 a viz Eost, *Te Deum* evit lidañ trec’h Iena war an ton bras.

56 Gwelet ar pennad diwar-benn an ti-kastiz.

- Dekredet e vez un taos uhel war an hollen. Kement-mañ a ra gaou bras ouzh ar pesketaerezh, rak ne c'haller mui kaout hollen da sallañ ar sardined. Kadarnaet e vo an dekred-se e 1811, ha ne vo adstaget da vat gant ar sardineta nemet e 1814.

- 1807 :

- Ar perc'henn douar Jean-Louis Trochu a stag da vat gant al labour war-dro e "atant-skouer" : « *E miz Here 1807 eo e stagis gant va difraostadegoù kentañ*⁵⁷. »

- 1814 :

- Kaset e vez Napoleaon d'an harlu evit ar wech kentañ. Jeneral-gouarnour an enez a gas ar gemmenna-denn-mañ d'e vistri : « *Touin a reomp sentidigezh ha fealded d'E Veurdez ar roue Loeiz XVIII. An holl amañ o deus spilhennet ar gokardenn wenn, ha lakaet hon eus gwintañ banniel ar v/Bourboned a-us d'ar wikadell*⁵⁸. »

- 1815 :

- Distro Napoleon. Ar wech-mañ ez eo ar banniel triliv eo a vez gwintet a-us d'ar wikadell.

- Dilez-beli Napoleon goude prantad ar 100 devezh.

Ur prantad diaes e voe an Dispac'h hag an Impalaeriezh evit ekonomiezh Ar Gerveur, dreist-holl evit a sell ouzh ar pesketaerezh hag ar c'henwerzh. Ur gerig bennak a vije mat lavaret ivez da venegiñ al labour-douar, a yeas war fallaat ivez dre ziouer a dud en atantoù, ken pounner

57 Jean-Louis Trochu, *Création de la ferme et des bois de Bruté sur un terrain de landes à Belle-Isle-en-Mer (Morbihan)*, 1846.

58 Charles Floquet, *Belle-Île, Houat et Hoëdic*, Keltia Graphic, 1997.

ma oa an enrolladur. Koulskoude, livañ un daolenn re deñval eus ar prantad istorel-se a vefe ober gaou ouzh ar wirionez, rak ne c'haller ket nac'h a-hend-all ez eus bet elfennoù hag o deus lakaet an traoù da dreiñ war an tu a-vat : e-touesk an elfennoù-se, menegomp an arc'hant degaset en enezenn gant soudarded ar gwarnizon, hag ivez al labourioù a voe, hep paouez koulz lavaret, war-dro ar wikadell. Kement-mañ a lakaas keflusk en enezenn hag a roas labour d'an dud – da vihanañ d'ar re na oant ket bet enrollet, evit abeg pe abeg. Un dra c'hoazh : keit ha ma padas ar brezelioù e voe Ar Gerveur ur repu diogel evit al listri kenwerzh a bep ment a dremene er biojoù. En e levr *Istor Enez Ar Gerveur*, deuet er-maez e 1857, e skrive Charles de La Touche kement-mañ :

« *E-pad brezelioù an Impalaeriezh Kentañ, ez eus bet ouzhpenn dek mil bag kenwerzh oc'h en em repuiñ er Gerveur, ha diwar an dek mil-se n'eus bet nemet un ugent bennak a gement hag a voe kemeret gant ar Saozon. Ma vez prizet talvoudegezh pep lestrad da ugent mil lur well-wazh, ez eo daou c'hant milion a dalvoudegezh-kenwerzh eo hag a zo bet lakaet er goudor er Gerveur*⁵⁹. »

E c'hallfe bezañ ez afe an istorour un tammig re bell ganti. Koulskoude n'eo ket diwirheñvel e vije bet tud o o tennañ o spilhenn eus ar c'hoari hag oc'h ober o mad eus an darvoudoù, pegen kriz bennak e voent, a-hend-all, evit an darn vuiañ eus an enezidi.

59 In : Charles de La Touche : *Histoire de Belle-île-en-Mer*

An Akadianed

Orin an Akadianed

Ar re gentañ a zizoloas ar C'hanada a voe, hep mar ebet, ar besketaerien euskarat ha breizhat a yae adal ar XV^{vet} kantved betek an Douar-Nevez da deurel o linennoù war ar taolioù moru. Hag an hini kentañ a blantas war an douaroù-se ar banniel gall a voe ar Malouad Jakez Karter, a berc'hennas an tiriadoù bras-divent-se e anv ar roue. Kement-mañ a c'hoarvezas d'ar 24 a viz Gouere 1534. Kavout a rae dezhañ, pa savas gant genoù ar Sant-Laorañs, edo o vont da zigeriñ un hent dre vor betek Bro-Sina.

Daoust hag aour ha mein prizius eo a vije kavet en douaroù fraost bet nevez dizoloet ? N'eo ket 'vat ! Gwir binvidigezh ar vro a oa e lec'h all : ar moru da gentañ, hag ivez feur al loened gouez bet paket gant an draperien, da c'hortoz ken na vije deuet ar poent da c'hounit douaroù hag a roje trevadoù fonnus. Un hanter-kant vloaz bennak a dremenas kent na vije bet peurergerzhnet ar vro gant Champlain ha diazezet trevadennoù *Port-Royal* ha *Québec*. Poblet e oa bet an drevadenn-se gant Bretoned dreist-holl, hag ivez gant Vañdeiz : e 1632 da

skouer e loc'has tri lestr eus An Alre, dindan urzhioù an aotrou Razilly. An tri lestr-se e oa warno trevidien eus Bro-Gwened hag a ziazezas en Akadia evit he foblañ, he difraostañ ha gounit douar eno. Betek neuze ne oa bet poblet Akadia a-bell-kent nemet gant meuriadoù Amerindianed (int eo, ent-gwir, a dlefe bezañ bremañ gwir berc'henned an tiriadoù-se). Etre 1657 ha 1667 e kaver en Akadia ur gouarnour breizhek anvet Ar Born, a vo e gefridi startaat an drevadenn ha stourm ouzh ar Saozon, rak e-tro ar mareoù-se eo e savas ivez ar Saozon o c'hentañ trevadenn, anvet *Jamestown*, e Virginia.

Heskinerezh a-berzh ar Saozon

Buan e trenka ar soubenn etre ar C'hallaoued hag ar Saozon : an daou enebour a-gozh n'int ket evit en em gle-vet. Tammoù krogadoù a voe etrezo adal ar penn-kentañ. E 1710, da-geñver Brezel hêrezh Bro-Spagn, a zrastas Europa hag a rivas ar rouantelezh c'hall, e kemeras ar Saozon trevadenn *Port-Royal*, hag ar C'hallaoued en em gave eno a rankas touiñ al le a feizleunder d'E Veurdez ar Roue saoz. Tri bloaz goude e rankas Bro-C'hall reiñ Akadia d'ar Saozon. Nac'hañ a reas an Akadianed touiñ al le a fealded. E 1730 avat, skuizh o vezañ heskinet hep paouez nag ehan, ez asantjont, gant ma c'halljent mirout o relijion hag o neptuegezh. Evel-se e c'hounezjont ur prantad a beoc'h hag a badas un dek vloaz bennak. E 1744 setu trouz brezel adarre, ha kreñvlec'h *Louisbourg* a gouezhas etre daouarn ar Saozon goude emgannoù taer-taer.

Ar wech-mañ avat e kave d'ar Saozon e vije gwelloc'h evito argas da vat ha da viken ar *French Neutrals* diouzh douaroù Akadia. Kas a rejont o mennad da benn unnek

vloaz goude, e 1756 : ouzhpenn 7000 Akadian a voe argaset rust, groñs ha didruez, ha strewet amañ-ahont dre holl en Amerika. An darvoud-se a zo chomet bev-mat e istor an Akadianed abaoe, hag anvet eo bet ganto *an Direnkamant Bras*. Diwezhatoc’h, e 1847, e savas ar barzh Henry Longfellow ur varzhoneg veur, *Evangéline* e anv, ma tanevelle planedenn griz an Akadianed er prantad treboulet-se.

Ur bobl kantreat

Lezel a reas an Akadianed o holl vadoù war o lerc’h. An tiez, an douaroù, an eostoù, hag o chatal : 43 000 loen-korn, 48 000 dañvad, 23 000 pemoc’h, 3000 jav. Ne gasjont ganto nemet o dilhad hag o arrebeuri. O sachañ a rejont war o lerc’h er c’hirri pe er bagoù, hir vloavezhioù-pad, evel ar pobloù kantreat. Goude feur-emglev Pariz e 1763 e c’hellas darn anezho distreiñ da Akadia. Darn all a ziazezas el Louiziana hag a deuas da vezañ *Kajuned*. Darn all c’hoazh a gaver o roudoù e stadoù all ar Stadoù-Unanet, er su, dreist-holl.

Ar re a oa bet harluet da Virginia a voe kaset prim-ha-prim da Vro-Saoz, rak gouarnour Virginia en em gave strobet ganto ha ne ouie ket re vat petra ober gant ar repuidi-se :

« *Kasaus eo d’hor c’henvroidi gwelet kement a C’hallaoued o tont da vevañ en o mesk, dreist-holl pa ouezer ez eo kevredet ar C’hallaoued gant an Indianed, bremañ end-eeun m’emañ an Indianed-se o pennkignat hor breudeur war harzoù hon trevadennoù*⁶⁰ ... »

60 gar

Setu neuze an Akadianed, treuzet ganto ar Meurvor Atlantel, kaset ha degaset etre Bristol, Liverpool, Portsmouth, Southampton... Ha ne oa ket ebat o doare : an drederenn anezho a varvas gant ar vrec'h, hag ar re all a c'hortozas c'hoazh e-pad eizh vloaz betek ma vije divizet petra ober ganto. Daoust ma teue o spered da vezañ og dre forzh gouzañv a bep seurt anken ha kastiz, ne golljont ket kalon e-kreiz an trubuilhoù, rak ur c'heloù mat a erruas ganto a-berzh roue Bro-C'hall : prest e oa ar roue da zegemer anezho en Enez-ar-Gerveur, ha da aesaat o buhez nevez dre reiñ dezho, digoust-kaer, pourvezañs, hadoù, binvioù, dafar sevel-tiez, ha chatal.

Setu marteze – spi a zo da gaout – an darvoudoù o treiñ a-du ganto ? Breujoù-Breizh, da vihanañ, a felle dezho skoazellañ ar muiañ ma vije gallet diazevadur an Akadianed er Gerveur. Kement-mañ a voe aesaet dre an adreizhadur klok eus an douaroù a oa bet kaset da benn e 1763 : donedigezh an Akadianed ne vije ket graet diwar-goust ar boblañs a oa dija o chom en enezenn. A-hend-all e oa bet drastet Ar Gerveur gant ar brezel, hag ezhomm bras a oa eus gwazed kreñv hag eus tieien nevez arroutet mat war al labour-douar ha prest da labourat dizamant evit talvoudekaat an douaroù ha degas gwad fresk d'ur c'hontre bet diviet gant bloavezhioù a vrezel hag a reustl.

An Akadianed o tiazezañ er Gerveur

Ret e oa da gentañ kendrec'hiñ an Akadianed, eus un tu, ha tud Ar Gerveur eus an tu all. An Akadianed o doa aon d'en em staliañ en un enezenn hag a chome atav, mui pe vui dindan gourdouz ar Saozon : ki skaotet en devez aon rak dour bervet ! Ha tud Ar Gerveur, diouzh o

zu, a oa leun a zisfiziañs pa glevjont e teuje tud a-ziavaez bro da ziazezañ en o mesk. Kentañ a reas an Akadianed a voe kas tri c'hannad d'Ar Gerveur, evit en em ditouriñ ha gouzout hag eñ e c'hallje ar vuhez eno bezañ diouzh o doare. Pa deuas an tri c'hannad-se en-dro e lavarjont ne ziskoueze ket an traoù er Gerveur bezañ tuet re fall.

Ar beleg a rae war o zro, an aotrou Le Loutre, genidik eus a Vontroulez, a yeas e darempred gant gouarnour an enezenn ha gant personed ar parrezioù evit ma vije divizet penaos e vije dasparzhet an douaroù.

E 1765 ec'h en em gavas 78 tiegezh (dre vras 300 den) war an enezenn. Ar re ziwezhañ a erruas d'an 30 a viz Here, goude bezañ treuzet Treizh-an-Tagnous war ur mor dirollet. Taolet-ha-distaolet er gorventenn e weljont a-dreuz ar glav, ar fru hag ar spoum, tolzenn dopes ar wikadell bet lakaet sevel gant Vauban, an hini end-eeun a weler bremañ c'hoazh pa dostaer d'an enezenn. Dinec'het e voent, marteze, gant ar soñj e vijent gwarezet hiviziken, en o buhez nevez, gant ur c'hreñvlec'h ken galloudus e zoare ?

Pep tiegezh en doa an dalc'h reizh war un atant, hep bezañ perc'henn warnañ, met gant ar gwir da dennañ implij ha gounid diwarnañ : dek hektar a zouar-gounid, un ti, ul leur-dornañ, ur c'hrañj, chatal, hag had a voe lakaet en o c'herz. Binvioù labour-douar hag ur yalc'hadig a voe roet da bep tiegezh ivez. Da c'hortoz an trevadoù kentañ e voe an Akadianed kuit a bep tell. E-touesk an nevezentioù bet degaset ganto e ranker menegiñ ar gwia-derezh hag an avaloù-douar, bet gounezet er Gerveur a-raok na vije bet deuet ar c'hiz anezho war an douar-bras.

Koulskoude ne yeas ket an traoù plaen ha brav war-

raok, ha muiañ m'o devoe an Akadianed da ziwall a voe rak an enezourien o-unan : ar re-se a rae selloù du outo, evit meur a abeg : avi o doa ouzh an Akadianed abalamour ma vezent sikouret kalz – muioc'h egeto – gant ar pennadurezhioù. Darn eus kourerien an enezenn a voe zoken tennet douaroù mat diganto evit o reiñ d'an "estrañjourien". Amplik e oa se ! Ouzhpenn-se, piv e oa an dud-se, na deue nemet galleg ganto, da lavaret ur yezh dianav d'ar braz eus ar boblañs ?

An Akadianed, c'hoant dezho bevañ tost an eil re ouzh ar re all evit mirout ha startaat spered kengred o c'hunniezh, o doa goulennet ma vijent bet lojet holl en ur gêriadenn hepken. Ne voe ket asantet dezho ar c'hinnig-se avat, ha dasparzhet e voent etre un daou-ugent bennak a gêriadennoù « *evit ma ne vo eus holl annezidi an enezenn nemet ur bobl hag ur spered,* » gouez d'ar baron de Warren, gouarnour Ar Gerveur. Ret e voe dezho plegañ. Hogen gwelloc'h e oa, n'eus forzh penaos, eget ar vuhez kantreat o devoa renet abaoe un dek vloaz bennak, kaset-digaset etre an Amerik, Bro-Saoz ha Breizh, hag atav en amzivin a-zivout o zonkadur.

Divizet e oa bet e rankje an Akadianed chom dek vloaz er Gerveur, d'an nebeutañ. Goude an dek vloaz-se e vijent lezet en o madober : chom en enezenn pe mont kuit ha klask o chañs e lec'h all. Ar braz anezho a yeas kuit goude an dek vloaz-se, dipitet gant an treut ma oa an trevadoù, ha fallgalonet gant an diaezamantoù a bep seurt : darn a yeas da chom war an douar-bras, darn all a guitaas an enezenn evit mont da Louiziana, ha darn all c'hoazh a yeas da Gorsika. Ar re a chomas e teuas ar brezhoneg da vezañ o yezh, ha kendeuziñ a rejont bep a nebeut e poblañs Ar Gerveur.

Bremañ ne chom ket kalz a roudoù eus tremen an Akadianed er Gerveur, war-bouez marteze un nebeud anvioù familh : Le Blanc, Ganger, Daingre... Padal pa valeer war hentoù an enezenn e c'haller gwelet c'hoazh amañ-ahont tiez hag a zo bet savet ganto d'ar mare-se. Darn eus an tiez-se e weler engravet war o gourin-dor an deiziad 1766, testeni bresk ha fromus eus tremen an dud-se, bet garv o flanedenn, n'eus ket da nac'h.

1886 : Claude Monet er Gerveur

Anavezet eo Claude Monet (1840-1926) evit bezañ bet diazezour luskad an impresionouriezh, ha, war ar memes tro, keit ha ma vevas, marc’h-blein al luskad nevezus-se. Evel paot a livourien e eil hantervezh an XIX^{vet} kantved e voe desachet gant Breizh, ur vro kontet “kaer-kurius”, da vihanañ diwar savboent an dud a-vaez bro – bourc’hizien an darn vuiañ anezho – e oa aes dezho dont betek hor bro gant an hent-houarn bet nevez-savet adal ar bloavezhioù 1860. Livourien zo ez eo stag o anv ouzh Pont-Aven, lod all ouzh Konkerne pe ouzh skol livouriezh ar Faoued. Evit a sell ouzh Monet, er Gerveur eo en deus bet livet. Deomp d’e heul, ma fell deoc’h !

E 1882 ez erruas an hent-houarn betek penn pellañ gourenez Kiberen, ha kornioù-bro kontet dreistdiraez betek neuze a welas ur ouenn nevez a dud oc’h en em gavout enno : touristed hag arzourien, dreist-holl. E-touesk an arzourien-se, setu Claude Monet. Monet, pa deu da Vreizh, e 1886, a zo o ren e 46 vloaz. Anavezet mat eo e anv e meteier an arz abaoe m’en deus diskouezet, e 1874, un daolenn bet anvet gant an arzvarnourien,

diwar c'hoap, *Impression soleil levant*. Ne ouie ket ar c'hoapaerien edont o paouez reiñ e anv d'ul luskad nevez hag a dlee nevesaat al livouriezh ha reveulziñ an doareoù da livañ. Evel kalz livourien e ra Monet ur veaj e Breizh, evel m'eo ar c'hiz d'ar mare-se. E-sell emañ da dremen un toullad devezhioù er Gerveur, rak klevet en deus ez eo an enezenn-se ul lec'h kaer-meurbet, ha danvez ur sell ennañ. Hogen kalz pelloc'h e chomo an arzour er Gerveur : en em gavout a ra war an enezenn d'an 12 a viz Gwengolo 1886, ha chom a raio eno betek ar 25 a viz Du. E-doug an dek sizhun a dremenno er Gerveur e kaso Monet ul labour ramzel da benn : nav zaolenn ha tregont a livo eno !

Heñchet e vo Monet en e valeadennoù en enezenn gant un den eus ar vro, ar pesketour Hippolyte Guillaume, lesanvet Poly, un den hag a anavez holl droioù ha distroioù an aod. Poly ne oa bet tra ebet en e vuhez ouzh e donkañ da vezañ brudet. Anavezet eo e anv bremañ dre ar bed a-bezh avat pa 'z eus bet graet ur poltred anezhañ gant Monet. Ar poltred-se e c'haller e welet e mirdi Marmotan e Pariz. Padal n'eo ket livañ an dud eo en deus graet an arzour, desachet ma oa muioc'h, a galz, gant ar gweledvaou gouez ha gant dremmvroioù kaer an arvor. Goude bezañ diskennet e Porzh-Lae, e ergerzho an enezenn, e klask eus lec'hioù dizarempred, didud ha gouez.

Hoallet ha bamet e vo dreist-holl gant an tornaodoù serzh, ar c'herreg drailhet, e-lec'h ma weler ar gwagennoù o c'hwezhañ, o tarzhañ war ar reier hag o strinkat dreisto en ur eonenniñ. Penaos lakaat war al lien ar fiñv-difiñv diehan-se ? Plantañ a raio e varc'h-livañ e-tal nadozioù

Porzh-Koton, e Domoe, e Goulfar hag e Porzh-Donant, e-tal groc'h an Apotikerezh... ha labourat a raio hep diskrog. Pa weler bremañ an taolennou bet livet gantañ e-korf an dek sizhun-se e ranker anzav ez eo deuet e daol gantañ da vat. En tu-hont da se e ranker gouverkañ ivez ez eo er Gerveur eo en deus pleustret Monet evit ar wech kentañ teknik al livañ dre steudad, a raio kalz gantañ diwezhatoc'h : livañ a ra meur a wech an hevelep lec'h, da eurioù disheñvel avat, ha gant argemmoù an heol, ar skeudoù hag ar sklêrijenn o reiñ d'an traoù un neuz disheñvel bep tro. Kaerat dave evit ul livour !

Ouzhpenn livañ en deus graet Monet er Gerveur, rak skrivet en deus kalz lizhiri d'e wreg ha d'e vignoned. Bez' ez eo al lizhiri-se un testeni hep e bar diwar-benn ar vuhez pemdeziek war an enezenn, ha menegiñ a ra, mesk-ha-mesk, ar modoù-da-vevañ, ar boued, buhez ar besketaerien, diaestaerioù ar pourveziñ, froudennoù an hin, kaerder ar mor, tristidigezh an dud pa vez kollet ur vag ha beuzet an akipaj, ha laouenidigezh an holl dargeñver ur gouel-eured...

Monet, ouzhpenn ma oa livour, a oa ivez danvez un tudoniour ennañ !

An tiez-kastiz, adal 1804. betek 1977

Galeourien, prizonidi bolitikel, fellerien yaouank

1804-1848
Pennoù bervet ha forsalet

Daoust hag ul lec'h emsavoc'h a zo eget un enezenn pa vez anv da sevel un toull-bac'h ? An dachenn m'eo savet ar prizon warni a zo bevennet a bep tu gant ar mor, ha gant se ez eo aes-tre da evezhiañ. Pell emañ ar brizonidi, ouzhpenn, diouzh “kevredigezh an dud onest”, ha war ar memes tro ez eo diaes-meurbet d'ar re a zo bac'het en un enezenn en em ziskrapañ, dreist-holl pa vez an enezenn-se pell diouzh an douar-bras, pe e-kreiz dourioù treboulet. Ar re o deus lennet *Harry Potter* o deus dalc'het soñj, moarvat, eus enez Azkaban hag eus an toull-bac'h a gaver warni. Hag Alexandre Dumas en deus bet kontet en e romant brudet *Le Comte de Monte-Cristo*, tec'hadenn Edmond Dantes eus ar c'hastell a If, e-tal Marseille, dre un dro-widre espar. Met pet tro wenn a gonter evit un

dec'hadenn deuet da vat ? Ya ! Ar brizonidi bet dastumet er c'hloz war un enezenn e vo diaes dezho en em silañ kuit. Setu perak, moarvat, e kaver dre ar bed a-bezh paot a garc'harioù bet savet war un enezenn : Alcatraz, e-tal San-Francisco, Robben Island, e Afrika ar Su, a voe karc'hariet Nelson Mandela enni e-pad triwec'h vloaz, Rickers Island, e New York, an enez Sainte-Marguerite, e-tal Cannes, ma voe bac'het an Hugenoded da heul terridigezh Edit Naoned. Ma fell deomp chom e Breizh, e rankomp menegiñ Kastell an Tarv, a-vaez da v/ Montroulez, a voe dalc'het er bac'hadur ennañ, en XIX^{vet} kantved, an dispac'hour sokialour Auguste Blanqui ha prizonidi bolitikel all.

Enez-ar-Gerveur ez eus bet warni un toull-bac'h ivez. Bet en deus an toull-bac'h-se anvioù disheñvel a-hed ar bloavezhioù avat, hag a bep seurt prizonidi a zo bet bac'het ennañ : etre deroù an XIX^{vet} kantved, ma voe savet an ti-kastiz kentañ, tre betek 1977 ma voe serret dorioù an diazezadur kastizel diwezhañ, ez eus bet tro-ha-tro soudarded bet kondaonet, galeourien, prizonidi bolitikel ha gwall grennarded na ouie den penaos o adlakaat war an hent reizh. An diazezadurioù kastizel-se a zo bet bras o fouez e buhez an enezenn en daou gantved diwezhañ-mañ, hag anez brastresañ o istor e ve diglok, am eus aon, kronik Ar Gerveur. Se a zo kaoz ma vo displeget o orin hag o emdroadur er pennad amañ da-heul.

Divizet en doa Napoleon e vije kreñvaet muioc'h c'hoazh gwikadell gozh Porzh-Lae, a oa bet savet gant Vauban er XVII^{vet} kantved. E 1804 avat, hag eñ Koñsul Kentañ c'hoazh, e kav dezhañ ez eo re vizus al labour ha ne ya ket prim a-walc'h war-raok, daoust d'ar c'heflusk a zo war-dro ar porzh gant ar c'hompagnunezhioù minerien

ha saperien an ijin a vez o trevellat noz ha deiz war-dro ar mogerioù kreñv. Ar soudarded-se en deus ezhomm anezho e lec'h all avat : kaset e vint da v/Boulogne, e-lec'h m'emañ e-sell da ziazezañ ur c'hamp bras evit prientiñ aloubidigezh Bro-Saoz. Gant an diouer a vicherourien e Porzh-Lae setu ma chom ar chanter bras e-skourr, ha tud Porzh-Lae a rank trapikellat er vouilhenn hag en hentoù foeltret e-harz ar c'hreñvlec'h.

Ar re a zo e karg eus al labourioù o devoa soñjet, er penn-kentañ, tuta micherourien drevourel e-lec'h ar soudarded ; hogen ar vicherourien-se a c'houlenne goprouñ re uhel e-keñver ar budjet rakwelet, ha kement-mañ a lakae grozmol da sevel e-touesk ar pennoù-embregerezh. Dres d'ar c'houlz-se avat ez erru er Gerveur 525 soudard eus ar 4^{vet} bataillon trevadennel a oa bet oc'h en em gannañ e Santo Domingo. Ar soudarded-se n'eo ket tanav o lêr, da varn diouzh ar pezh a skrived neuze diwar o fenn :

« An dud labour marc'had-mat-se a zo anezho soudarded amsent ; lod a zo en em vac'hagnet o-unan, lod all a ra an neuz da gaout nammoù korf a bep seurt ; peurvuiañ ne c'hall o felladennoù bezañ kastizet nemet gant ar justiz vilourel [...] Ar bataillon-se a zo ennañ tud siet bet tennet eus ar galeoù hag eus an tiez-kastiz, ha dañjerus eo an dud-se just a-walc'h abalamour d'ar sioù fall a bep seurt a zo enno⁶¹ [...] »

Soudarded ar bataillon-se eo a vo graet implij diouto war-dro ar chanterioù a zo bet nevez digoret. Ne chomo ar bataillon pennoù bervet-se nemet un nebeud mizioù er Gerveur : kaset e vo buan d'an Antilhez da vougañ

61 gar

ur ravolt. Neuze e vo galvet galeourien evit kenderc'hel gant al labour boulc'het ha chomet a-sac'h. Ar re gentañ anezho – un daou c'hant bennak – a erru e 1806. Diwar neuze ha betek 1848 e vo kaset ingal forsaled d'an enezenn. Ar forsaled-se a zo soudarded ivez, met ar wech-mañ ez int tud bet kondaonet “d'ar boled” en abeg d'o dizerterezh pe d'o disujidigezh.

Setu pere eo dezverkoù pennañ o labour ha doareoù diavaez ar forsaled : implijet e vezont dreist-holl e kreñvlec'hioù ar Stad pe war ar chanterioù bras bet digoret gant ar gouarnamant, e kement lec'h ma vez ezhomm da seveniñ labourioù poanuis, tenn ha risklus. Ret eo dezho sachañ ur boled hag a bouez eizh lur. Stag eo ar boled-se ouzh o ibil-troad war-bouez ur chadenn houarn, 2,50 a hirder dezhi. Disheñvel a-grenn eo o dilhad diouzh lifreoù an arme, ken dre o stumm, ken dre o liv. Ne c'hallont na troc'hañ na touzañ o barv. O blev hag o mouroù avat a vez touzet bep sizhun. Anavezet e vez a-bell ar wazed moal ha barvek-se, gant o chupenn hir kabet, o bragoù mezher ruzdu ha boutonet er c'haol, abalamour d'o gwiskañ ha d'o diwiskañ hep distagañ ar chadenn hag ar boled. E 1852 hepken e vo lamet ar boled, ha gwisket e vo ar forsaled gant ul lifre liv gris.

Tud Porzh-Laez a gav gras o welet ar forsaled oc'h erlec'hiañ ar soudarded trevadennel, rak ar re-se a veze alies o tegas reuz e kêr. Evezhiet pishoc'h e vez ar forsaled avat, ha ne weler anezho e kêr nemet pa vezont oc'h ober un taol-labour bennak pe o treuziñ ar straedoù a-steudad evit mont betek o chanter. Pennoù embregerezh an enezenn a oar ivez tennañ ampled eus an dud labour digoust-se, ha keit ha ma vo forsaled en enezenn e vo kaset a bep seurt labourioù da benn : ar

wikadell, evel-just, met ivez chanter ar porzh-mor. Gant ar forsaled eo e vo toullet ivez diazezoù tour-tan Bangor, bet savet etre 1825 ha 1836, a vez graet *an Tour-tan Bras* anezhañ. Dre vras e vo gwell Ar Gerveur eus ar c'houlzadoù labourioù bras-se : « pa vez ker al lêr, e c'hoarzh ar botaouer » !

Ar forsaled e pign buan-tre o niver dre ma tremen ar bloavezhioù : adal 1832 e teu ouzhpenn forsaled hag a oa bet o toullañ ar ganol eus an Naoned da Vrest, ha gouzout a reer e vo betek 1036 anezho e1834.

Menegomp c'hoazh kement-mañ :

- E 1825 e voe fuzuilhet tri forsall o devoa klasket c'hwezhañ an drailh ha lakaat o c'henseurtes d'en em rebardinañ.

- E 1833 e vez taget tud Ar Gerveur gant ar c'holera. Tamall a reer ar forsaled da vezañ degaset ar c'hleñved-red-se war an enezenn.

1848-1880

Prizonidi bolitikel

E 1848 e tigor ur prantad nevez eus istor an tiez-kastiz : da-heul adreizhadur kod kastizel an arme ez a kuit ar forsaled, ha divizet e vez ne vo mui bac'het er Gerveur, hiviziken, nemet prizonidi bolitikel. Ha n'eus ket diouer anezho, gant ar gwaskerezh a zo o ren dre holl e Bro-C'hall, rak hualet berr e vez an eneberezh politikel.

Ar re gentañ en em gav e Porzh-Lae e 1849. Sed ar pezh a skriv gouarnour an enezenn d'ar 15 a viz C'hwevrer :

« *Dec'h ez eus bet dilestret 147 emsaver politikel. Ambrouget e oant bet gant ur rannad 50 archer red, dindan*

*urzhioù ur c'habiten hag ul letanant. Chom a raint en enezenn evit evezhiañ ar brizonidi*⁶². »

Gwashoc'h e vo c'hoazh gant devezhioù dispac'hel 1848 hag ar mac'homerezh a-berzh Napoleon III : dre un diferad bet sinet d'an 30 a viz Gwengolo gant maodiern an aferioù diabarzh e vez divizet bac'hañ er Gerveur ar re oberiusañ eus an emsaverien o doa kemeret perzh en devezhioù dispac'hel a oa bet e Pariz e miz C'hwevrer 1848.

Erruout a ra ar re gentañ d'ar 16 a viz C'hwevrer 1850. Setu gant pe gomzoù e tezrevell ar gouarnour donedigezh ar brizonidi :

*« An enor am eus da reiñ deoc'h da c'houzout ez eo en em gavet da unnek eur diouzh an abardaez e-tal Ar Gerveur ar vatimant a oa warni ar brizonidi bolitikel. Dre ma oa izel ar mor n'o deus gallet dilestrañ nemet an deiz war-lerc'h da ziv eur... En urzh vat int bet ambrouget betek an toull-bac'h gant archerien red ha soudarded eus an 22^{vet} rejimant a lign. Kaset eo bet an treuzkas-se da benn didrouz ha didabut, ken a-berzh ar brizonidi, ken a-berzh o ambrougerien*⁶³. »

Ha d'an 2 a viz Du, p'en em gav ar peurrest eus ar re gondaonet, e skriv ar gouarnour kement-mañ :

« Ar brizonidi bolitikel o devoa ambarket dec'h e bourzh patach ar valtouterien a zo en em gavet e-tal Porzh-Lae ar mintin-mañ war-dro c'hwec'h eur. Dre ma oa div eur dre c'hoazh n'o dije gallet dilestrañ nemet da zek eur, hag en em gavet e vijent e-touesk ar boblañs. Se a zo kaoz ma 'm

62 gar

63 gar

*eus roet an urzh d'o lakaat da zilestrañ kentoc'h e Porzh-Fouquet, nepell diouzh o zoull-bac'h*⁶⁴. »

Bez' e vo betek 600 prizoniad politikel bac'het er wikadell. Ne vo ket o doareoù bevañ ken poanuis ha re ar forsaled a oa bet eno kent, pell ac'hano : da gentañ abalamour ma 'z eo bet terket an ti-kastiz, ha bet kempennet brav a-walc'h zoken : savadurioù frank a zo ennañ a-benn neuze, liammet etrezo gant c'hwec'h straed ledan, ha kavet e vez ar pep retañ : hunva, kouskva, kelloù digenveziñ, kegin, ti-kouez, chapel, apotikerezh. Da eil abalamour ma ne vez ket graet c'hwerv o buhez dezho dre labourioù rust : n'int ket rediet da labourat ha lezet e vezont en o madober. Lod anezho ez a ar braz eus o amzer gant al labour-spered, hag endra ma vezont o studiañ pe o skrivañ e weler lod all oc'h ober war-dro al liorzh. Reoù all a gas o amzer o varvailhat pe o c'hoari. Ar re baourañ anezho, p'o devez ezhomm da c'hounit un nebeud gwenneien, en em laka da galfichat tammoù koad ha da ober labourioù dorn bihan evit gwerzhañ frouezh o labour. Bez' e vo savet zoken ur meni skol uhel : ar re zesketañ pe ar re a zo barrek war zañvez-mañ-danvez a ginnig prezegennoù pe a ro kentelioù d'ar re a fell dezho deskiñ pe en em varrekaat.

E-touesk an dud bet bac'het e ti-kastiz Ar Gerveur e ranker menegiñ anvioù Armand Barbès (1809-1870) hag Auguste Blanqui (1805-1881), anezho dispac'herien oberiant dreist. Blanqui a dremeno seizh vloaz er Gerveur etre 1850 ha 1857 kent bezañ treuzkaset da g/Korte (Bro-Gorsika) ha da v/Maskara (Aljeria). Blanqui ha Barbès,

64 gar

evito da vezañ o daou dispac'herien, a oa ivez enebour an eil d'egile.

A bep seurt tud

Bep a nebeut e rouesa ar brizonidi hag ez a goullo toull-bac'h ar wikadell : lod a zo bet daskoret o frankiz dezho dre ma oa peurechu o amzer gastiz, lod all a zo bet digastizet gant Napoleon. E miz Kerzu 1857 e vez kaset 33 prizoniad da Vro-Gorsika, ha ne chom mui er Gerveur nemet 48 den hag a vo treuzkaset nebeut amzer war-lerc'h da v/Menez Mikael-ar-Mor, e savadurioù kozh ar manati, a oa d'ar c'houlz-se un toull-bac'h ivez. Evelato ne chomo ket goullo an ti-kastiz e-pad pell, rak dre ur gemennadenn a-berzh levierzh an tiez-kastiz kaset d'ar gouarnour e miz C'hwevrer 1858 e vez roet da c'houzout en em gavo ac'hann da ur miz prizonidi all, eus ur rum-mad disheñvel c'hoazh, pa vo anezho galeourien gozh – en tu-hont da dri-ugent vloaz.

Ar c'haleourien-se a vo 144 anezho, hag o bezañs a laka nec'het ar boblañs. Sed ar pezh a skriv gouarnour an enezenn d'ar pennadurezhioù d'an 23 a viz Du 1858 :

« Betek-henn ez on chomet hep ober anv eus an ti-kastiz, dre ma kave din e oa an aozadur-se e emell Maodiern an Aferioù Diabarzh hepken. Bremañ avat e kav din ez eo va dever reiñ deoc'h da c'houzout e c'hall ar c'haleourien-se – tud en o dek vloaz ha tri-ugent – mont d'al labour amañ-ahont en enezenn a-strolladoù pemzek den dindan evezhiezh ur gward hepken. Ne zistroont d'an ti-kastiz nemet da serr-noz. Ma vije ganto gwiskamant boas ar forsaled e vije aes o anavezout a-bell, met gwisket e vezont evel an holl en enezenn... Ma vennfent tec'hel ne vije merk diforc'hus ebet

*ouzh o lakaat da vezañ anavezet, ha kement-mañ a laka
nec'het ar boblañs*⁶⁵. »

E 1870 e vo bac'het er Gerveur prizonidi brusian bet paket war an tachennoù emgann e deroù tre ar brezel, ha peuzgoude en em gavo 2000 den hag a oa en em savet e Pariz da-geñver darvoudoù ar Gumun. Gedal a raint eno ma vint barnet, hag ul lodenn vat anezho a vo kaset da g/Kaledonia Nevez.

1880-1977

Fellerien yaouank

An amzer a ra e dro. Ha bepred e vez tud hag a rank, diwar divizoù justiz, bezañ lakaet er c'hloz. Lezenniñ a oa bet graet e 1850 diwar-benn an deskadurezh a dlee bezañ roet d'ar fellerien yaouank, ha divizet e oa bet d'ar c'houlz-se o stummañ war micherioù al labour-douar. Diwezhatoc'h e voe kemeret an disentez da astenn ar stummadur-se en ur reiñ dezho un deskadurezh hollekoc'h. Dre un diferad eus an 29 a viz Mae 1880 e voe diazezet er Gerveur un drevadenn gastizel evit ar fellerien yaouank. O krouiñ an trevadennoù-se e klaske ar velestradurezh kastizel ober tri zra : dispartiañ ar fellerien yaouank diouzh ar brizonidi all ; deskiñ dezho lenn, skrivañ ha kontañ, ha, mar bez gellet, reiñ ur vicher dezho ; ha war ar memes tro deskiñ dezho reolennoù diazaez ar gedvuhez.

An drevadenn gastizel e vez degemeret enni fellerien yaouank bet didamallet, met tennet diouzh levezon o

65 Gar

familh, ha fellerien all bet kondaonet d'ur bac'hadur etre c'hwec'h miz ha daou vloaz. Ar re-se a vo bac'het, en tri miz kentañ, en ur c'harter diforc'h. Trizek vloaz eo ar re yaouankañ, ha gallout a reer chom en drevadenn betek an oadouriezh kastizel (16 vloaz) pe betek an oadouriezh keodedel (21 bloaz).

Er bloavezhioù kentañ e veze stummet ar fellerien yaouank war vicherioù ar mor nemetken. E 1890 ez eus ur c'hant bennak a dud yaouank, rannet e peder kevrenn : martolodaj ha levierzh ; goueliezh ha rouedoù ; gwarnisadur ; kordennerzh. Adal 1900 e vez digoret ouzhpenn ur stummadur war ar sardineta. Er penn-kentañ e rank an danvez martoloded pleustriñ war ur vag bet lakaet er sec'h e porzh an ti-kastiz, ha gant se ez eo skort o stummadur, pa ne c'hellont e gwirionez deskiñ nemet elfennoù kentañ ar vicher. E 1895 hepken e vez lakaet en o c'herz ur gwir vatimant, 25 metr a hirder dezhi, a c'hellont merdeñ ganti e biojoù an enez. Adal 1887 e voe digoret ur gevrenn evit micherioù al labourdouar, ha diwar neuze e kresko niver an dud yaouank betek tizhout 320 e 1902.

Strizh-meurbet eo ar c'henurzh, hag an dud en ti-kastiz a zo taer ha feuls. Gwa d'ar re a ra ur c'hloazadenn d'ar reolennoù, rak neuze e tiroll an drouknerzh hag ar mestaolioù. Meur a wech e savas freuz en drevadenn gastizel. E 1934, goude un emsavadeg e skrivas ar c'hazetenner Alexis Danant ul levr⁶⁶, ma tisplege doareoù taer an evezhierien e-keñver ar grennarded, ha Jacques Prévert, ar barzh, a savas ur varzhoneg bet awenet gant ar feulster hag

66 Henri Danant, *L'épée du scandale, Trente ans au service des enfants perdus*, Robert Laffont, 1961.

an argadusted a oa o ren eno, ha titlet *An hu war ar bugel*⁶⁷.

Goude ar brezel e voe bac'het e Porzh-Lae, e-pad ur prantad berr, tud hag o devoa kenlabouret gant an Alamaned e-pad an Dalc'hidigezh.

An drevadenn gastizel a deuas adal 1946 da vezañ un diazevadur foran evit an deskadurezh evezhiet, hag e-lec'h an evezhierien e voe implijet desaverien a-vicher. Mont a reas an diazevadur-se en-dro betek 1977. Pa voe serret e voe troet ivez ur bajennad istor gwall hir : e-pad tost da 200 vloaz e oa bet Ar Gerveur un enez-vac'h.

67 Jacques Prévert, « La chasse à l'enfant », in *Paroles*, Le Point du Jour, 1946.

Brezel 14-18

Keit ha ma pado ar brezel e vo dibaouez listri a bep seurt o redek ar mor e biojoù an enezenn, hag e Treizh-an-Tagnous peurgetket, ar vrec'h-vor a zo etre Ar Gerveur ha Kiberen : listri-brezel ar Gevredidi, listri-kenwerzh, listri-spluj an Alamaned, war-c'hed anezho ha war o api, prest atav d'o zagañ noz-ha-deiz, pe o pozañ minoù war-neuñv hag a lakaio an hentoù-mor da vezañ dañjerus-kenañ. Adal 1917 e vo, ouzhpenn se, strolladoù listri hir-meurbet an Amerikaned o kas o soudarded d'an talbenn. Rankout a reont tremen e-biou d'Ar Gerveur evit mont da zilestrañ e Sant-Nazer, o fenn pont en Europa.

Kemmoù bras a vo en enezenn ivez da-heul ar brezel : ar wazed a zo aet kuit d'an talbenn, ha kement-mañ a ra gaou bras d'al labour-douar. Nebeutaat a reer da hadañ ha da arat, hag an askoradoù a ya kalz war vihanaat. Ret eo paouez tost da vat gant ar pesketaerezh hag ar sardineta. Diaes eo, a-hend-all, pourvezañ an enezenn gant produioù an douar-bras, hag ar boblañs a rank gouzañv dioueroù a bep seurt. D'ober e-lec'h ar gouerien aet da soudarded ez implijer prizonidi alaman, rak n'eus ket diouer anezho en enezenn : kerkent ha mizioù kentañ ar brezel e teu Ar Gerveur da vezañ ur c'hamp prizonidi

bras-divent, a vo bac'het ennañ, etre 1914 ha 1916, ur 5000 bennak a brizonidi.

Sed amañ-dindan, bet pennaouet ac'hann-hag-ale-hont, un toulladig darvoudoù a c'hoarvezas er Gerveur er pevar bloavezh treboulet-se :

D'ar 1^{añ} a viz Eost e vez embannet urzh an engalvadeg hollek. Kerkent ha klevet ar c'heloù ez a kuit ar bagoù-sardineta eus Konkerne, Douarnenez hag ar Gelveneg a oa o pesketa e biojoù Ar Gerveur. Gwazed an enezenn, pep hini o sentiñ d'an urzhioù roet dezhañ war e levrig milourel hiniennel, a ya d'al lec'h a zo bet merket dezhañ : lod en em gav war ar c'hae lestrañ, lod all a ya d'ar wikadell pe d'ar c'hazarnioù Vauban pe Willaumez. Ar soudarded eus an 62^{vet} rejimant a linenn, a oa betek neuze e gwarnizon en enezenn, a vez kaset d'An Henbont, hag en o lec'h e teu ur rejimant adarmeaded.

D'an 3 e vez disklêriet ar brezel, ha diarbennoù a vez kemeret diouzhtu gant an ti-kêr ha gant ar pennadurezhioù milourel :

- Savet e vez en enezenn ur gward trevourel, ennañ tud a youl-vat bet galvet gant ar maer.

- Berzet e vez an otoioù war hentoù an enezenn.

- Urzh a vez roet da dennañ eus kement lec'h a zo – stalioù-kenwerzh, pannelloù – ar bruderezh evit ar produioù alaman (ar *Bouilhoñs Kub*, da skouer).

- Diwallet e vez ar semafored, an tourioù-tan ha termenelloù ar funioù telegrafek dindanvor gant soudarded.

D'ar 25 a viz Eost ez erru an urzh da derkañ er Gerveur kampoù bras, ichoù a-walc'h enno da lojañ 800 prizoniad alaman, en o mesk 20 ofiser. Kerkent e vez stanket an diraezioù d'ar wikadell gant paluc'hoù

hiriset hag orjal dreinek, ha war dachenn bleustradegoù ar c'hazarn Willaumez e vez staliet teltennoù bras. An ofiserien a vo lojet da gentañ e ti an dud, ha da c'houde e vo miret dezho ur rann eus ar wikadell. D'an 30 a viz Eost, da beder eur nemet kard d'enderv, e tilestr e Porzh-Lae 184 soudard ha 14 ofiser. Digoret eo bet ar pont-tro, da viret na dostafe ar boblañs outo. Un enezad, bet test eus o donedigezh, a gont kement-mañ :

« Kalz anezho a zo gloazet pe glañv, unan a vez douget war ur c'hravazh. Emaint en ur stuz reuzeudik, didog, ha dilhad roget ha lous dindano. Sentus int, ha dereat... An ofiserien a sin an engouestl ne glaskint ket tec'hel⁶⁸... »

E miz Gwengolo ha betek dibenn ar bloavezh 1914 en em gav prizonidi all c'hoazh : e miz Du ez eus 2000 anezho, ha diwar an 2000-se ez eus 1400 hag a ranko tremen ar goañv dindan teltennoù. Ne vo ket savet barakennoù dezho ac'hann da viz Du 1915. Hag ar baraken-negoù-se, a-boan savet, a vo dibezhiet hag adsavet en Oriant. Kalz ofiserien a renk uhel a zo ivez : e 1916 ez eus 376 anezho, en o mesk un Hohenzollern, niz an impalaer (Kaiser) Wilhem II.

E-tal Ar Gerveur ez eus listri-spluj alaman a-vordilh. Lakaat a reont minoù, ha dañjerus eo merdeñ e biojoù an enezenn. Brudoù a red diwar-benn un argad a-berzh an Alamaned evit dieubiñ an ofiserien uhel, ha d'an 12 a viz C'hwevrer 1916, e vez kresket gwarnizon an enezenn evit dizarbenn kement arsailh a c'hallfe bezañ : n'eo mui 250 soudard eo a vo er Gerveur, met 900. N'eus forzh penaos ne chomo ket pell ken ar prizonidi brezel en

68 gar

enezenn : en nevezamzer e vez serret ar c'hamp ha treuz-kaset e vez ar brizonidi d'an douar-bras : re bounner e oa deuet da vezañ bezañs un niver ken bras a dud er Gerveur, gant an diaes ma oa o bevañ en un enezenn hag a oa re bell diouzh ar mammennoù pourvezañ, ha ken arvarus ar verdeadurezh en he biojoù.

Ar brizonidi na oant na gloazet na klañv a veze rediet da labourat : darn a voe kaset d'an atantoù, darn all a labouras da gempenn an hentoù, ha reoù all c'hoazh a reas labourioù a bep seurt : sevel poullou-kannañ, diskoultrañ gwez, meinañ ar c'haeoù J. Leblanc ha Gambetta, e Porzh-Lae.

Al listri-spluj hon eus graet anv anezho uheloc'h ne oant ket dizañjer kennebeut evit ar besketaerien hag al listri-kenwerzh, ha meur a hini anezho a voe gwazh eus ar brezel. Sed amañ da skouer un dezrevell graet gant ar c'habiten Le Layec, a voe kaset e oueletenn d'ar strad – ar *René Montrieux* – gant ul lestr-spluj e-tal Ar Gerveur d'an 9 a viz Kerzu 1916 :

« Kuitaet em boa porzh Sant-Nazer gant ur c'hargamant evit mont war-gaout an Havr-Nevez. Tremenet e oamp a-vaez d'Ar Gerveur, ha ni o loveal neuze, abalamour ma oa bihan an avel. D'an 9 a viz Kerzu e oa brav a-walc'h an amzer, gant un avelig skañv, ha ne 'z aemp nemet daou skoulm. Houlennek e oa ar mor. E-tro peder eur d'enderv edon em c'habinenn pa zeuas unan eus va martoloded da lavaret din e teue ul lestr-spluj a-dizh hag a-dag war-ziar-benn dimp. Pignat a ris diouzhtu war ar pont hag e welis, war-hed 500 metr dirazomp, ul lestr-spluj alaman, tri-ugent metrad hirder dezhañ, warnañ ur pezh-kanol gobariet kreñv a-walc'h. Ar c'homandant a yeas ouzhin en ur galleg difestur hag a urzhias din diskenn diwar va batimant gant

va akipaj. Petra am bije gallet ober ? Tec'hel ? Ne oa anv ebet a gement-se gant ar bihan ma oa an avel. Klask enebñ ouzh an Alamaned ? Diskiant e vije bet, rak n'hon doa arm ebet. Daoust d'ar gounnar a oa o virviñ ennon e komprenis ne oa nemet plegañ da ober. Goude bezañ distrujet va deizlevr-bourzh e c'hourc'hemennis lakaat ur c'hanod-bihan er mor, hag e lestris warnañ gant va akipaj evit mont da abourzhañ al lestr-spluj. Degemeret e voemp gant ar c'homandant ha seizh pe eizh den armet. Ret e voe din pignat war bont al lestr-spluj gant va akipaj ha va ofiserien, war-bouez daou zen hag a rankas mont gant ar v/Boched betek va goueletenn.

Tremen a rejont un eurvezh pe-seik e bourzh ar René Montrieux, ha pa zeujont en-dro e oa ganto traezhoù a bep seurt, en o mesk ur mell pod-houarn. Peuzgoude e voe div darzhadenn e bourzh va lestr : lakaet o devoa al laeron-vor div vombezenn, unan e penn-araok ar vatimant, unan all er penn-adreñv. En ur serr-lagad ne chomas mui war an dour nemet dismantrou taol-distaol gant an houladennoù. Ugent munutenn goude e voe aotrete dimp gant komandant al lestr-spluj ambarkiñ war hor c'hanod-bihan.

Evelkent e kredan gellout lavaret e voe seven-meurbet ar c'habiten alaman en hor c'heñver, bezet souezhet neb a garo. Profañ a reas sigarettennoù dimp, ha dre ma nac'hen kemer unan, diwar abegoù hag a vo aes deoc'h o c'hompren, e lavaras din, blazig an dristidigezh en e vouezh : “Petra 'fell deoc'h ? Ar brezel 'ni eo.” Kent hol lezel da vont kuit e redias ac'hanomp da gemer ur banne te tomm, hag e roas dimp div varaenn zu hag un tamm lien da zresañ hor c'hanod a oa bet gaouet ar babourzh anezhañ en ur stokadenn. Reiñ a reas hor frankiz dimp gant ar gerioù-mañ : “N'emaoc'h ket pell diouzh an aod. Plaen eo ar mor. Chañs vat a hetan deoc'h.”

Daouzek eurvezh a dremenjomp en hor c'hanod, treantet

ha gleb-dour-teil. Ne oa nemet ar mous a gement hag en doa gallet kousket. N'en doa ket merzet an dañjer da vat, hag e gamaladed o devoa goloet anezhañ gant o dilhad, evit ma n'en dije ket bet re da c'houzañv, paourkaezh bugel anezhañ.

War-dro tarzh an deiz e weljomp ur vaper hag e rejomp gwign dezhañ. Dre eurvad e voemp gwelet, ha nebeut amzer goude edomp e savete e bourzh al lestr norvegiat Otto, a oa o troc'hañ hent war-gaout Naoned. Eno e tilestrjomp d'ar Sul diouzh an abardaez⁶⁹. »

Daoust da bep tra avat ez eo ar Gevredidi eo hag a zo gwir vistri ar mor, ha trec'h d'an Alamaned. E 1915 e vez diazezet er Gerveur un unvez stourm a-enep al listri-spluj. An unvez-se a zo enni dournijerezed diazezet e Porzh-Lae.

Degemeret e vez ivez muioc'h-mui a c'hloazidi e klañvdi Porzh-Lae : Gallaoued, Poloniz, Alamaned. Kement a zo anezho ma n'eo ket bras a-walc'h ar c'hlañvdi ha ma ranker terkañ un adlec'h er-maez eus kêr, war hent Bangor. Bered Porzh-Lae a zo ennañ bremañ c'hoazh ur c'harrezad beziou alaman : re an 63 frizoniad marvet er c'hlañvdi diwar o goulloù pe diwar gleñved.

Heuliadoù dic'hortoz en deus bet ar brezel ivez. Ur skouer nemetken : da-heul an diouer a zanvezioù helosk e rankas an enezidi adkregiñ gant an taouarc'ha, a oa bet dilezet a-raok ar brezel. E Porzh-Lae e voe tennet, keit ha ma padas ar brezel hag ar strishadurioù war an danvez-tan, 500 tonennad taouarc'h bep bloaz. Da-geñver al labour war-dro an taouarc'hegoù e voe graet, dic'hortoz-kaer,

69 flo

kavadennoù ragistorel, don a-walc'h en douar : kailhastr benet, darbodoù pri, ha klopenn un den ragistorel.

Kentañ enezad a varvas war an talbenn a voe ur beleg hag a oa mestr-skol e skol ar frered e Porzh-Lae. Mervel a reas e miz Eost 1914. En holl ez eus bet sammet 230 enezad gant an Ankoù war an tachennoù emgann – war zouar ha war vor – etre 1914 ha 1918.

Disoc'h ar brezel a voe drastus evit Ar Gerveur, a oa bet un takad milourel e-pad pevar bloaz, bet lakaet dindan reolennoù esevded, hag er bloavezhioù goude e kendalc'has ekonomiezh an enezenn da vont war he c'hemend-all : serret e voe ar wikadell ha ne voe mui gwarnizon ebet en enezenn ; serret e voe ar chanterioù sevel-bagoù hag ar gordennerezh ; ar pevar savlec'h lomanerezh a oa en enezenn a voe serret ivez ha treuzkaset da Sant-Nazer. Ha nebeut goude e voe serret ivez ar braz eus ar friturioù. Goude bezañ chomet dilusk e-pad pevar bloaz e krogas ar pesketaerezh da vont war-raok adalek 1919, met prantad bleuniusañ ar sardineta a oa tremenet.

Brezel 39-45

Gwengolo 1939- Even 1940

Gouzout a reer mat a-walc'h kement a c'hoarvezas er Gerveur er prantad anvet *ar Brezel Drol*, da lavaret eo etre miz Gwengolo 1939, pa voe disklêriet ar brezel, ha miz Even 1940, pa voe sinet an arsav-brezel da-heul faezhidigezh al lu gall. Anavezet mat eo ar prantad-se, betek er munudoù disterañ zoken, a-drugarez d'un den, Pierre Couraud e anv. An den-se a oa en em dennet er Gerveur goude ur respet a ofiser en arme. An holl er Gerveur a rae *Komandant Couraud* anezhañ. Ur spered lemm a zen an hini e oa, troet-kenañ war an istor hag an dudouriezh. Pa varvas, e miz Du 1940, d'an oad a 79 bloaz, e voe legadet da Diellidi an departamant ur strobard dornskridoù bet savet gantañ diwar-benn istor Ar Gerveur. An dornskridoù-se e oa en o mesk un deizlevr en doa dalc'het etre miz Gwengolo 1939 ha miz Even 1940, ma konte ennañ dibun an darvoudoù. Sed amañ dindan un diverrañ eus an notennoù bet savet gantañ, hag eñ bet test a-lagad eus kement a c'hoarvezas :

« *D'ar 27 a viz Eost : galvet eo bet ar bloavezhiadoù*

kentañ dindan an armoù. Skritelloù dre holl ouzh ar mogerioù. Gwazed an enezenn a sav betek ar wikadell evit bezañ gwisket hag armet. Kalz anezho o deus evet hag a zo mezv-mat. Birvilh ha keflusk forzh pegement war ar c'haeoù. Ar soudarded a vicher a vez kaset d'an douar-bras, hag en o lec'h e teu adarmeaded amsent.

D'an 29 : aozet fall eo bet an traoù gant pennoù-bras ar sturvod. Kemenn ha diskemenn a zo, a-hervez. Ar re a zo bet galvet a glemm abalamour ma n'eus bet rakwelet netra evit ar c'housed : n'eus na gwele na golc'hed-plouz ebet evito. Teodoù abegus ha begadoù binimus a glever e kêr. Ar wazed re gozh da vezañ galvet a vez lakaet da evezhiañ an aod, a-strolladoù sterniet gant ar morlu.

D'an 30 : soudarded deuet eus kreizennoù kevodañ Kiberen ha Karnag a erru e Porzh-Lae. Bremañ ez eus peadra d'o lojañ evit an noz : dafar koused ha plouz. Daoust hag aozet gwelloc'h e vefe an traoù ?

D'an 31 : urzh an engalvadeg hollek. Skritelloù a zo bet lakaet ouzh mogerioù an ti-kêr hag er gar-vor. Tolpadoù tud a zo dre holl, met sioul e chom an dud.

D'ar 1^{añ} a viz Gwengolo : donedigezh 350 repuad spagnol, republikaned anezho, bet argaset diouzh o bro abalamour d'ar brezel diabarzh. Tri devezh war-lerc'h, ez erru Spagnoled all : 1500 a zo anezho. Lojet e vezont e skol ar straed Bihan, e batisoù ar c'hlañvdi kozh hag er friturioù.

D'an 3 a viz Gwengolo 1939 e tisklêr Bro-C'hall ar brezel d'an Alamagn. Al letioù o deus serret o dorioù abaoe un nebeud devezhioù abalamour ma oa aet kuit an douristed kerkent ha devezhioù diwezhañ miz Eost : ne veze anv e pep lec'h nemet a vrezel.

D'ar 7 : Rekizet eo bet ar vatimant Le Guedel, hag he c'habiten en deus ranket kas anezhi da Sant-Nazer. Ne vo

*mui hiviziken nemet l'Emile Solacroup oc'h ober an treizh evit ar servij reoliek hag ar post*⁷⁰. »

Bep a nebeud ec'h antreer en un aergelc'h a vrezel :

« *E miz Gwengolo e tegouezh soudarded nevez. Lojet int er wikadell. E-tal Ar Gerveur e weler an douger kirri-nij Le Béarn, ha listri-tarzher. Uhel en oabl e plav ar silzigenn evezhiañ, o kourziñ war monedoneoù ar bagoù. Ret eo bezañ war evezh abalamour d'al listri-spluj alaman, a laka minoù war-neuñv. Goudorioù enep bombezennoù a vez terket e Porzh-Lae. Ar prenestroù hag ar c'hleuzeurioù-straed a vez gwisponet gant liv glas*⁷¹. »

Padal n'eo mui Ar Gerveur ul lec'h strategel, evel ma oa bet gwechall, en XVIII^{vet} hag en XIX^{vet} kantved. Diwezhatoc'h, pa vo erru an Alamaned er vro, ne vo ket an enezenn evito ul lec'h ken pouezus ha porzhioù-mor an douar-bras, rak re bell emañ Ar Gerveur diouzh ur porzh-mor bras, hag aveet dister eo ouzhpenn. Porzhioù-mor An Oriant ha Sant-Nazer eo a vo dibabet gant an amiral Dönitz, hag eno eo e vo savet bonioù splujerezioù an *U-Boote* alaman.

Pa lenner karnedoù ar c'homandant Couraud e teu anat ez eo bet Ar Gerveur betek miz Even 1940 ul lec'h tremant evit tud a bep seurt : bodet e vez er Gerveur e-kerzh ar goañv ar repuidi spagnol a oa en em gavet e Porzh-Loeiz hag e Gwened, goude na pet ha pet miz a drubuilh hag a enkreiz. Bod a vez roet dezho er friturioù, evel ar re a oa erruet e miz Gwengolo. Menegin a ra Couraud a-hend-all ar soudarded disuj a erru bremañ ivez er Gerveur :

70 gar

71 gar

« *Ar soudarded-se a zo gwazed bet galvet d'an arme ha bet kondaonet en abeg d'o disujidigezh. Toullbac'het int bet met n'int ket bet adlakaet en o gwirioù keodedel. Gwellañ tra da ober evito a vefe emouestlañ e batailhonoù an Afrik, met dibaot anezho en gra*⁷². »

E miz Meurzh e klever ar c'heloù ez eo kouezhet gouarnamant Daladier. Ar repuidi eus Bro-Spagn a ya kuit tamm-ha-tamm. Bep ma tremen an amzer ez erru keleier fall a-zruilhadoù : aloubet eo bet an Norvegia, an Izelvroioù, Belgia ha Luksembourg. D'an 10 a viz Even, ur c'heloù fall ouzhpenn : Italia he deus disklêriet ar brezel da Vro-C'hall. Soudarded an 209^{vet} rejimant a vindrailherezh, a oa chomet kantonet en enezenn, a vez kaset d'an talbenn.

D'an 12 a viz Even e vez rekizet ar *Solacroup*, ha servij an treizh hag ar post a vez graet gant ur vag all, bihanoc'h ha koshoc'h, ar *Joseph Le Brix*.

Pennadurezhioù an enezenn a vo herr-labour warno war zibenn an nevezamzer 1940 pa zegouezho er Gerveur engroeziad ar repuidi trevourel gall deuet eus departamantoù reter hag hanternoz Bro-C'hall, ha Couraud a geuzio neuze an dizurzh a zo o ren er vro : adal an 10 a viz Even e tilestr er Gerveur 1500 repuad eus an Havr-Nevez, hag an deiz war-lerc'h 400 repuad all, deuet eus departamant an Eure. Dre eurvad ez eus bet gallet adstagañ gant ar sardineta, ha bevañs a-walc'h a zo d'ar repuidi.

Emañ an Alamaned o tostaat : d'ar 15 e klever ar c'heloù ez eo bet bombezenet kêr ha porzh Sant-Nazer ganto. D'ar 17 avat e vez sinet an arsav-brezel.

72 gar

Diwezhañ darvoud bet notennet gant ar c'homandant Couraud a voe afer ar *San-Pedro*. Al lestr-karg-se a oa en em repuet e Porzh-Lae. Rekizet e voe gant al letanant-a-lestr Liebard, a oa d'ar mare-se gouarnour milourel an enezenn, ha d'an 18 a viz Even e lestras warnañ 1680 a dud. An dud-se a oa soudarded anezho, met ivez gwazed an enezenn etre 17 ha 50 vloaz. An deiz war-lerc'h beuremat e tiborzhio ar *San-Pedro* evit pennañ er su war-gaout Dar el Beida (Casablanca), e-lec'h m'en em gavo d'an 23.

Even 1940 betek Mae 1945

Pa erru an Alamaned er Gerveur e devezhioù kentañ miz Gouere, ne gavont war an enezenn nemet maouezed, bugale ha kozhidi. Ganto eo e vo graet labourioù an hañv : foennerzh, east, dornadeg. Ar wazed a oa aet kuit e-bourzh ar *San-Pedro* a deuio en-dro peuzholl eus Dar el Beida d'ar 16 a viz Here. Ne vint ket heskinet gant an Alamaned. Keit ha ma pado ar brezel e vo lakaet Ar Gerveur da dakad berzet, da lavaret eo ne c'hello an enezenn bezañ darempredet nemet gant an dud hag a zo o annez pennañ warni. Reoliet strizh e vo ar monedoneoù etre an enezenn hag an douar-bras. Savet e vo bunkerioù war an aod ha staliet e vo ivez stelladoù kanolierzh e nepnij.

E-pad pevar bloaz e vo berr-spontus an traoù gant an dud, abalamour d'ar strishadurioù ha d'ar rekizadurioù : an edeier, ar c'hig, an amann produet e atantoù an enezenn a vez rekizet hag a rank bezañ kaset d'an douar-bras. An enezidi a rank, ur wech ouzhpenn, emvastañ d'o ezhommoù, ha gwelet a reer ar maouezed o nezañ

ar gloan hag ar wazed oc'h oberiañ botoù-koad, kement a obererezhioù hag a oa bet dilezet, mui pe vui. Diouer a bep tra a zo : eoul-maen, gouloù-koar, soavon, butun. Aozet e vez kafe gant heiz ha piz-plat.

Goude an dilestradeg en Normandi ha kiladeg an Alamaned e vo ebarzhet Ar Gerveur e sistem difenn "chakod" An Oriant, a enebo ouzh ar Gevredidi betek an arsav-brezel. Adal miz Even 1944 ez eus bet dalc'het ul liamm dre vor etre Rezistanted an enezenn hag ar Gevredidi, gant harp ar besketaerien, ha war var o buhez alies, rak diaes-tre eo kuitaat an enezenn dre guzh pe dont en-dro hep bezañ gwelet abalamour ma 'z eus bet staliet gant an Alamaned radarioù maesa galloudus-kenañ. A-drugarez d'ar rouedad-se e vo miret an darempred etre poblañs an enezenn ha sturvod ar Gevredidi. Kaset kuit e oa bet, n'eus forzh penaos, ar braz eus an dud d'an douar-bras adal miz Du 1944, hag an Alamaned n'o devoa miret war an enezenn nemet an dud hollret evit suraat mont en-dro an aveadurioù ha pourvezañs ar soudarded. Sed an urzh a-berzh an Alamaned, d'an 13 a viz Du :

« Poblans trevourel an enezenn a rank bezañ kaset d'an douar-bras. Ne c'hall chom er Gerveur nemet al labourerien-douar hag an dud a c'hall sikour da virout an urzh ekonomikel hag ar re a labour evit al lu alaman⁷³. »

Ne vo ket dieubet Ar Gerveur da vat ken ac'hann d'an 10 a viz Mae 1945, da lavaret eo daou zevezh goude ma vo bet sinet an arsav-brezel. War a lavarer e voe souezhet holl gouarnour alaman an enezenn o welet soudarded c'hall o tegouezhout er Gerveur, e-bourzh tri chaluter

73 flo

armet, ar *Marthe Roland*, ar *Bienheureux* hag ar *Python*, a
deue eus an Drinded-Karnag. Engortoz e oa, a-hervez, da
godianañ gant Amerikaned kentoc'h eget gant Gallaoued.
Evel-se eo e echuas ar brezel er Gerveur.

An touristerezh

A-bell-gozh ez eus bet tud a-ziavaez-bro o vont d'Ar Gerveur. E 1750 e skrive François-Marie Le Gallen, bet savet gantañ un istor eus an enezenn, « *e teu estrañjourien da welet ar grec'hier pe da chaseal enno, pe c'hoazh da arvestiñ ouzh an dornadegoù.* » An *estrañjourien*-se ne veze ket c'hoazh graet touristed anezho, rak ar ger ne voe ket ijinet ac'hann da greiz an XIX^{vet} kantved. An *estrañjour* kentañ a lezas deomp un diskriv eus e dremen er Gerveur a voe ar skrivagner gall Gustave Flaubert, da-geñver an hir a droiad war droad a reas e Breizh dre an Arvor hag an Argoad gant e geneil Maxime Ducamp e 1847⁷⁴. Betek dibenn an XIX^{vet} kantved avat ne oa nemet dibaot a dud o veajiñ evit o flijadur nemetken, hag evit a sell ouzh Ar Gerveur e ranker gortoz ar bloaz 1882 kent gwelet an touristerezh o kemer e lañs.

Er bloavezh-se – 1882 – e voe digoret ul linenn hent-houarn etre An Alre ha Kiberen. Ur vrec'henn e oa al linenn-se eus al linenn vras a oa bet digoret er bloavezhioù

74 Gustave Flaubert ha Maxime Ducamp, *Par les champs et par les grèves*, Éd. Georges Charpentier, bet skrivet e 1847, hag embannet a-dammoù etre 1852 ha 1881.

1860 etre Pariz ha Kemper. Savet e oa bet al linenn vihan etre An Alre ha Kiberen diwar intrudu ministrerezh ar brezel – diwar abegoù strategel eta – ha diouzhtu e voe kemmet kalz buhez an enezourien ganti : talvoudus e oa da gentañ penn evit ar vartoloded a gemere roll war bagoù ar c’henwerzh, rak aesoc’h e oa dezho mont da bakañ porzh o ambarkamant : un dreizhadenn verr betek Kiberen, hag alese an tren betek An Oriant, Konkerne pe Sant-Nazer. Ar besketaerien a gavas ivez muioc’h a sav d’o marc’hadourezh er c’hêrioù ma tremene an hent-houarn drezo. Aesoc’h ha buanoc’h ivez e veze kaset d’an enezenn an dafar a bep seurt a veze implijet war ar chanterioù hag er friturioù : ar bilhoù-koad evit ar chanterioù sevel bagoù, ar vein evit an tisaverezh, ha kement a ranked “enporzhiañ” evit bastañ da ezhommoù ar vuhez pemdeziek. Betek neuze e veze treuzdouget an dafar-se e bourzh listri-dre-dan hag a rae an treizh eus An Alre, Naoned, Sant-Nazer pe An Oriant. Ar veajourien a felle dezho mont d’Ar Gerveur a ranke en em lestrañ war ar listri-dre-dan-se, bagoù diglet anezho, ha direoliek o eurioù treizh. Evit kaout un alberz eus doareoù an treizh hag an herbec’hiañ en enezenn d’ar mare-se, e kinnigan deoc’h lenn un arroud eus un dezrevell veaj graet e 1854 gant ur mezeg, an doktor Moreau :

« N’ouzon ket pe kelaouet fall e oamp bet, pe lorbet a-grenn hag a -zevri gant ar skritelloù o vrudañ uhel an troioù-bale war vor ; penaos bennak eo, lestrañ hon doa graet, e Sant-Nazer, e bourzh ur vag berranalet fredet gant kompagnunezh ar vordreizherien eus An Oriant. Un ehan a reas hor bag er Groazig, hag an treizh, e lec’h padout eizh pe nav eurvezh, a badas ouzhpenn trizek eurvezh. [...] Pa zegouezhis er Gerveur e oa leun leti ar C’henwerzh, an hini

nemetañ a zo, da'm soñj, e Porzh-Lae, ha lojet e voen en un ti hag a skoe war gaeoù ar porzh. Da ziv eur diouzh ar mintin avat e voen dihunet trumm gant ar safar a rae, dindan va frenestr, ar besketaerien a oa oc'h ober o fourchasoù kent mont war vor. An dud-se, 'm eus aon, evit bezañ ken serzh da ziv eur diouzh an noz, a dle mont da gousket abred⁷⁵ ! »

Kemm a reas buan an traoù avat, rak tregont vloaz war-lerc'h, e 1887 e voe embannet gant un den anvet Léon Trébuchet al levr-heñchañ kentañ evit an douristed a felle dezho mont da ober un droiad d'Ar Gerveur. Pa follennater al levrig-se e lenner e vez graet an ambarkamant a-benn neuze e Porzh-Maria, damdost da borzh-houarn Kiberen, e bourzh listri solut ha klet, evit un dreizhadenn a 50 munutenn hepken. En hañv e vez div veaj mont-ha-dont, unan diouzh ar mintin, hag unan all d'enderv, ha bep Gwener e vez un dreizhadenn betek An Alre zoken. Aesoc'h eo ivez an herberc'hiañ en enezenn, rak ouzhpenn *Leti ar C'henwerzh*, e-tal iliz Porzh-Lae, ez eus bet savet daou leti all war ar porzh. E kêr e kaver ivez ranndioù meurblet da feurmiñ. E 1901 e lenner en ul levrig-heñchañ all titlet *Le Guide pratique du voyageur* ez eus daou leti ouzhpenn, o-daou e Saozon, hag e vez teir beaj mont-ha-dont bemdez en hañv. Tamm-ha-tamm eta e vez frammet gwelloc'h degemer an dud a-ziavaez-bro a deu da weladenniñ an enezenn ha da dremen warni ur pennadig amzer. N'eo ket deuet c'hoazh mare an touristerezh yoc'hek, met n'emeur mui kennebeut e mare an touristerezh degouezhel hepken.

E-tro ar memes mare eo e weler an douristed pin-

vidikañ, ha tud uhel o renk er gevredigezh, c'hoant ganto da dremen muioc'h a amzer er Gerveur, ha da vevañ eno en o frankiz, o sevel eiltiez a-stroñs hag a-lorc'h pe o kempenn savadurioù hag a deu da vezañ kement ha kenkizoù. An hini vrudetañ a voe hep nep mar ar gomedianez Sarah Bernhardt. Prenañ a reas ur c'hreñv e Beg-ar-Polen e 1894, ha lakaat a reas kempenn anezhañ, gant ar soñj tremen eno, e-tal ar mor, he frantadoù diskuizh etre he zroiadoù c'hoariva e seizh korn ar bed. Nebeut amzer a-raok e oa bet lakaet sevel gant al livour aostraliat John Peter Russell ur c'henkiz bras e Bangor. Ennañ e tegemere arzourien vrudet : Rodin, Manet, Matisse. Dedenet e voe ar vourc'hizien ivez gant porzh Saozon hag an trowardroioù livus anezhañ, hag adal 1886 e voe savet dre eno paot a eiltiez.

Kement-mañ ne voe ket hep kaout ul levezon bennak war ekonomiezh Ar Gerveur, hag evit komz heñvel ouzh ar wirionez, lañs an touristerezh a zegouezhas mat-tre evit tud an enezenn, rak adal ar bloavezhioù 1920, tre betek ar bloavezhioù 1970, ez eas an obererezhioù hengounel bep a nebeut, ha diremed, war o c'hemend-all : da gentañ e voe dilezet gwarnizon Ar Gerveur gant an arme. E 1920 ez eas kuit ar soudarded, a oa bet o bezañs, a-hollviskoazh, un harp hag ur vammenn gorvoder evit an ekonomiezh. Peuzgoude, da-heul an enkadenn a deuas war an touneta, e voe serret ar braz eus ar chanterioù sevel-bagoù. Ar friturioù a voe serret ivez, hag ar bagoù sardineta bihan, diamzeret, ne voe ket savet reoù nevez en o lec'h, abalamour ma ne veze mui a sav d'ar pesked. Gennad ar pesketaerezh hengounel a voe enket-bras, hag an diskar-se a gendalc'has goude an eil brezel, hag en em astennas da gennad al labour-douar ivez. Nebeutaat a

reas kalz niver an atantoù, hag ar gouerien a rankas en em ober diouzh doareoù nevez. Evit peurdogañ ar bern e voe serret an ti-kastiz e 1977, ha dre-se e voe kollet kalz implijoù. Anat eo an diskar-se pa seller ouzh krommenn ar boblañsouriezh : etre 1900 ha 1954 e kollas Ar Gerveur 56% eus he foblañs. En XIX^{vet} kantved e oa bet pesketaerien eus Konk-Kerne hag eus Ar Gelveneg oc'h en em staliañ er Gerveur, kouerien eus Kreiz-Breizh ivez oc'h adkemer atantoù, micherourien hag artizaned o tont da labourat war ar chanterioù hag o sevel tiegezh en enezenn. An XX^{vet} kantved avat a voe kantved an divroañ, ar paouraat hag ar c'hoshaat, ha gwashoc'h e vije bet panevet da lañs an touristerezh.

N'eo ket souezh eta m'en em droas an enezourien, muioc'h-mui, war-zu an touristerezh : da-heul an touristerezh e vez labour war dachenoù a bep seurt : an dezougen, an herberc'hiañ, an debriñ war al lec'h, ar c'henwerzh a-vunut, an tisaverezh, ar sportoù-dour hag ijinerezh ar bageal, ar servijoù d'an dud... Lammgresk a reas an touristerezh goude an eil Brezel-bed peurgetket, met n'eus pesk hep drein, e-giz ma lavarar gant gwir abeg, ha gant al lammgresk-se e voe ivez, war ar memes tro, eilpennet kempouez kantvloaziek an enezenn : prenet e voe gant an douristed forzh atantoù, tiez ha tachenoù adeiladus, marc'had-mat-vil alies, ha kement-mañ a c'hoarvezas diwar-goust al labour-douar. Tamm-ha-tamm avat eo deuet an tiez-se, hag holl diez an enezenn da vezañ er-maez a briz, ha neb a fell dezhañ bremañ prenañ un ti er Gerveur, pe feurmiñ unan hepen, a rank bezañ pinvidik-mor. Anavezet mat eo an argerzh-se, ha kudenn al lojañ evit ar re baourañ, dre holl en arvor Breizh. Menegiñ a ranker ivez e vez aloubet Ar Gerveur

bep hañv gant bagadoù diniver a weladennourien hag a deu alies gant o otoioù pe gant busoù : devezhiennoù a vez ma konter ouzhpenn 30 000 den en enezenn, pa n'eus mui nemet 5000 den o vevañ er Gerveur a-hed ar bloaz. Ha c'hoazh, gwashoc'h a c'hallje bezañ bet : e 1987 e oa bet studiet raktres ur pont bras etre Kiberen hag Ar Gerveur (hirder : 13,260 km). Panavet m'eo bet dilezet ar raktres diboell-se e vefe bremañ, 'm eus aon, luziasennoù kirri hir-spontus war hentoù an enezenn !

Ur ger c'hoazh evit klozañ

Setu eta brastreset ganin kronik Enez-ar-Gerveur.
Penaos klozañ ?

An traoù o vezañ evel m'emaint, ar goulennoù a sav
bremañ eo ar re-mañ :

- Petra a deuio da vezañ Enez-ar-Gerveur er bloavezhioù a zeu ?

- Daoust hag e vo tu da reizhañ an digempouezhioù a zo anezho ?

- Daoust hag e vo an enezenn ur baradozig miret evit ur renkad a nebeut tud dreist-gwiriet, klozet warni hec'h-unan, evel inizi all – Briad peurgetket – ha takadoù arvo-rel ar vro abaoe m'eo bet pedet ar re baour da skarzhañ al leur ?

Tuet a-walc'h e vefen d'en krediñ, siwazh, rak anataet eo an treuzfurmadurioù don a zo bet enlouc'het o merk en enezenn abaoe fin an Eil Brezel-bed, ha n'eus tu ebet da ziarbenn emdroadur an hanter-kant vloaz tremenet.

Karout a rafen koulskoude, en em gavfe un istorour, a-benn kant vloaz ac'hann, da zislavaret ac'hanon !

Stagadenn

Deiziadoù pennañ istor Enez-ar-Gerveur hag inizi Houad hag Edig

-etre 10 000 ha 8000 kent J.-K. e teu Ar Gerveur da vezañ un enezenn, da-heul kresk live ar mor.

- e-tro 2000 kent J.-K. : sevenadur ar vein veur.

- 56 kent J.-K. : deroù beli ar Romaned.

- e-tro 280 : ar Saksoned a ra ar riñs war an enez.

- 406 : dibenn beli ar Romaned.

- V^{vet} / VI^{vet} kantved : donedigezh ar Vretoned. Diaze-
zañ a reont un iliz e Lokmaria hag ur manati e Bangor.

- 29 a viz Genver 565 : marv sant Weltaz e enez Houad.

- 905/910 : aloubet ha preizhet e vez Ar Gerveur gant
an Normaned.

- 940 : an Normaned a zilez an enezenn.

- e-tro 980 : ar briñsez Guineoden a vez roet dezhi Ar
Gerveur da argouroù da-geñver hec'h eured gant kont
Kernev.

- e-tro 1000 : sant Goustan e enez Edig.

- 1002 / 1011 : adsavet e vez iliz-parrez Bangor.

- 1006 : roet e vez an enezenn da venec'h beneadat
abati Redon.

- e-tro 1006 : diazezet e vez ur prioldi damdost da b/
Porzh-Lae.

- e-tro 1010 : adsavet e vez iliz Lokmaria.

- 1029 : laosket e vez an enezenn gant menec'h abati
ar Groaz Santel, e Kemperle.

- e-tro 1030 : diazezet e vez ur prioldi e Saozon.

- 1070 : diazezet e vez parrez Lokmaria.

- 1078 : diazezet e vez parrez Saozon.

- 1111 : deroù ar prosez etre abati Redon hag hini
Kemperle evit gouzout pehini eus an div abati a chomo
perc'henn war an enezenn.

- 1172 : fin ar prosez. An enez a chom e piaou abati
Kemperle.

- dibenn ar XIV^{vet} kantved : argadennoù al laeron-vor.
Ar savadurioù relijiel a vez distrujet ganto.

- dibenn ar XV^{vet} kantved : labourioù ratreañ war-dro
iliz-parrez Lokmaria.

- 1520 : labourioù war-dro iliz-parrez Bangor.

- 7 a viz C'hwevrer 1537 : François I, roue Bro-C'hall,
a ordren ma vo skarzhet holl annezidi an enezenn.

- 1549 : Henri II a ziviz e vo savet ur c'hreñvlec'h e
Porzh-Lae.

- 1557 : ar Spagnoled a glask aloubiñ an enezenn, met
diarbennet e vez o argad.

- 1560 : Enez-Houad a vez preizhet gant ar Saozon.

- 1567 : preizhet e vez Ar Gerveur gant ar Spagnoled.

- 1572 : gwerzhet e vez an enezenn da Albert de Gondi.
Ent-melestradurel ez eo an enezenn diwar vremañ ur var-
kizelezh

- 1573 : etre miz Ebrel ha miz Mae e vez ac'hubet Ar
Gerveur gant soudarded protestant ar c'hont de Mont-
morency.

Adstaget e vez gant al labourioù war-dro ar wikadell e Porzh-Lae.

- 1654 : ar c'hardinal de Retz a glask repu er Gerveur.

- 5 a viz Gwengolo 1654 : prenet e vez an enezenn gant Nicolas Fouquet.

- 1659 : diazezet e vez klañvdi Sant-Loeiz gant an itron Fouquet.

- 1659-1661 : terket e vez ar c'haeoù e Porzh-Lae dre urzh Fouquet.

- 5 a viz Gwengolo 1661 : harzet e vez Fouquet, ha karc'harriet dre urzh ar Roue. E wreg hag e ziskennidi a chom e piaou an enezenn.

- 8 a viz Mae 1668 : parrezioù Ar Gerveur, Houad hag Edig a vez staget ouzh eskopti Gwened.

- 1674 : e miz Even e vez argadet Ar Gerveur gant soudarded hollandat.

Diskaret e vez iliz kozh Sant-Jelan e Porzh-Lae.

- 1678 : iliz-parrez nevez Porzh-Lae a vez digoret d'al liderezh.

- etre 1683 ha 1689 : an ijinour-brezel Vauban a ra meur a chomadenn studi war an enez.

- 1693 : savet e vez bep a dour kreñv e Houad hag e Edig.

- 1696 : e miz Gouere, argadegoù an Hollandiz er Gerveur, e Houad hag e Edig.

- 1703 : listri-brezel saoz hag hollandat a c'hourdrouz Ar Gerveur.

- 1705 : ar Saozon a glask aloubiñ Ar Gerveur.

- 1706 : ar Saozon a glask aloubiñ Houad hag Edig.

- 1720 : dre urzh ar roue Loeiz XV e vez feurmet Ar Gerveur da Gumpagnunezh an Indez.

- 1723 : Ar Gerveur a dremen dindan beli ar feurmerien veur.

- 1728 : enseller meur ar pesketaerezh a ra un droiad ensellout er Gerveur, e Houad hag e Edig.

- 1746 : brasaet e vez klañvdi Sant-Loeiz.

E miz Here e teu ar Saozon d'ober un diskenn er Gerveur. Bombezenniñ a reont ivez Houad hag Edig.

- 1747-1780 : labourioù war-dro ar wikadell hag ar c'hreñvlec'hioù er Gerveur.

- 1759 : laosket e vez Ar Gerveur gant Breudoù Breizh. Emgann war vor *ar Gardinaled*, e-tal Kiberen.

- 1759/1760 : adsavet e vez kreñvlec'h Enez-Edig.

- 1763 : ac'hubet e vez Ar Gerveur, Houad hag Edig gant ar Saozon etre miz Mae ha miz Ebrel.

- 1765 : donedigezh an Akadianed er Gerveur.

- 1767 : frankaet e vez c'hoazh klañvdi Sant-Loeiz.

- 1768 : diazezet e vez gant Bruté de Réaumur un atant skouer er Gerveur.

- 1775 : kleñved-red ar vrec'h e Edig.

- 1789 : e miz Kerzu e vez krouet kumunioù Porz-Lae, Saozon, Bangor ha Lokmaria (Houad hag Edig a zo e dalc'h Porzh-Lae).

- 1795 : etre miz Gouere ha miz Kerzu e chom Ar Gerveur dindan gourdrouz al lestraz saoz.

E Houad hag en Edig e vez roet repu da c'hloazidi ha saveteidi dilestradeg Kiberen.

- 1800 : ar Chouant Pierre Guillemot, lesanvet *Roue Bignan*, a gav repu un nebeud devezhioù-pad e Houad.

- 1800-1814 : kaleadur kevandirel.

Kreñvaet e vez muioc'h c'hoazh Ar Gerveur, dreist-holl e Porzh-Lae.

- 1802 : Houad hag Edig a deu da vezañ parrezioù dizalc'h diouzh Porzh-Lae.

Adalek miz Mae e teu Ar Gerveur da vezañ un toullbac'h evit prizonidi politikel. Stourmerien vroadelour eus Haiti eo ar brizonidi kentañ.

- 1812 : terket e vez porzh Houad.

- 1822 : embannet e vez reoliadur Edig.

- 1825 : kleñved-red an derzhienn difoid e Houad.

- 1826-1836 : savet e vez tour-tan Goulfar er Gerveur.

- 1830 : degaset e vez gounidegezh ar maiz er Gerveur.

Diskaret e vez peulvanoù Runello

- 1830-1895 : Porzh-Lae a vez roet dezhañ an anv *Porzh-Philippe*.

- 1831 : savet e vez ar vilin-avel gentañ e Houad.

- 1832 : digoret e vez ur skol hidrografek e Porzh-Lae.

- 1839 : graet e vez soud en Edig.

- 1842 : savet e vez un tour-tan en Edig.

- 1845 : kleñvedoù-red e Houad : grip ha terzhienn-ruz.

Digoret e vez ar fritur gentañ er Gerveur.

Etre Even hag Eost e vez toullbac'het Karl Marx er Gerveur.

Diazezet e vez ar fritur gentañ e Porzh-Lae.

- 1847-1854 : savet e vez bep a greñvlec'h e Houad hag en Edig.

- 1847 : e miz Even e teu Gustave Flaubert d'Ar Gerveur.

- 1848-1857 : Auguste Blanqui, an dispac'hour, a vez toullbac'het er Gerveur.

- 1849-1880 : kreñvaet e vez an difennoù er Gerveur, dreist-holl war-dro gwikadell Porzh-Lae.

- 1850 : digoret e vez an archerdi kentañ er Gerveur, e Porzh-Lae.

- 1855-1858 : diskaret e vez an iliz roman kozh e Bangor, ha savet e vez un iliz nevez, an hini a c'haller gwelet bremañ c'hoazh.

- 1860 : deroù ar c'hehent dre vor reoliek etre Ar Gerveur hag an douar-bras (An Alre).

- 1868 : renevezidigezh iliz Lokmaria.

- 1870 : prizonidi brezel alaman a vez tolpet er Gerveur.

- 1871 : emsaverien ar Gumun a vez toullbac'het er Gerveur.

- 1875 : ar skrivagner gall Alphonse Daudet a dremen ur pennadig amzer e Houad.

- 1884 : un ti-kastiz evit fellerien yaouank a vez digoret er Gerveur.

- 1886 : al livour Claude Monet a ra ur chomadenn hir er Gerveur.

- 1861 : tour-tan Goulfar a vez tredanet.

- 1891 : diazezet e vez bep a gumun e Houad hag en Edig.

- 1893-1896 : savet e vez iliz Saozon.

- 1893-1922 : bep hañv e teu Sarah Bernard d'he c'henkiz er Gerveur.

- 1901 : d'an 23 a viz Even, oferenn diwezhañ e-barzh iliz kozh Sant-Jelan e Porzh-Lae.

- 1903-1910 : savet e vez iliz nevez Porzh-Lae.

- 1914-1918 : prizonidi brezel alaman a vez tolpet er Gerveur.

- 1940-1944 : ac'hubet e vez Ar Gerveur gant soudarded alaman.

- 1944 : d'an 23 a viz Du : ur rannad soudarded amerikan a ra un diskenn e Houad.

D'ar 14 a viz Kerzu : paotred ar strouezh war Houad hag Edig.

D'ar 15 a viz Kerzu : an Alamaned a argad Houad hag Edig.

- 1945 : d'an 3 a viz Mae : an Alamaned a argad Houad hag Edig adarre.

D'an 10 a viz Mae : dieubet e vez Ar Gerveur.

Digoret e vez un eil ti-kastiz evit ar fellerien yaouank.

- 1953 : digoret e vez un aerborzh e Bangor.

- 1961 : gwikadell Porzh-Lae a deu da vezañ un domani prevez, hag a vez lakaet war roll ar savadurioù istorel.

- 1963 : tredanet e vez tourioù-tan Houad hag Edig.

- 1977 : serret e vez an daou di-kastiz.

- 1980 : raktres ur pont etre Kiberen hag Ar Gerveur.

- 1988 : ur c'hehent dre vor nevez evit ar fred pounner etre An Oriant hag Ar Gerveur.

- 1999 : peñse an Erika.

Moulet e Breizh
Labour kaset war-raok penn-da-benn
e brezhoneg



Peurvoullet e ti Ouestelio (Brest)

Disklêriet hervez lezenn
kentañ trimiziad 2023